


Diocèse de
Quimper & Léon

Document numérisé en 2015

Hommage très-respectueux
de l'auteur,
Mme, pite.

BUEZ AN AOTROU SANT PAOL



BUEZ

38784

A N

AOTROU SANT PAOL

ESKOP LEON

TENNET EUZ AL LEVRIOU KOZ

GANT

An Aotrou KERNE

Beleg Sant-Jozef, e Kastel



BREST

Moulez A. DUMONT, ru Kleber, 11

—
1893

OUVRAGES DU MÊME AUTEUR :

Miz an Anaoun.

Le même, traduit en français par l'auteur :
chez Delhomme, Paris, 13, r. de l'Abbaye.

An Ofern, ar Zul hag ar Bloas.

Ar Vadiziant.

Istor or Mamm zantel an Iliz.

A paraître bientôt :

An Urs.

Ar Gonfirmasion.

IMPRIMATUR

D. SERRÉ, vicaire capitulaire
8 mars 1893.

BUEZ

AN AOTROU SANT PAOL

1

Peden ar skrivanié da zant Paol

Aotrou sant Paol benniget, e
maoun o vont da gounta d'am c'hen-
vroiz ker o puez burzuduz. Keit a ma
vezo ar bluen etre va daouarn, na
eanin ket d'o pedi ha d'oc'h aspedi
bemdez, hag aliesoc'h eget bemdez,
evit ma plijo ganeoc'h rei sklerijen
d'am spered hag err d'am bizied.

En em erbedi a rin ive ouz an eski-
bien santel a zo bet var o lerc'h o
terc'hel o plas, sant Jaoua, sant
Goulc'hen, sant Tenenan, sant Houar-
don, sant Gouesnou hag ar re-ziou.

Ne ankounac'hain ket kennebeut
goulen skoazel digant ar zent all hag
ar sentezed all euz a Leon.

Esper am euz da veza sikouret
ganeoc'h oll em labour. Me a zo o

mab pe o preur, e giz ma kerot. Me a zo Leonad ha ganet e Kastel, me a zo bet hadezet enn oc'h iliz-veur, Aotrou sant Paol; me n'oun ket eun divroad ac'hanon, hag em bezo bepred respet evidoc'h hag evit oc'h oberou talvouduz.

Ne gemerin kentel nemet digant Gourmonok hag an Tad Albert Le Grand; travoalac'h eo.

Gourmonok a yoa diouz Kastel, herves an doare anezan; diskuez a ra anaout Kastel, ha karout Kastel evel-doc'h, Aotrou sant Paol.

Great en deuz he leor er bloas 884, tri c'hant anter kant vloas benag goude o maro. Savet en deuz-hen divar eul leor all a yoa bet aozet kempenn gant eun diskib deoc'h, ha divar baperiou koz chomet a zilerc'h ar roue Childebert, ar roue Juduval hag ar c'hount Guitur, tud brudet euz oc'h amzer.

He skrid en deuz roet da lenn ha kinniget da C'hinvoret, a yoa eskop e Leon d'an ampoent; ha sur, ma ne vije ket bet guir ar pezh a zo ennan, Kinvoret n'en dije ket ellet he c'houzaon.

Kerkouls, Gourmonok a yoa manac'h e Landevennek, pa zanevellas oc'h istor enn eur fesoun ken dudio. Oan, e kouent Landevennek, e zoa neuze eur maread relijiused abil, hag enn ho fenn an abad Gourdisten, a yoa he-unan o paoues peurechui buez sant Guenole. Ar re-ma o dije miret ouz Gourmonok, ma vije bet red, da skigna geyer pe draou arvaruz.

Kement a fizians am euz enn Tad Albert Le Grand, evel e Gourmonok. An Tad Albert a zo ganet e Montroules, brema e zeuz tost da dri c'hant vloas; o prezeg eo bet enn oll barresiou euz a Vreiz; klasket en deuz piz ha diluyet an diellou prisiuz a gavet ker stank araog an dispac'h, enn ilizou, er c'houenchou hag enn eskoptiou. N'em euz ket aoun da fazia, en eur vont d'he eul.

Setu aze ta, Aotrou sant Paol, va daou encher; mez c'hui, eskob santel, c'hui hag al Leoniz a zo er Baradoz, va encho c'hoas kals guelloc'h, ma teurvezit va zelaou, ha skulia o pennoz var o mab karantezuz.

Evelse bezet great!

Bugealeach sant Paol.

Sant Paol a yoa ganet er bloas 490, enn eur c'harter a Enes-Vreiz hanvet Pen-ejen. N'oa neuze er vro nemet Bretouned hag eun dournad Romaned; mez prestik avoalac'h goude, ar Zaazon a yeas di da jom, hag Enes-Vreiz a c'halver abaoe Bro-Zaos.

Tad sant Paol a yoa eur Breizad evelomp, eur Breizad pinvidik zo ken hag a renk uel, he hano Perf. Nao vab ha teir verc'h en devoe; an daou brudet a anezo eo sant Paol, ha Sikofolla he c'hoar. Divar Zikofolla e vezo kount divezatoc'h.

Sant Paol, azalek he vugaleach, a ziskuezas beza douget d'an oll vertuziou, ha yaouankik oa c'hoas, pa c'houlennas kounje digant he dad, da vont enn eur skol gristen evit deski ar skianchou sakr. Perf en doa c'hoant d'he zerc'hel er gear, rag, o velet anezan ken devot, en doa aoun e zaje da veleg pe da vanac'h. Herzel a reas eur pennad ouz daelou ar c'hrouadur. Abarz ar fin gouskoude, aliet gant he

vignouned, e plegas a galoun vad da volontes Doue, hag oc'h en em strinka var bennou he zaoulin, e lavaras ar c'homzou kaer-ma :

« Aotrou Doue, Roue oll-c'halloudek, Mestr an env hag an douar, o trugarekad a ran da veza tennet euz va goenn eur bugel hag a bedo evidon hagevithedud, eurbugel hag a vezo eur skoazel d'he genvrois hag eur servirer leal d'o Majeste. »

Ha pa vije bet profet, n'en dije ket lavaret guelloc'h.

Paol n'oa nemet dek vloas d'an ampoent. Laouen bras o klevet he dad, e respountas raktal gant eur furnez dreist he oad :

« Va zad muya karet, emezan, me fell din diskulia deoc'h penn da benn ar mennos a zo eat doun e gueled va ene. N'e maoun ket e chal gant dimeziou, na gant danves hag enoriou ar bed. Sonj am euz d'en em rei oll d'am C'hrouer ec'harz an aoteriou, hag avrema e laoskan gant va breudeur va lod enn oc'h eritach. Travoalac'h a gasin ganen, pa gasan o pennos. »

E bues ar zent, e yeler meur a ini, ker yaouank ha sant Paol, oc'h ober

evel dan. Etre daouarn sant Ildud e voe lakeat.

3

Sant Paol e skol sant Ildud

Sant Ildud ne ket c'hoas ankouna-
c'heat ganeomp, patroun eo zo ken
e parres Lannildud. Eur brezellour
euz ar re vella oa bet enn he yaouan-
kis, ha roue Glamorgan en doa roet
dezan ar garg uella euz he bales.
Mez dre guzul sant Kadou, abad
Lan-Karvan, e kuiteas ar bed, ha
goude beza tremenet meur a vloas
o studia ar Skritur Sakr hag ar skian-
chou all, e teuas abarz nemeur da
veza unan euz an dud abilla euz he
amzer. Beleget e voe neuze gant sant
Jermen, eskob Oseer, a yoa eat evit
an eil guech enn Enes-Vreiz da ziar-
ben an eretiked, hag e savas eur
gouent e Pir var ribl ar mor, tost
da ini Lan-Karvan.

Er gouent-se, Ildud a zigoras eur
skol vras, evel ouz ar brasa skola-

chou a veler brema. Eveza m'oa
anavezet e pevar c'horn ar vro dre
he wizieges hag he zanteles, banden-
najou bugale ha tud yaouank a zire-
das eno da zelaou he genteliou.

Deski a rea dezo a bep seurt traou
mad da c'houzout, dreist oll ar pez a
zell ouz ar relijion, hag a gaver enn
daou Destamant hag e skridoù an
Tadou santel hag an Doktored euz
an Iliz. Eun ijin dispar en doa bet
digant ar Spered-Glan, evit entent
he-unan ha rei da entent d'he ziski-
bien kement a gare. Mez muyoc'h
c'hoas e poanie da ober euz ar bao-
tred a yoa fiziet ennan, kristenien
stard enn ho c'hreansou, hag aketus
bepred da zeveni ho oll deveriou a
gatlaked guirion.

Kelennet gant eun evelep mestr,
Paol ne zaleas ket da veza abil d'he
dro, ha da veza, ar pez a zo guelloc'h,
ken parfet hag abil. Skueriou dudi-
us en doa d'he vrouda. Rag eur maread
euz ar re a yoa asambles gantan e
skol sant Ildud, a deuas divezatoc'h
da veza gloar ar Vretouned hag eur
sklerijen evit an Iliz, dre ho deska-
dures hag ho vertuziou. Es-vian e

tiskuezent dija petra vijent eun der-
ves da zont, hag an eil a roe kaloun
d'egile.

Leveromp eur ger divar bevar
anezo, David, Gueltas pe Jildas,
Magloar ha Samson; kerkouls, ar
pevar-ma o deuz kendalc'het betek ho
maro da veza mignouned da Baol;
lod anezo a gavimp var on end, hag
abalamour da ze n'eller ket a grenn
ho leuskel a gostes.

4

Kamaladed sant Paol.

Sant David pe zant Divy a yoa
mab da zantes Nonna, ha breur da
zantes Ninnok; mervel a reas eskob
goude beza savet daouzek abati, hag
enoret e bet a viskoas gant ar Zaozon.
He vamm, santes Nonna, en em den-
nas da ober eur binijen rust e Dirinon,
e kichen Landerne.

Sant Jildas en deuz tremenet al
loden diveza euz he vuez enn eur
gouent, diou leo diouz Guened. Kals

menac'h a yeas eno da jom gantan,
ha reolennou kaer a roas dezo evit
ho zikour d'en em zantifia.

Prezeg a rea ive d'ar bobl gant
eun nerz birvidik, ha rebech a rea ho
dizurziou d'on tadou koz gant ardi-
seges eun Abostol. Skrivet en deuz zo
ken eul leor, hag a zo c'hoas etre on
daouarn, divar gual zarvoudou Breiz,
hag el leor-ze e lavare d'ar Vretouned :

« Mar deo reuzeudik o stad, ne
dlit tamall nemedoc'h oc'h-unan ; o
pec'hejou hag o puez fall eo o deuz
c'huezet enn oc'h eneb an tan euz a
vuaneges Doue. »

Abarz dont da vervel diouz kostes
Guened, en doa redet meur a vro da
zastum kenteliou ha skueriou mad e
leac'h all, da stourm ouz an eretiked,
ha da skigna an Aviel e mesk ar
bayaned. Great en deuz, dre ma zea,
eun niver bras a viraklou, ha goune-
zet milierou tud d'ar feiz.

Sant Magloar ha sant Samson a
yoa kindirvi, ha lakeat e voent ho
daou er skol gant sant Ildud; mez pa
voe echu he studi gantan, Magloar
a zistroas d'ar gear, ha Samson, er
c'hontrol, a yeas var eun da vanac'h.

Tad Samson o veza kuezet klanv,
 Samson a voe galvet var he dro.
 Kerkent a ma erruas, he dad en em
 gavas guelloc'h, hag a zonjas kuitad
 ar bed evel dan evit en em rei oll da
 zervich Doue. Samson a lakeas ive
 ar memes sonj e spered he vamm hag
 e spered eur yontr, eur vouereb ha
 tri gender dezan.

Sant Magloar a yoa unan euz an
 tri c'hender-ma, hag heulia a reas
 Samson ar rest euz he vuez, da genta
 enn he gouent, ha divezatoc'h pa
 zeas euz a Enes-Vreiz da Vreiz-vian
 pe Vreiz an douar bras, etre Sant-
 Briekha Roazoun. Sant Samson a voe
 hanvet eskob Dol er c'harter-ze, ha
 sant Magloar her sikouras da c'houarn
 he eskopti, ha da gelen var guirione-
 ziou ar feiz an dud a yoa ennan.
 Goude maro he gender, sant Magloar
 a gemeras he garg; mez abenn tri
 bloas e roas he ziles, hag e lakeas
 henvel sant Budok enn he blas, evit
 mont da ober he ermitach eun anter
 leo diouz Dol.

5

**Pe seurt skol a rea sant Ildud? —
 Sant Samson o parca eur c'hrouadur
 flemmet.**

Mar deo guir ec'h anavezer eur
 vezen diouz ar froues a zoug, Ildud a
 dlïe beza eur mestr eb he bar, p'en
 deuz savet ker brao pemp krouadur
 evel ar re-ma. Ar re all n'oant ket
 disevel diouto, rag ne veze dalc'het
 er skol nemet bugale fur.

Oll e pleustrent var ar beden, ar
 yun hag ar studi. Pa vezent skuiz
 o pedi hag o studia, e leac'h kas anezo
 da c'hoari, sant Ildud, evit aveli ho
 fenn, a verke dezo eun tam labour
 benag er parkeyer.

Evellen edo he zonzj : « An dud a
 zo brema var an douar, emezan, a zo
 gual douget d'ar brezel, ha mad e ve
 rei dezo eur pleg all. Evel-se ta, ne
 ket avoalac'h din renta va diskibiën
 vertuzus ha guizieq; bez e rankan ho
 boaza da ober eun dra benag talvou-
 dus euz ho c'horf hag euz ho daouarn.
 Micher ar c'houer eo kaera micher a
 zo; dre ar vicher-ze e c'hounezer bara

d'an oll, hag ec'h en em zalc'her kals guelloc'h an-unan ; ar vicher-ze a zes-kin dezo. Unan a zaou : pe e chomint er bed, pe e zaint da veleyen ha da venac'h. Ma chomont er bed, e vouizint penaos implija mad ho amzer enn onestis ; ha ma en em roont da Zoue, e raint da vugale all var va lerc'h ar pezh o devezo guelec'h ac'hanon oc'h ober dezo. »

Trugarekâd a ellomp sant Ildud var ar poent-se, ha trugarekâd ive ar venac'h o deuz kemeret skuer varnan, pe o doa koumanset enn he raog. Hi eo a zo bet penn-kaos ma ne ket bet dilezet a grenn labour an douar, ha kenteliet o deuz ho c'henvrois var an doare deread da entent ouz an dreva-jou. Sant Ildud eo memes, diouz ma kounter, an ini en deuz roet d'on tadou koz an alar kenta.

Evel m'en dije bet c'hoant an Aotrou Doue da ziskues pegement e plije dezan mennos ar zant, ar viraklou a c'hoarvezas enn he gouent, epad m'edo sant Paol enni, a denn oll da labourou an douar. Setu ama unan anezo :

Eun derves m'edo ar skolaerien o

c'houennad eur parkad e
trik a voe flemmet gant e
Dija oa prest da vervel, ke
oa. Petra o divije lavaret he
ma vije maro !

« Na kas, emezo, bugale keryaouank d'ar parkeyer ! Daoust hag evit kempenn he zouarou da Ildud on deuz fiziet or bugale ennan ? »

Mez ne falvezas ket da Zoue leuskel abek gant an teodou fall da damall he zervicher. Samson a yoa var al leac'h d'an ampoent, hag enn eun taol e pareas ar c'hrouadur oc'h ober sin ar Groas var he c'houli.

Sant Paol a voe test euz ar burzud-ze. Bremaik e velo eur burzud all brasoc'h, hag e koumanso he-unan da ober burzudou.

6

Ar mor o vont var adre.

Sant Paol hag he vignouned bian a gleve alies ho mestr oc'h en em glem divar n'en doa ket avoalac'h a

d'an oll, hag ec'h en em zalc'her kals guelloc'h an-unan ; ar vicher-ze a zes-kin dezo. Unan a zaou : pe e chomint er bed, pe e zaint da veleyn ha da venac'h. Ma chomont er bed, e vouizint penaos implija mad ho amzer enn onestis ; ha ma en em roont da Zoue, e raint da vugale all var va lerc'h ar pez o devezo gullet ac'hanon oc'h ober dezo. »

Trugarekâd a ellomp sant Ildud var ar poenti-se, ha trugarekâd ive ar venac'h o deuz kemeret skuer varnan, pe o doa koumanset enn he raog. Hi eo a zo bet penn-kaos ma ne ket bet dilezet a grenn labour an douar, ha kenteliet o deuz ho c'henvrois var an doare deread da entent ouz an dreva-jou. Sant Ildud eo memes, diouz ma kounter, an ini en deuz roet d'on tadou koz an alar kenta.

Evel m'en dije bet c'hoant an Aotrou Doue da ziskues pegement e plije dezan mennos ar zant, ar viraklou a c'hoarvezas enn he gouent, epad m'edo sant Paol enni, a denn oll da labourou an douar. Setu ama unan anezo :

Eun derves m'edo ar skolaerien o

c'houennad eur parkad ed, eur paotrik a voe flemmet gant eun aer viber. Dija oa prest da vervel, ker kuenvet oa. Petra o divije lavaret he gerent, ma vije maro !

« Na kas, emezo, bugale keryaouank d'ar parkeyer ! Daoust hag evit kem-penn he zouarou da Ildud on deuz fiziet or bugale ennan ? »

Mez ne falvezas ket da Zoue leuskel abek gant an teodou fall da damall he zervicher. Samson a yoa var al leac'h d'an ampoent, hag enn eun taol e pareas ar c'hrouadur oc'h ober sin ar Groas var he c'houli.

Sant Paol a voe test euz ar burzud-ze. Bremaik e velo eur burzud all brasoc'h, hag e koumanso he-unan da ober burzudou.

6

Ar mor o vont var adre.

Sant Paol hag he vignouned bian a gleve alies ho mestr oc'h en em glem divar n'en doa ket avoalac'h a

frankis evit ar maread skolaerien en doa da loja ha da zerc'hel enn dro dezan.

« Enn tu-ma d'ar gouent, emezan, n'euz nemet reyer, ha n'ellomp ket en em astenn; enn tu all e ma ar mor, hag a deu bemdes da grignad, da zribi, da lounka lod euz ar pezh a jom ganeomp. Ne vezo ket pell e kuezio an ti enn he boul; rag, her gouzout a rit, bugale, bep tro ma vez reverdi bras, e vezomp anter vezuzet gant an dour, hag e vez an arrebeuri var neun. Petra deuimp da veza ma vez diskaret an ti, hag e pe leac'h sevel eun ti neves? Pa jomfe zo ken an ti enn he za, ne vemp ket vell, ma kresk c'hoas an niver ac'hanoc'h. »

— « Va zad, a respontas Paol pe unan euz ar vugale, pedomp an Aotrou Doue, hag en devezo trues ouzomp; goulennomp digantan ma viro ouz ar mor da zont ken uel, ha ma losko ganeomp eur riblennad aod, da c'hounid ennan ar pezh on deuz ezom evit he zervicha dizamant ha dizoursi. »

— « Mad a livirit, va mab, eme sant Ildud. Pedomp an Aotrou Doue;

eun tad karantezus eo, ne zivouero ket he grouadurien e kreiz an anken hag an dienes. »

Mont a reas neuze gant he skolaerien d'ar japel, hag eno, daoulinet d'an douar, e rejont oll asambles eur beden ir ha c'huek, gant eun humilite ar vrasa. Goudeze, e zejont enn eur vanden etrezek an aod, a yoa goloet oll gant ar mor; Ildud a gerze er penn araog, eur vaz gantan enn he zourn.

Ogen, dre ma tostea, ar mor a dec'he dirazan, e giz p'en divije bet aoun rag ar vaz. Pa voe eat pell avoalac'h, hed mil bas pe var dro, ar zant a zifennas outan, a berz an Aotrou Doue, en em astenn muy larkoc'h aviziken. Ar mor a zentas, hag a c'houdeves, e lezas ato eun tachad brao euz an aod dizolo etre an ti skol hag hen. Lenn a reomp miraklou evel he-ma e bues sant Glegor ar Burzuder, hag e bues meur a zant all.

Al laboused laer. — Euzud kenta sant Paol.

Sant Ildud a zistroas d'ar japel da zrugarekâd Doue gant he skolaerien, ha lavaret a reas dezo :

« Arabad deoc'h sonjal, bugale, eo va fedennou a ve bet selaouet, mez o re. Me a zo eur pec'her keas, ha n'oun ket din e safe va mouez beteg tron an Oll-C'halloudek. C'hui avad oc'h euz eur galoun dinam, ha kaloun dinam eur c'hrouadur a vez hepred tostik da galoun or Zalver. »

Paol hag ar vugale all a respountas :

« Nan, va zad, hen anzao a reomp, dre o meritou ebken on deuz bet eur merk ken anat euz a vadeles an Aotrou. »

Hag e chomjont eur pennad d'en em rendael enn eun doare dudius, an eil o tamall d'egile an taol kaer o doa great asambles. Sant Maor ive diveza-toc'h, goude bale var an dour evel var ar zeac'h da denna Plasid euz eur ster, a zistaole var zant Beneat he vestr an

enor a deue dezan euz eun dra ken souezus; ha sant Beneat d'he dro a zistaole an enor var he ziskib yaouank. Morse ar zent n'o deuz fizians enn ho zanteles, morse n'int bet klevet oc'h en em fougeal euz ar grasou talvoudus a resevent.

Pa deuas ar mare, sant Ildud a lakeas terri an douar en doa gounezet var ar mor, hag ada greun ennan. Eun eost kaer a zavas, kolo ir, pen-nou stank ha founnus, ma zoa eun drugar sellet oute. Mez, siouas ! dre ma zareve an ed, al laboused mor a nije di a strolladou da laeres. O velet an dra-ma, Ildud a gargas he skolaerien da zivoall an dachen noz-deiz, peb ini d'he dro.

Eun nosvez m'edo tro sant Paol, he-ma en em roas da gousket, hag epad he gousk, al laboused a reas kals drouk er park. Sant Paol, o veza diu-net, a gemeras kement a aoun, ma chomas daou zerves eb mont dirak he vestr.

D'an trede derves, mintin mad, goude beza lenvet gualc'h he galoun, ha pedet guella ma elle, e savas euz he doul kuz, hag e roas eun taol

lagad enn dro dezan. Guelet a reas he oll gamaladed bodet asambles oc'h ober ho labour, sant Ildud pell diouto. Enn eur redaden e zeas d'ho c'haout, hag e lavaras dezo : « Pedomp an Aotrou Doue da rei deomp ar c'hras da gaout peoc'h diouz al laboused-se. »

Kerkent ec'h en em daoljont d'an daoulin, hag echu ho feden ganto, e rejont an dro d'ar park, e tastumjont al labouset enn eur vanden, hag e kasjont anezo d'ar gouent evel eur vanden denved.

8

Al laboused laer losket da nijal kuit.

Sant Ildud a yoa o pourmen er porz.

« Setu ama, eme zant Paol dezan en eur erruout, al laeroun o deuz great kement a zrouk enn o park. Ho digas a ran deoc'h, va zad, evit ma root dezo ar binijen a gerot. »

Sant Ildud, mantret oll dirak eur seurt mirakl, a jomas eur pennad eb

komz na finval, o trugarekâd Doue ennan he-unan, hag o klask koumpren petra deuje eun evelep krouadur da veza. Paol a zounjas n'oa ket kountant he vestr, abalamour n'en doa ket divoallet mad an eost, hag en eur gueza d'an douar, e lavaraz gant fors daelou hag irvoudou :

« Va zad, enn han'Doue pardounit din ; n'em euz ket great espres ; an diaoul eo en deuz digaset din eur c'houisk milliget, ha n'em euz ket ellet herzel outan. »

— « Va mab, eme zant Ildud, savit ac'halese. Nan, ne ket an diaoul en deuz digaset ar c'houisk-se deoc'h, mes an Aotrou Doue, a felle dezan diskues petra oc'h-c'hui. Losket en deuz ac'hanoc'h d'en em rei da gousket, evit kaout an tu da lakâd splamm dirag an oll he garantès evidoc'h hag o kalloud burzudus. »

— « O ! ne ket me, a respountas sant Paol, am euz great ar burzudma ; va c'hamaladed eo. Pedet o deuz an Aotrou Doue, hag an Aotrou Doue en deuz ho zelaouet. »

— « Difennet eo, va mab, eme zant Ildud adarre, lakâd ar goulou dindan

ar guele, ha kuzet on talanchou. Dalc'hit ar pezh a zo deoc'h. Evidon-me a vel sklear e vo poent din, ne vo ket pell, en em denna a gostes d'en em brepar da vont dirag va Barner. Ennoc'h em euz sonjet da zerc'hel va flas, hag azalek an derves irio e roan deoc'h va c'houent gant an douarou a zo enn dro dizi. C'hui a gelenno ar vugale-ma var va lerc'h, ha guelloc'h eget m'am euz great a reot. »

Sant Paol a respountas en eur grena gant ar spount hag an doujans :

« Penaos e fell deoc'h, va zad, e kemerfen o kouent diganeoc'h ? N'em euz ket dioueret eritach va zud evit en em garga a draou all. Biken, biken ne zentin ouzoc'h var gementse. »

— « Guelet e vo divezatoc'h, eme ar zant. Mez da genta e rankomp entent ouz al laboused-ma. Petra livirit ober dezo ? »

— « Peguir her goulennit diganen, va zad, eme Baol, me gav din ec'h eller ho leuskel da vont kuit. Desket oc'h euz deomp n'eo ket mad paea an drouk gant an drouk. Kerkouls,

diskues a reont dre ho c'han truezus ha flour, o deuz keuz d'ar pezh o deuz great, ha ne glaskint muy noazout d'o pugale. »

— « Kent aze, laoskomp anezo, eme ar zant. » Hag ar zant a venni-gas al laboused. Ar re-ma a nijas raktal var zu ar mor, eb distrei morse aviziken.

9

Sant Paol o sonjal mont da ermit

Komzou sant Ildud a yoa eat doun e spered sant Paol. Mil aoun en doa da veza lakeat e penn ar gouent, hag a end all, ec'h en em zante galvet d'eur vuez strisoc'h c'hoas eget an ini a rene er skol, e toues kement all a dud.

Lennet en doa er Skritur sakr ar geriou-ma euz ar profet David : *Elon gavi fugiens et mansi in solitudine* ; tec'het am euz pell diouz ar bed, hag eat oun da jom enn dezert (Ps. LIV, 8).

Ar geriou-ma en doa lennet ive : *Factus sum similis pelicano solitudinis* ; setu me deuet da veza evel ouz ar pelikan enn dezert (Ps. ci, 7). Hag e sonje dezan oa bet skrivet ar geriou-ze evitan.

Avi en doa ouz sant Anton a yoa en em dennet enn eur vro c'houez da ober pinijen, da vedita misteriou kaer ar relijion, ha da gerzet bemdes larkoc'h larka var end ar zanteles.

« Petra res-te ama, Paol, a lavare dezan he-unan ? Ankounac'heat ec'h euz istor Mari ha Marta ? Marta a yoa prez varni o servicha Jezus hag an ebestel. Mont ha dont a rea dre an ti eb eana, epad m'edo Mari azezet ec'harz treid or Zalver, o selaou he brezegennou dudius. Erfin, ec'h en em glemas ouz Jezus : « Mestr, emizi, ne velit-hu ket e lez va c'hoar an oll labour ganen da ober ? Kemennit dizi-ta sevel d'am zikour. » Mez Jezus a respountas : « Marta, Marta, tregas a gemerit gant kals a draou. Ogen, n'euz nemet eun dra hag a ve red. Mari e deuz choazet al loden vella, hag al loden-ze nevezo ket lammet diganti. » — Paol, Paol, klevet ec'h euz ? N'euz

nemet eun dra hag a ve red. Perak chom pelloc'h er skol-ma ? Mad eo a dra zur beza desket, mad eo ive deski d'ar re all. En em zavetei da gentagouskoude. Te n'out ket great evit beva e mesk an dud. Ar veuleudi a rafet ac'hanot da golfe. Kerz en eul leac'h distro benag, evit beza da unan gant Doue hag an elez ; beac'h avoalac'h a po c'hoas o c'hounid da gurunen. »

Kaer en doa stourm ouz ar men-nosiou-ma, e redent noz-deiz enn he benn. Eun droyad n'oa en em roet da gousket gant ar skuister, e velas skleroc'h enn he ure petra a c'houlenne Doue digantan ; ha pa ziunas, e zeas var eun da gaout sant Ildud.

En em strinka a reas da dreid ar zant, hag e kountas dezan, eb nac'h netra, ar pezh a dremene biou he galoun, hag ar pezh en doa c'hoant da ober.

Ar zant a jomas eur pennad da zonzal, ha goude e respountas.

Kenteliou sant Ildud.

« Va mab, emezan, pe zo ken, va breur muya karet, araog bep tra e rankomp gouzout e teu or mennosiou euz a deir zoursen, euz a Zoue, euz an diaoul, pe euz or spered on-unan.

» Euz a Zoue e teuont, pa blij dezan skigna he c'hras enn on ene, evit or sklerijenna, evit on alia, evit or c'hennerza da bignad uelloc'h er zan-teles.

» Euz ac'hanomp e teuont, pa ne glaskomp nemet heulia on ioulou fall, ha pa roomp re a frankis d'or faltazi.

» Euz an diaoul e teuont, pa vezomp touellet gant an ourgouil pe an dizesper, pa gavomp eas ar pezh a zo dies ha dies ar pezh a zo eas, pa ne velomp ket an traou e giz ma maint. An diaoul a zo fin; hag alies, evel ma lavar sant Paol, o patron deoc'h, e kemer ganeomp, evit on troumpla guelloc'h, neusiou ar sperejou éurus. Na dit ket, eme an abostol, da fiziout

e peb seurt sperejou, mez amprouvit an oll sperejou da c'houzout hag aberz Doue e teuont.

» Me gav din, ha guir, eo Doue a zo ouz o kelen, rag meur a desteni am euz bet euz ar garantez oc'h euz evitan, hag euz ar garantez en deuz evidoc'h. Gouskoude pedit, ha pedit a greiz o kaloun; goulennit sikour euz an env, goulennit dreist oll ma kendalc'hoc'h er zantimanchou oc'h euz brema.

» Keuz am bezo deoc'h, va mab; poanuis e vo din o tivoeret; varnoc'h e kounten em c'hosni da ren ar skol var va lerc'h. Ne vank netra deoc'h evit ober kerkouls ha guelloc'h ha me. Abil bras oc'h deuet da veza, petra benag ma zouc'h yaouank, ha krenvoc'h eo c'hoas o vertuziou eget o guizieges. N'euz fors, mar de bolontes an Oll-C'halloudek o tenna diganen, bolontes an Oll-C'halloudek bezet great!

» Da c'hortos, chomit eur pennad ganeomp; bezit eur skuer evit an oll, evel ma zouc'h bet beteg-hen; pleustrit muyoc'h muy var ar yun, ar beden hag ar studi; ha pa vezo deuet

ar mare, mar fell d'or Salver benniget o kas e leac'h all, ne ket me a viro. »

Paol, kel laouen hag an eol, a drugarekas he vestr, hag a reas kement a yoa bet kemennet dezan.

11

Sant Paol o kimiada diouz sant Ildud.

Abenn eun nebeut dervesiou, 'sant Ildud her c'halvas da zont d'he gaout, hag evellen e koumsas outan :

« Paol, va mab, va breur ha va mignoun, ato e ma ar memes sonj enn ho spered ? Ne ket chenchet o mennos ? »

— « Nan, va zad, eme Baol, ne ket chenchet va mennos ; me gav din zo ken eo kreski bemdes a ra. »

— Mad, Paol, eme zant Ildud, va c'hrouadur muya karet, kerzit el leac'h ma zouc'h galvet gant Doue ; kounje a roan deoc'h. »

Paol en em strinkas d'an douar enn eur lenva :

« O va mestr, emezan, penaos ec'h ellin-me merka deoc'h va anaoudegas vad ? C'hui a zo bet e peb amzer eun tad evidon, ha brema hen diskuezit skleroc'h eget biskoas, peguir ec'h en em ankounac'hait oc'h-unan evit ober plijadur d'o mab. »

« — Paol, emezant Ildud, savit ac'halese ; ne ket brao da dud kalounek eveldoc'h skulia daelou evel eur plac'hik. Savit, Paol, savit ac'halese. »

« — Ne zavin ket, eme Baol, ken o pezo va benniget. »

Sant Ildud a astennas neuze he zourn var benn he ziskib, hag en eur ober sin ar Groas varnan, e lavaras :

« Doue r'o pennig, va mab, evel m'o pennigan ive, daoust ma ne zoun nemet an disterra euz ar bec'herien. Selaout bepred moues o krouer. Mar fell dezan ec'h echufac'h o puez enn eun ermitach, kemerit skuer var an ermited santel a zo bet hag a zo, dre ho meritou, eunenor hag eur skoazel evit an Iliz. Mez mar galv ac'hanoc'h divezatoc'h da brezeg an Aviel er broyou pell, na zinac'hit ket ranna gant o preudeur an donezonou kaer oc'h euz resevet. Ha brema, kenavo,

va mab, kenavo er Barados. O pe sounj enn o pedennou euz ar paour keas Ildud koz, en devezo, unan euz an deisiou-ma, da renta kount d'he Varner euz he oll oberou. »

Paol a zavas. An daou zant en em vriatas eb lavaret ger, hag a gimiadas an eil diouz egile. Paol a yoa c'huezek vloas d'an ampoent; c'huec'h vloas benag oa bet e kouent sant Ildud, ha n'en doa ket kollet he amzer.

12

Sant Paol enn he ermitach.

En em denna a reas en eur plas distro, hag eno e savas c'ul lochennik evitan, hag eun tamik chapel evit an Aotrou Doue.

An deiz hag an darn vuya euz an noz a dremene o pedi, o lenn ar Skritur sacr, hag o kastiza he gorf dre ar rusta pinijennou. Ne zrebe morse a gik, ha na eve morse a vin, eun tam bara seac'h, gant eur c'hreunennik

olen hag eur banne dour, setu aze he vevans ordinal; ha c'hoas, ne rea nemet eur pred bep daou pe dri der-ves. D'ar zul evelato, ha d'ar goueliou bras, e trebe ar peskedigou en doa ellet paka, pe eun tam lugumach benag.

Ar vrud euz he zanteles en em skingnas buan er vro, ha bandennajou tud a zirede euz a gement korn da c'houlenn digantan aliou pe bedennou. Lod a c'hoanteas zo ken kemeret skuer dioutan, ha tremen an nemorant euz ho buez o pedi Doue hag oc'h ober pinijen.

« N'oun ket, eme zant Paol, evit miret ouzoc'h da zont em c'hichen; mez ama, epad ma vezin, ne vezo savet kouent ebet d'on loja oll asambles dindan ar memes toen. N'em euz ket kuiteat abati va zad benniget Ildud, evit mont enn eun abati all. Ermit a fell din beza, hag ermit e chomin keit a ma plijo gant Doue. Ma zere deoc'h va doare da veva, dresit bep a lochen, hag e reot enni ar pezh a ran va-unan em ini. »

Daouzek den yaouank a zentas outan, ha kounje a roas dezo da zont

d'he velet bep sul, ha da gemeret ho fred an derves-ze gantan. Epad m'en em gavent asambles, ne veze kount etrezo nemet euz a vadeles Doue, gloar ar Baradoz hag eurusted ar zent. Trugarekâd a reant an Aotrou d'ho beza lammet euz a greiz fallagries ar bed, hag ec'h en em gennerzent an eil egile da zével uelloc'h er vertuziou. Ne nac'hent netra, fall ha mad, euz ar pezh a c'hoarveze ganto, pe aberz Doue, pe aberz an diaoul, pe euz ho fers ho-unan. Ar re zempla o doa kuzul ha sikour digant ar re grenva; oll avad ec'h anavezent Paol evit ho mestr.

13

Sant Paol beleget.

Mignoured sant Paol o doa heuliet evel dan skol sant Ildud, hag oll oant desket mad var gement a rank eur belek da c'houzout evit seveni he zevel. Ini ebet anezo gouskoude n'en doa resevet an Ursiou; ermited oant,

ha netra ken. Mes eskob ar vro, eskob Guikastel, a glevas hano hag euz ho guiziegezh hag euz ar vez santel a renet; kear Guikastel a reer brema Guinchester anizi.

An eskob-ma a zonjas oa pec'hed leuskel tud ker galloudus e giz ma oant, hag a lakeas enn he benn ober beleven anezo. Sant Paol a gawe tenn plega dezan; aoun en doa, en he humilite, ne vije re bounner evit he ziskoas eun evel pe karg, hag an daouzek all o doa kement a spount hag hen.

Eveza m'oant boaz da zouja pastored an Iliz, e sentjont abars ar fin, hag e voe roet dezo an oll Ursiou an eil goude eben d'ar mare deread. Beleget e voent asambles er bloas 512, ha goude beza kanet ho Ofren nevez e Guikastel peb ini d'he dro, e tistrojout d'ho ermitach. Paol n'en doa neuze nemet daou vloas var-nuguent; ma vanke dezan an oad, ne vanke ket ar furnes.

Doue ne zaleas ket da ziskues perak oa falvezet dezan e vijent beleven. Enn tu all euz a Enes-Vreiz, e zoa eur roue galloudek meurbed, ar roue

Mark, hag a goumande var beder vro. Payan oa c'hoas evel he zujidi, mez ar pezh en doa klevet divar benn sant Paol a roas dezan eun ioul birvidik da anaout ar relijion gristen. Kannaded a deuas euz he berz da gaout ar zant, evit he bedi da zont enn he rouanteles da brezeg an Aviel gant he zaouzek koumpagnoun.

14

Sant Paol o prezeg an Aviel e rouantelez Mark.

Paol, ha kerkouls an daouzek all, a gare kement ho ermitach, ma n'o doa ken c'hoant var an douar nemet da beurechui ho buez ennan. Gouskoude, ne gredjont ket enebi ouz ar pezh a zeblante dezo beza bolontez Doue, ha setu hi enn end. Digouezout a rejont e kear Banhed, el leac'h ma ma brema bez ar roue Mark, ha digemet e voent gant an oll, evel Jezus-Krist hag he zaouzek abostol enn ho flas.

Raktal e stagjont d'al labour, ha dre ho skueriou hag ho burzudou, muyoc'h c'hoas eget dre ho frezegen-nou, e c'hounesjont d'ar feiz ar roue Mark, ar pennou bras euz he rouanteles, hag ar bobl a bez.

Seiz vloas benag e chomjont eno ; rag n'oa ket avoalac'h evito beza great kristenien euz an dud-ze ; c'hoant o doa ive d'ho starda enn ho c'hrean-sou, d'ho boaza da lezennou an Iliz, da blanta ken doun enn ho spered kenteliou an Aviel, ma ne vije ket eaz aviziken ho dic'hrizienna.

Da lod ne zeskent nemet just an deveriou a zere ouz bep den fidel ; da lod all, d'ar re a gave dezo a yoa galvet da vont uelloc'h, e tiskuezent petra c'houlén or Zalver digant eun ene parfet. Meur a blac'h yaouank, meur a intanves en em vouestlas d'ar chastete, ha kouenchou leanezed a voe digoret evito. Kalz goazed a reas kement all, hag herves ma plije dezo, e vezent dastumet a vandennajou er memes abati, pe laosket da veva ama hag aount, pell diouz an trouz, e peb a ermitach. Ar re-ma, goazed pe verc'hed, skignet dre ar

vro, a yoa evel soudarded euz an dibab, lakeat e penn ar re all d'ho alia, d'ho c'hennerza, d'ho gourdrous, mar doa red, ha da viret outo bepred na deufent da ankounac'had promesaou ho badiziant.

Rouanteles Mark a voe chenchet neat gant an trizek abostol benniget; ne glevet enni nemet meuleudiou Doue, ne velet enni nemet kristenien kalounek, aketus da zervicha guella ma ellent Krouer an env hag an douar.

15

Sant Paol goulennet da eskob gant ar roue Mark.

Pa voe renket an traou e giz m'oa dleet, sant Paol a reas he zonzj da zistrei d'he ermitach koz. Eur zonzj all avad a yoa er roue Mark. Hag hep dont da gaout ar zant, ha lavaret dezan :

« Va zad, n'eo great nemet an anter euz al labour, peguir n'on deuz eskob ebet. C'hui a vezo on eskob.

Mont a raimp asambles d'en em glevet gant an eskibien all euz an enezen, hag e resevoc'h diganto ar c'haloud a vank deoc'h. Neuze me a varvo dizoursi, pa vezin sur e chomo var va lerc'h eur Pastor evel doc'h, gwest da ober beleyen neves, ha da genderc'hel ha da greski c'hoas ar vad oc'h euz great en on foues. »

Paol a deuas tenval he vijas, ha ne respountas ger.

— « Arabad deoc'h beza nec'het, va zad, eme ar roue Mark adarre. Ama ne vezo refuzet netra deoc'h, nagenor, nag arc'hant. M'o peuz ezom douarou da zével ilizou, parresiou ha kouenchou, e ma va oll rouanteles etre o taouarn. N'o pezo dismegans ebet digant den; an oll a zento ouzoc'h, ha me da genta. »

— « Va mab, eme zant Paol, Doue a voar e ven prest da ginnig dezan va buez evit o silvidiges ha silvidiges an disterra euz o sujidi; a end all, ne maoun ket e chal gant madou ar bedma. Mez eun dra a c'houlennit diganen ha n'oun ket evit he rei deoc'h, a briz ebet, va ene, va zilvidiges vanan. Ne veritan ket beza eskob, re

bounner eo ar garg, en em goll a rafen. Klaskit eun eskob el leac'h ma kerot. Evidon-me, guelloc'h e ve ganen tremen ar rest euz va amzer var ar mor, e kreiz ar spountusa darvoudou, eget kemeret eur beac'h ha n'ellan ket dougen. »

Ar roue Mark, kounnaret oll, en em dennas enn he bales, ha Paol a yeas var êun d'an iliz, d'en em erbedi ouz Doue hag ar zent, evit kaout sklerijen var ar pezh en doa da ober.

16

Eun Eal a lavar da Baol mont enn eur vro dianavezet gantan.

He beden a badas keit hag an noz. Da c'houlou deiz, eun Eal a ziskennas euz an env, hag a gomzas evellen outan :

« Paol, arabad eo deoc'h dale ken e rouanteles Mark. Pignit var eur vag gant an daouzek beleg all, treuzit ar mor bras eb aoun, ha na eanit ket da gerzet dirazoc'h, beteg ma

vezoc'h en em gavet enn eur vro merket deoc'h gant Doue. Eno e chomoc'h da vervel, hag e reoc'h abars mervel kalz froues enn eneou. »

Ar zant a drugarekeas an Oll-C'halloudek da veza her c'helennet ker brao, ha raktal e zeas da ziskulia d'he vignounet ha d'ar roue kement a yoa bet gourc'hemennet dezan gant an Eal.

Eb mont pelloc'h, daoust ha ni, ken etrezomp Leonis, ne drugarekaimp ket ive an Oll-C'halloudek euz eur burzud ken talvoudus ? Evidomp eo bet great ar burzud-ze, ha kalz burzudou all. Or bro-ni eo a zo bet merket da zant Paol.

Sant Paol ne anaveze ket ac'hanomp, marteze zo ken n'en doa ket klevet hano morse euz a Leon ; mez daoulagad an Aotrou Doue a bare var on tadou koz, ha trues a gemeras outo. Choazet en deuz neuze eun abostol santel e toues kant ha kant all ; lakeat en deuz anezan da c'henel enn eur famill gristen ; kaset en deuzhen abred e skol sant Ildud, da zeski a bep seurt skianchou, ha dreist oll skiant ar zent ; euz a skol sant Ildud,

eo eat d'an dezert, evit kemeret muyoc'h a nerz da stourm ouz an drouk-spered, enn eur heulia penn da benn roudou an ermited; beleget eo bet, dastumet en deuz enn dro dezan daouzek beleg kalounek evel dan; epad seiz vloas en deuz prezeget an Aviel e rouanteles Mark; ha brema, pa oar an-tu da c'hounid eneou ha da zeveni micher diez eur misioner, brema eo e nij eun Eal euz ar Baradoz da lavaret dezan: « Paol, Paol, treuzit ar mor, it enn eur vro nevez, e bro Leon, ha skignit var an dud a zo eno sklerijen ar feiz. »

Eal benniget, pebez anaoudegez vad n'em euz ket evidoc'h! N'ouzon nag o c'hano nag o renk e nao c'heur an Elez, rag n'oc'h euz diskleriet nag an eil nag egile da zant Paol, pe ma oc'h euz-hen diskleriet, n'eo ket deuet ar c'helou beteg ennomp. N'euz fors, o saludi a ran gant doujans ha karantes, evel ma saludan an arc'hel Gabriel o preur, en deuz karget ar bed a joa pa brederas da Vari gini-veles or Zalver. Or Zalver a brederit deomp ive, hag an dudiusa levenes a lintro ne vo ket pell enn or bro.

E ma Paol o vont enn end. Eal benniget, divoallit he vagik diouz ar mor fuloret hag an avelou fall; krogit mad oc'h unan er stur, ha bleinit he lestr bian beteg Eusa da genta, hag ac'hano beteg an douar bras.

17

Ar roue Mark a zinac'h eur c'hloc'h da zant Paol.

Paol ne deas ket gouskoude var êun da Eusa; falvezout a rea da Zoue, enn he vadeles, ober dezan eur blijadur iskis abars kuitad da viken al leac'hioù m'oa ganet; unan euz he c'hoarezet a velas, evel ma vezo kountet bremaik. Mez red eo lavaret araog, penaos e kiiniadas diouz ar roue Mark.

Ar roue Mark, petra benag m'oa sklear evitan n'elle muy derc'hel enn he rouanteles an trizek den santel, a glasse digaresiou evit miret outo da ziblas.

« N'oun ket evit dale, va mab, eme

Baol; gant aoun, an Eal en deuz parlantet ker flour ouzin enn noz-ma, a deufe da veza rustoc'h ma tizentan. Diskuezit, va mab keas, n'em euz ket kollet va foan ganeoc'h, hag em euz great ac'hanoc'h eur c'hristen guirion ha leal. »

Ar pennou brasa euz ar pales a lavare d'ho zro :

« Aotrou roue, ni on deuz kement a geuz, kement a c'hlac'har ha c'hui. Petra dal enebi ? Marteze, mar ple-gomp a volentes vad, Doue a royo deomp eskibien ha beleven all, enn eskemm ar re a gollomp. Ha ma ne ro ket, hen eo ar Mestr, ha deomp eo suja. »

Erfin ar roue, eb dont a benn da vouga he zrouk, a respountas :

« Mad, peguir o deuz lakeat enn ho spered va lezer va-unan, klaskit eur vag dezo, ha yao, hag enn end, ha mont buan divar va zro. »

— « Va mab muya karet, eme ar zant, Mark, am beuz ganet er vadi-ziant, ne ket evelse e pellaimp an eil diouz egile. Eur merk e chomoc'h mignoun din a c'houlennan diganeoc'h, ha ne ket eun dra dalvoudus

anizi. Seiz kloc'h bian oc'h euz var o taol, da c'hervel diouz ho renk ar seiz rum tud a vez o tribi ganeoc'h. Roit d'in, me o ped, ar c'hloc'h disterra, ha p'hel lakin da zoun, me gavo din klevet o moues, va mab. »

— « Kloc'h ebet n'o pezo diganen, eme ar roue enn he gounnar; na kloc'h na traou all. Eur vag a meuz prometet deoc'h, hag eur vag o pezo. Divoallit gouskoude, ne safe re a imor ennon. »

Pa glevas Paol ar gourdrouzou-ma, ec'h astas affo pignad er vag, hag e skoas etrezek ar mor doun enn avantur Doue.

Divezatoc'h e vo kount adarre euz ar c'hloc'h bian.

Sant Paol oc'h en em gaout gant he c'hoar Sikofolla.

Antronos vintin, ar vag a zouaras anizi he-unan enn eur poull distro ha sioul.

« Me a zonzj din, eme Baol d'an daouzek belek all, ne ket eb abek en deuz an Aotrou Doue digaset ac'hanomp ama. Ar roue Mark n'en deuz roet deomp na bara na dour. Guir eo, an Oll-C'halloudek en deuz kemet ar garg d'on encha, ha gwest eo da zifenn ac'hanomp diouz ar sec'hed hag an naoun. Mez arabad goulenniraklou digantan pa ne vez ket red. Guella a zo da ober eo klask ama eun aluzen benag, ha mar deuz kristenien er vro, ne vo ket dinac'het ouzomp. »

Diskenn a rejont neuze, ha n'oant ket eat pell, ma veljont eun ti bras e toues ar guez.

« Eur gouent, eme zant Paol, diouz an doare anizi; ama ne vanko netra deomp, ma ne ket re baour al leanezed. »

Paol a skoas daou pe dri daol var an or, ha raktal e teuas eul leanes da zigeri an draf.

« Piou oc'h-hu, va zud mad? eme al leanes. »

— « Ni, eme Baol, a zo trizek beleg hag a zo bet guechall er skol gant sant Ildud; ha brema e zeomp asam-

bles da brezek an Aviel er broyou estren, hag on dije c'hoant, mar de o madeles, da gaout eun tam bara hag eur banne dour da gas ganeomp evit peur echui or beach. »

— « Mont a ran, eme al leanes, da c'hervel ar superiores. »

Pa deuas ar superiores, e chomas mantret o sellet ouz Paol, ha Paol ker mantret all. Sonjal a rea dezo o doa en em gullet en eun tu benag, ha n'oant ket evit gouzout na peur na penaos.

Abars ar fin, ar superiores a lavaras :

« Daoust ha ne vijac'h ket mab pe gar tost da Berf, eun dijentil diouz Brehant, e karter Penn-ejen? Eun car a famill oc'h euz. »

— « Ia, eme Baol, me a zo mab da Berf, hag he vab ena zo ken. »

— « Neuze, c'hui zo Paol, eme ar superiores en eur dridal gant ar joa; me eo Sikofolla, o c'hoar yaouank. »

Hag ec'h en em daolas etre divreac'h he breur. Goude beza en em briated ho daou gant ar vrasa karantes, e kuesjont d'an douar an eil hag egile da zrugarekad Doue. Paol n'en doa

ket kals a anaoudegas euz he c'hoar, rag eat oa euz ar gear d'an oad a zek vloas, pa n'e doa Sikofolla nemet daou viz ha tregont benag, hag a baoue n'en doa great tro ebet e maner he dud.

19

Peden Sikofolla d'he breur

Kounta a rejont an eil d'egile ar pez a yoa c'hoarvezetganto epad keit all ; mez Paol en doa mall da boursu he veach, hag edo dija o vont da gimiada diouz he c'hoar, pa lavaras hou-ma dezan :

« Ya breur, chomit ganeomp eur zizun ; ne vo ket re evit lakâd enn ho pagik kement oc'h euz ezom da dreuzi ar mor. Ar veach genta, tost da vir, eo deomp en em gaout asambles, ar veach diveza e vezo ive kazi sur. Enn han' Doue, chomit ganen eur zizun da nebeuta. »

— « Eur zizun penn da benn ne jomin ket, eme zant Paol ; tri derves a roan deoc'h, va c'hoar, ha tri derves

ebken ; n'oun ket evit ober muyoc'h. »

— « O trugarekad a ran, va breur, eme Zikofolla, da veza selaouet lod euz va feden. Brema, selaouit ac'hanon adarre. Peguir e fell deoc'h dilezel o pro, o kerent, o predeur hag o c'hoarezed, o mignouned hag oc'h amezeyen, laoskit da viana ganeomp eur merk anat euz o karantez. Me voar e c'heuil-lit bepred holontes Doue, ha dre ze n'em euz douetans ebet ec'h aotreo deoc'h kement a c'houlennot digantan. »

Paol a respountas :

— « N'em euz ken c'hoant nemet da ober plijadur deoc'h, va c'hoar, mar de em galloud. Mez lavarit din o mennos da genta. »

— « Ar gouent-ma, eme Zikofolla, a zo var bord an aod, evel a velit ; ha goal striz eo on douarou evit maga ken alies a leanezed. Ogen, ar re a jom en dro deomp a zo tud kriz, ha ne rofent ket zo ken eun anter dervez arad d'or sikour da veva. N'ellomp kemeret tachen ebet nemet divar goust ar mor. Mez siouas, ar mor eo a c'hounid varnomp, ha dalc'hmâd e teu da laeres diganeomp eur c'horn

pe gorn euz or parkeyer, da gleuza dindan an torgennou, ha da veuzi an drevajou. Avehou memes e red beteg an ti, ha ne vezo ket pell e rankimp tec'het dioutan. Kredi a ran, va breur, a greiz va c'haloun, e zouc'h gwest, var boez en em erbedi ouz an Oll-C'halloudek, da lakâd ar mor da giza. »

— « Var va fedennou va-unan, eme zant Paol, n'em euz ket kals da fiziout; var o re-c'hui, ne lavaran ket. Pedomp eta disparti, ha varc'hoas e vo gullet. »

20

Ar mor sparlet gant sant Paol.

Var gementse, ar zant en em denas a gostes da bedi, ha tremen a reas an noz e peb seurt orezoun.

« Aotrou Doue, emezan, krouer an oll draou kaer, evellen oc'h euz prederet d'o tiskibien enn Aviel : Nep a gredo ennon, a rayo ar memes bur-

zudou ganen, ha brasoc'h burzudou c'hoas. Kent a ze, o pedi a ran hag oc'h aspedi, distroit o taoulagad deuz va fec'hejou, ha sellit a druez ouz feiz birvidik o servicheres Sikofolla. »

Diouz ar mintin, ar mor a yoa enn he izella. Paol a gemennas neuze d'he c'hoar ha d'he zaouzek kompagnoun disken enn aod asambles gantan; d'he c'hoar e lavaras ouspenn kemeret eur varlennad biliennou munud.

Pa voent diguezet enn traon tout, pevar mil bas benag diouz ar gouent, sant Paol a gomzas evellen :

« Daoulinit, va breudeur, ha grit da Zoue eur beden c'huek; evidoc'h, va c'hoar, renkit o piliennou het-a-hed ar mor, unan ama, unan aount. »

Hen avad a jomas enn he za, hag a lavaras :

« Mor divergount, ar veinigou a roan urz da lakâd penn da benn enn aod, a vezo eur sin euz an emgleo great etrezomp da viken. Ne glaskin muy tenna frankizen ebet divarnot; mes te da tro, a jomo el leac'h ma maout, ha ne lamm ket dreist an arz a vezo merket did. »

Eur vech echuet he labour gant Sikofolla, Paol a lavaras adarre :

« E ma al lano ; kerzomp d'ar gouent. »

N'oant ket eat enn anter an end, ma klevjont eun trouz spountus adreg ho c'hein. Hag hi sellet : Pebez burzud ! Ar biliennou a yoa savet da gerrek-braz, ha ne velet riboul ebet etrezo, nemet eun tamik guenojen enk da bignad var c'horre : ar venoijen-ma a voe hanvet a-neuze End-Paol, hano a zo bed dalc'hed abaoe varni.

Morse n'en deuz ellet ar mor tremen abiou gant he oll gounnar ; kaer eo dezan krozal hag ionenna, enn he brizoun e rank sac'ha ; hag eas e voe d'al leanezed ada ha planta bep seurt traou er plas m'en doa lezet goullo.

Piou a yoa gant sant Paol ?

Epad an tri derves ma chomas sant Paol gant he c'hoar, bandennajou

tud a ziredas d'ar gouent evit he zaludi dre respet, ha kaout ar blijadur hag an enor da velet eun den ker santel.

Lod euz he gerent, kindirvi ha nisien, a deuas ive, hag ar re-ma a c'houlennas mont d'he heul. Choas a reas daouzek anezo, daoust ma n'oant c'hoas na beleg na kloarek, ha var ar marc'had e kemeras daou all, Konok ha Dekan. Dekan a yoa avieler d'an ampoent, ha Konok a voe beleget divezatoc'h gant sant Paol, ma n'oa ket dija beleg zo ken.

Peguir em euz hanvet Konok ha Dekan dre ho hano, eo kouls din rei diouz-tu hanoyou ar re all a yoa gant sant Paol, pe da viana hanoyou ar re anezo a anavezan.

N'ouzon ket d'ar zur pe seurt hano o doa he zaouzek kender pe niz ; n'em euz ho c'havet skrivet mad e nep leac'h. Gouskoude, unan, a gav din, a yoa Per, eun all Urfol, hag eun all Vivehin ; euz an daou-ma, Urfol ha Vivehin, e vezo menek divezatoc'h. Mez hanoyou enneke euz ar velezen a yoa bet gantan enn he ermitach hag

e rouanteles Mark, a ellan lakâd aman dirazoc'h.

An ini kenta eo Tiernomael; he-ma a vezo eskob e Kastel araog maro sant Paol, evel a velimp.

Goude e teu Toseok, hanvet ive Sittred, Vohednof, hanvet ive Toveudok, Gellok, Bretoven ha Boi; setu aze c'hueac'h.

Ar pemp all eo Guirman, Laouenan, Teuc'h, hanvet ive Toc'h, Kiel, hag Herkan, hanvet ive Herkulan.

Konok, diouz ma kounter, en deuz savet parres Plougasnou, Dekan parres Ploudihen, Toseok parres Plouezoc'h, Tovendok parres Guitevede, Bretoven parres koz ar Broennou, Guirman parres Plouguerne, Laouenan parres Trelaouenan, Kiel parres Plouguiel e Treger, hag Herkulan parres Plouenan. Ma n'o deuz ket savet ho-unan ar parresiou-ze, ho hano da viana, pe eun hano kazi evel, a zo bet roet gant an amzer d'ar memes parresiou.

Mes mall eo ganen distrei adarre da zant Paol.

Sant Paol enn Eusa.

Brema, ne ket daouzek ebken a yoa gantan, mez c'hueac'h den varnugent, hag ar vag a yoa re vian evit kement all a dud. Sikofolla a gavas dezan eul lestr frankoc'h; hag hen, goude beza benniget an oll leanezed er gouent, ha kimiadet diouz he c'hoar, a yeas enn end.

An avel her c'hasas divar err e peder eur varnugent beteg enes Eusa, a zo, evel a voar an oll, seiz leo vor benag diouz douar bras Gueled-Leon. O veza remerket e tu ar c'hus-eol eur plas brao da ziskenn, e tiskennas eno gant he vigaoured. Porz an Ejenned a veze great euz ar plasse d'an ampoent; Porz-Pol a vez great anezan abaoue. An drama a c'hoarvezas pemp kant ugent vloas goude donediges or Zalver; Paol a yoa neuze e kreiz he vrud, n'en doa nemet tregont vloas.

Chasa a rejont ho lestr var arzeac'h, ha raktal ec'h en em lakejont da ober

tro an enezen. Eun draoniennik hanvet ar Raozek a gavjont diouz ho doare, douar druz enni, hag eun eyenen grenv o redet penn da benn d'an doullen. Sant Paol a greskas c'hoas dour an eyenen, hag a roas urs da zewel e kichen ar feunteun, el leac'h ma ma brema Ker-Ber, eur japel ha trizek tiik taonouarc'h toet gant soul. Pa voe echu al labour-ze, ec'h ententjont ouz tud ar vro.

Siouas, n'oa ket eur c'hristen enn ho zoues, payaned oant oll; mez ar zant hag ar veleyn a yoa ouz he heul a brezegas dezo gant kement a nerz hag a froues, ma voent gounezet guitibunan d'ar feiz abenn c'hueac'h miz. Eun templ idolou, a yoa enn enezen, a voe diskaret ganto, ar giziou fall chenchet, ha vertuziou an Avel plan-tet ken doun enn eneou, ma ne velet e neb leac'h, epad pell hag ir amzer, katoliked startoc'h na devotoc'h hag ama.

Sant Paol e Gueled-Leon.

Sant Paol, o koumpren n'en doa netra ken da ober enn Eusa, a c'houlenne bemdes digant Doue enn he bedennou, hag eno en doa da jom, pe da vont pelloc'h. Ogen, eun nosves, e kreiz he gousk, an Eal en doa hen aliet da guitad he vro, en em ziskuezas dezan adarre, hag a gomzas evellen outan :

« Paol, perag argila ? Perag dale keit all en eun enezen ker stris ha ker bian ? Ne ma ket ama da dermen. Eun douar all a zo ouz da c'hortos. Enn douar-ze e zeuz eur bobl diniver a po da gelen, a zigasi d'ar feiz ha d'ar zilvidiges, a vezo da c'hloar ha da gurunen hed an oll oajou. Kerz ac'halen eb astal. Doue a vezo ganes; hen da vleinio beteg al leac'h a zo merket did, beteg al leac'h ma kavi da repos, pa pezo stourmet avoalac'h var an dachen, e giz eur soudard kalounek. Sao, ha sao buan, ha pign enn da vag. »

Paol a zavas, ha goude beza kountet he ure d'ar re a yoa gantan, e kemennas dezo lakâd al lestr var flod. Hen he-unan a grogas er stur, hag en eur gana innou ha meuleudiou da Zoue, e skojoñt etreze Gueled-Leon.

Tremen a rejont abiou Molenes ha karreg ar Marc'h-du, hag eb kaout goal zarvoud ebet, ec'h errujont enn eur pleg-mor, a c'halver brema Porz-Pol, etre Lambaol ha Plouarzel. Ac'hano e zejont dre zouar, hed eul leo pe ziou diouz kostez ar zao-eol, hag o veza kavet er c'harter eur frankisen deread hag eur feunteun dour sklear, e savjont eur japel ha lochen-nou. Sant Paol a c'halvas an andred-ze Lamber, enn enor da brins an Ebestel, evel m'en doa galvet Ker-Ber he gouent enn Eusa.

Evelse-ta, Leonis, o patroun an aotrou sant Paol, en eur gemeret perz enn ho pro, he goestlas da zant Per. Ma fell deoc'h diskues d'o misioner koz eun tam doujans ha karantes, bezit bepred stag mad evel dan ouz kador Roum, sentit ouz ar Babed a zo deuet var lerc'h sant Per, silaouit ho moues, ha troit kein da gement ini a

glaskfe ho touella, ha teuler dismegans var an Iliz ha var he fastored.

24

Sant Paol e Lambaol-Guitalmaz.

Sant Paol a jomas eur pennad e Lamber; he ziskibien hag hen a rea baleou tro var dro da brezek, ha goudeze, e tistroent adarre da Lamber. Lod anezo gouskoude a c'hoanteas beva e giz ermited, hag a yeas ama hag aount da ober ho ermitach. Urfol en em dennas er Vourc'h-Ven, ha Vivehin enn tu all da Vitalmeze; hema en dez roet he hano da Blouvien, ma ne keuz sant Jaoua eo.

Vivehin en doa choazet eur plasik koant e karter Guitalmaz, tost d'eur c'houerik, e kreiz ar c'hoajou. An enebour milliget, an diaoul, n'hel laoskas ket e peoc'h. A veac'h oa echu gantan he zammik ti, ma tiredas eur c'holle goues da eva dour enn he feunteun, ha da ziskar gant he gerniel, ha da

flastra gant he dreid ar pezh en doa savet ; ha goude beza great an taol brao-ze, e zeas d'he doul enn eur vlejal. Vivehin a zresas he di guella ma ellas ; mez antronoz ar c'holle a reas kement all, ha kaer en doa dresa ha dresa, ar c'holle a zistrese bemdes he labour.

Neuze e sonjas mont da vid Paol, ha Paol enn end. Pa ziguezas Paol enn ermitach, e kavas anezan ken deread diouz he zoare, ma lavaras da Vivehin :

« Va breur ker, ma kirit, ni a droko, c'hui a yelo da Lamber, ha me a jomo ama. »

— « Va mestr, eme Vivehin, ar pezh a zodin a zo deoc'h ; kerkouls, evidon eo eur blijadur ober bepred o polontes. »

— « Ne ket va bolontes-me a ranker ober, eme Baol, mez bolontes Doue. »

— « Guir eo, eme Vivehin d'he dro ; mez gouzout a ran ne deoc'h morse a eneb bolontes Doue, ha setu perag e sentin ouzoc'h atao evel ouz Doue. »

Sant Paol hag ar c'holle goues.

Epad m'edont o komz an eil ouz egile, ar c'holle goues a zispakas euz a doues ar vrousou ; mes kerkent a ma velas Paol enn he za var dreujou al lochen a yoa bet kempennet a neves ganto, ec'h en em lakeas da grena. Dont a reas goustadik, ha pa voe tost, e pusias teir guech ec'hars treid ar zant, hag e chomas gourvezet, he zivesker pleget gantan, hag he benn ouz an douar, evel pa vije bet o c'houl-len pardoun. Paol ne zaleas ket da lavaret :

« Evel ma tiskuezas kaout keus, ne rin drouk ebet did ; kerz e peoc'h, mez divoall e tistrofes ama biken. »

An aneval euzus a stouas adarre dirazan, ha raktal e tec'has keit ha ken doun er c'hoajou, ma ne ve gullet tres ebet anezan gant den abaoe. Paol a vennigas neuze ar feunteun, a zavas eun orator e kichen, hag a jomas he-unan eno. E plas an ermitach-ma, e zeus bet eur gouent dive-

zatoc'h, ha brema, er memes leac'h, e ma bourg Lambaol-Guitaimeze.

Abenn nemeur, e rankas loc'h; rag an Eal en doa her c'helennet diwech a ziagent, a gemennas dezan mont pelloc'h. Leuskel a reas darn euz he ziskibien e Lambaol, ha gant ar re all e treuzas an Aber-Beneat e Treglonou, hag an Aber-Vrac'h var Pont-Krac'h. Pa voe diguezet var barres Kervirman pe Blougerne, ec'h azezas er Grouanek da ziskuiza.

Tud he gompagnunes a yoa dare da vervel gant ar zec'hed, ha kaer o doa klask dour a bep tu, ne gavent berad. Dont a rejont d'en em glem d'ho mestr, ha gant eur voues truezus meurbed, e c'houlenjont digantan ober eur mirakl evito.

26

Mirakl ar Grouanek.

Sant Paol en em daolas d'an daoulin, hag a reas ar beden-ma da Zoue :
« Va C'hrouer ha va Roue, c'hui

oc'h euz guechall kemennet da Voizes skei var eur roc'h gant he vaz, e kreiz eun dezert rostet oll dre nerz'an col; ha prestik e strinkas euz ar garek eun eyenen ker founnus, ma voe travoalac'h anizi evit ar bobl a Israel hag evit ho jatal. O pe ar vadeles da ober kement all d'an dournadik tud-ma, kerkent a ma mo skoet an douar gant va baz. »

Raktal e roas tri daol e tri blas disparti, hag e lavaras toulla. N'oa ket peurzistaget eun taouarc'hen euz a bep leac'h ma sinklas teir voazen, n'int ket eanet da rei dour abaoe.

An teir feunteun a veler irio c'hoas er Grouanek. Unan anezo a yoa kollet eur pennad a yoa, ha ne vouie den petra oa deuet da veza, pe stanket pe zizec'het. Mez brema e zeuz eun nebeut bloavesiou, aotrou persoun Plougerne a lakeas kempen aoter an iliz a zo bet savet divezatoc'h er Grouanek, ha pa voe diblasat an aoter, e voe kavet an drede feunteun dindan.

An teir feunteun-ma, ouspenn ma taolont gant largentes dour euz ar guella, a zo c'hoas enno eur vertus

da barea. Meur a ini klanv en deuz bet ar yec'hed oc'h eva euz an dourze, ha meur a ini all a vije rekouret eveldo n'o dije kement a feiz hag ou tadou koz.

Diskibien sant Paol, o veza torret ho zec'hed, a rentas gloar da zoue, ha meuleudi d'he zervicher galloudas. Edont neuze, eb gouzout, var veven rouanteles Guitirmeze, a yoa kant keraden enni, ha ne dea ket enn tu all d'ar Grouanek ha da Dremenac'h. Pelloc'h e teraoue rouanteles ar c'hont Guitur, hag ar rouantelez-ma a bake beteg Montroules.

Ma teuas eur c'hrenn-baotr d'ho c'haout.

27

Sant Paol enn end da vont da Gastel.

Ar re-ma a c'houlennas digant ar paotrik piou oa he-unan, ha piou he dud hag he vestr, hag e peleac'h e kavjent eur plasik sioul da ober ho zilvidiges eb aoun na damant.

« A drugare Doue, eme ar paotrik,

diouz ma klevan ganeoc'h, c'hui zo kristenien, ha kristenien leal. Me ive a zo kristen, mez ne ma ket an oll eveldon. Va mestr avad, ar c'hont Guitur, a zo kerkouls kristen ha me; ha guelloc'h kristen end-êun; c'hoant em bije zo ken da lavaret n'euz ket var an douar eur c'hristen hag a ve par dezan. Lakeat e bet gant eur roue kristen all, Childebart, impalaer Paris, da goumandi var ar vro, ha me a zo karget da zivoall lod euz he voc'h, respet deoc'h. Mar kirit, me o kaso d'he bales, hag a laosko va moc'h, keit a ma vezin ouz o tiambrouk, etre daouarn va c'hamaladed o deuz ar memes micher ganen-me. Diskues a rin deoc'h eun andred dudius, Kastel a vez great anezan; ha sur, n'elloc'h ket miret d'en em blijout eno. Arabad deoc'h kredi e ven o kounta geyer. Deuit d'am heul, hag astit affo. Ne maoun ket e klask o troumpla. Guelet a reot eo guir kement a lavaran. »

— « Doue r'o pennigo, va mab, a respountas sant Paol; ganeoc'h e zaimp. Baliit araog, ha ni a gerzo var ho lerc'h. »

Ar pastor moc'h a gemeras asambles ganto eun end bras koz, digoret a bell zo da vont hed ar mor diouz Gueled-Leon da Gastel, biou Plouider, Trelez, Ploueskaton, Kleder ha Sibiril.

Enn tu all da ster Kerc'hoant, e tiguessjont e kichen feunteun Keloumad. Paol a vennigas ar feunteun enn hano an Dreinded zakr, ha setu hi pignad oll asambles var Greac'h-Mikeal. Ac'hano e veljont Kastel.

28

Petra oa Kastel d'an ampoent ?

Kastel a yoa neuze eur c'hastel e giz m'oa hanvet, ha kenderc'hel a reas da veza eur c'hastel beteg fin an daouzekvet kanved goude donediges or Zalver. Mogerioù douar a yoa bet savet enn dro da gear, ha divezatoc'h, e plas ar mogerioù douar e voe great mogerioù mein. Ar re-ma a zo bet diskaret er bloas 1170 gant eur roue a Vro-Zaos, Herri Plantagenet.

Sant Paol ne skuize ket o sellet ouz ar vro :

« Pebez Barados, a lavare ! Evel eo Kastel ouz eun neizik flour, goudoret brao e kreiz eun ennezen. A bep tu, diouz kostes ar c'hus-eol, an anternos hag ar zao-eol, e ma ar mor oc'h ober gouriz dezan. Harpet eo ouz eun dorgennik koumpes, a zisken goustad d'en em astenn var ar mesioù. D'ar c'hrestez eo troet, hag azalek ar beure beteg an abardaes, an eol ne denn ket he lagad divarnan. Pa zao var c'horre ar mor, kenta bann a daol a gues var Gastel ; ha pa ya da gousket er mor all, goude beza redet he gant, he ziveza bann, abars kuzet, a vez c'hoas evit Kastel. Mar de an dud ken deread hag ar vro, ne vezo ket dies deomp. Mez poent eo mont ebars, da c'houzout petra zo. »

Eun or a yoa dirazan, dre an or-ze ec'h antreas. Mantret e voe he galoun, pa ne remerkas e neb leac'h nemet idolou udur, ha kroaz ebet nag iliz a zoare. Eveza m'eo da vid Guitur en doa c'hoant da vont abars kregi stard enn he labour, ne zaleas ket goal bell enn droyad-ma e kear Gas-

tel ; pell avoalac'h gouskoude evit didouella eun nebeut ha digaledi ar sperejou aheurtet.

E serr he brezegennou, e reas meur a virakl, hag an ini en deuz kountet ar viraklou-ze deomp, Gourmonok, a gomz evellen divarno :

« Dre c'halloud sant Paol, emezan, ar pezh a yoa fall a deuas da veza mad, ar pezh a yoa mad a deuas da veza guelloc'h ; ar pezh a yoa fall tre ha n'elle ket beza chenchet, a zistrujas neat, da viret outo da noazout. »

Setu ama var lerc'h penaos e c'hoarvezas an traou.

29

Spountaliou Kastel.

Enn eun tu da gear e zoa eur vezen dann koz-kozh, hag eun hed-guenan enni. Ar vezen-ma a yoa chomet eno a zilerc'h relijion an Drouized, ha kals respet a yoa eviti ; he adori a reat zo ken evel eun doue.

Sant Paol a lavaras :

« Ar vezen a vezo diskaret ; ha gant aoun o pije keuz dizi, ar guenan a vezo rannet etrezoc'h, ha me en asur, euz ar guenan e savo eur maread hedou, peadra d'o kountanti. »

Ar pezh a deuas da vir. Abalamour da ze, lod euz a noblans ar c'harter a verkas guenan enn ho ardamezou divizatoc'h. Eur ru e Kastel a reer anizi c'hoas ru Vezen-Dann.

Eur viz-c'houes a velet ive dalc'hmad o turiad er ruyou, hag ouz he heul eur vanden ouc'hedigou. Den ne grede tostad outi. Paol he lakeas da veza don, hag abaoe e roas d'ar c'hont Guitur, eb ober drouk da nikun, torrajou stank ha founnus.

Ne ket kollet ar zoni euz an drama e Kastel. Enn iliz Paol, er penn uela euz ar c'heur, dindan aoter vian ar Relegou pe ar Verc'hes, e zeuz c'hoas eun tamik kao hag a vez great Toull ar Viz anezan gant an dud. Skeuden ar viz, eur geyel ganti o neza, a yoa guechall, brema e zeuz kant vloas, e chapel Karmes. Pa voe dismantret ar japel enn amzer an Dispac'h, ar viz nezerez a voe save-

teet ac'hano, ha me va-unan em euz-hi
gulet enn eun ti e Poesiou-Roue,
petra benag ma ne ma ket eno mui.
*E Ploermel, enn eun iliz, e zeuz
ive eur viz nezeres all.*

Ne ket e kear ebken e zoa loened
direiz, var ar meas e zoa ive. Eun ours
dreist oll a rea eun distruj hag eul
lazer es euzus er vro. Paol a ejas an
aneval; hag he-ma a dec'has divar
err etrezek eul leac'h hanvet neuze
Brokian, hag eno e kuezas dre ber-
mission Doue enn eur vengleuz, hag
e torras he c'houzoug.

Eur veach all, e taolas he vallos
var eun ejen goues a deue hag a yea
biou ar parkeyer hag ar c'hoajou, evel
pa vije bet an diaoul en he gorf. Lod
a lavar eo ar memes ejen en doa ne-
ves kaset kuit diouz ermitach Vive-
hin e Lambaol; pe e zeo ar memes
ejen pe ne deo ket, e rankas mont da
guzet.

Spountaliou all a yoa c'hoas er
c'harter, ha ne ket estoun. An drouk
spered a yoa mestr var ar c'halou-
nou, ha Doue hel laoske da ober he
reuz. Pa ziguezas sant Paol, an traou
a chenchas doare. An oll spountaliou

a steuzias, evel ma teuz ar skourn di-
rag an eol; ha ne jomas netra diver-
gount da stourm ouz an dud keiz, na
laeroun zo ken, na torfetourien all.

Eur brosesion gaer a voe great da fin
ar mision, enn diaveaz hag enn diabarz
da gear; strinket e voe dour benniget
a bep tu, hag ar gear he-unan a voe
konsakret da Zoue gant ar zant. Kas-
tel a zo bet hanvet abaoe ar Guear-
Zantel. Ra vezo santel bepred ha din
euz he fatroun!

30

Miraklou sant Paol etre Kastel ha Rosko.

Ar mesaer moc'h a yoa chomet e
Kastel gant sant Paol, ha ne ket hen
a ganas an nebeuta er brosesion. Pa
voe deuet ar mare, e zejont asam-
bles etrezek Rosko, rag ar c'hont Gui-
tur a veze peur vuya e Baz.

N'en em bliche ket gant Kastellis, a
yoa bet beteg-hen re ziroll dioutan.
Eun den a zoujans Doue oa, ha ne
garie ket an trouz hag an difoulans.

Pa ne veze ket defot anezan e leac'h all, e tremene an oll amzer enn enezen o vedita, o lenn ar skritur sakr, hag o skriva var baper ar mennosiou kaer a zivoane enn he benn. Abil bras oa deuet da veza, ha guest oa da zisput var bep seurt skianchou gant ar re guizieka.

Paol hag he ziskibien, hag ar pao-trik e serr, a yoa o vont laouen gant an end, ha n'oant ket eat pell diouz Kastel, pa gavjont dirazo tri zen dall, eur c'hrouadur dek vloas ouz ho diambrouk. Ar c'hrouadur ho c'hase avechou var êun; avechou all e kemere eur blijadur fallakr ouz ho jasa a-dreuz hag a-hed ha pa vezent ne-c'het, e tirolle da c'hoarzin.

An tri-ma, o klevet sant Paol hag he vanden o paseal, a zigoras asambles ho ginou da grial :

« Ma n'en deuz ket an aotrou hag he gompagnunez eun aluzen da rei da zri baour keaz ha na velont berad, her pedi a reomp da viana da gaout trues enn eur fesoun benag ouz ho stad reuzeudik. »

Paol a voe treuzet he galoun, ha goude beza daoulined eur pennad var

an douar noaz, e savas hag e lavaras :
« N'on deuz ket da rei deoc'h ar peza c'houlennit; mez Doue, enn he vadeles, a royo guelloc'h deoc'h. »

Neuze e zeas tost dezo, hag e lavanas adarre :

« An ini en deuz digoret ho daoulagad d'an dud dall a youe outan : Jezus, mab da Zavid, o pe trues ouzomp ! Ra zigoro ive ho taoulagad deoc'h ! »

Kerkent e stokas beg he vaz ouz ho drem, hag asambles gant sklerijen ar c'horf, e roas ive dezo sklerijen an ene. Azalek ar moument-ma, e c'henchjont buez, hag ec'h en em lakejont a zrevi da servicha Doue.

Eur pennad goude ec'h errujont gant daou vut; ar re-ma ne vouient ket prezek, mez astenn a reant ho

daouarn da c'houlenn. Ar zant n'ellas ket herzel outo; ar prezek a rentas d'an daou vut, mez dezo e kemennas ober eun uza mad euz ho zeod da glorifia Doue.

Aveac'h oa eat Paol diouto, ma tiguezaz enn end pevar baralitik, a zouget var bep a ballen. Ar baralitiked en em erbedas outan, hag hen a respountas evel sant Per d'ar c'ham a yoa azezet e porched an Templ e Jerusalem :

« Aour hag arc'hant n'em euz ket; mez ar pez am euz a roin deoc'h. Enn hano Jezus-Krist a Nazareth, savit en ho sa, ha kerzit. »

Ne voe ket red lavaret diwech ar memes tra dezo. Sevel a rejont, ha bale a rejont ive: ha ken aketus e voent a viziken da dizout enn uella vertusioù, evel da skei mibin ho zreid enn douar.

Sant Paol en doa difennet da gement ini a yoa bet pareet gantan, diskleria he vuzudou da zen; mez nul oa dezan. An tri genta, an daou all, hag ar pevar diveza, kouls hag an testou, a redas er vro da embann e peb leac'h an oberou kaer-ma.

E Rosko, Paol hag he vignouned a bignas enn eur vag e Beg-Golban, a c'halver irio Perc'hiridi pe Benn ar Gevridi, ar C'hevred pe an Dremenidi; hag o veza treuzet ar ganol, e tiskenjont e Baz. Ha setu hi var èun da bales ar c'hount, a yoa neuze Ti-Sekret he hano, hag an hano-ze a zo bet dalc'het varnan epad pell hag ir amzer.

Er gear edo Guitur; d'ar mare zo ken, e poanie da beurechui ar pevar Aviel, en doa lakeat enn he benn skriva het-a-hed var baper neves. Ar zant a voe digemeret mad gantan dre ma zoa misioner ha kannad ar Baradoz; mez guelloc'h c'hoas e voe digemeret, pa anavezaz ar c'hount oant ho daou kerent tost ha kindirvi. Rag Guitur, pe da viana he vouenn, a yoa deuet euz a Enez-Vreiz evel Paol. Paol a rankas dibuna dezan he vuez penn da benn azalek m'oa ganet, hag he oll veachou var zouar ha var vor beteg Kastel ha Baz.

Kloc'h ar roue Mark

Edo gant istor ar roue Mark, ha koumanset oa da gounta penaos e ki-miadas dioutan, ha penaos oa bet dinac'het ar c'hloc'h a c'houlenne. Er memes moument, unan euz a ofiserien ar c'hount a ziredas er gramp, strafillet oll, hag a lavarás :

« Aotrou kount, biskoas kement all. E ma deuet ama o pesketerien, eur pikol pesk ganto, hag e ginou ar pesk e zeuz eur c'hloc'h. »

— « Digasit-ho, pesk hag all, dirazomp, eme Witur. »

Digaset ar pesk, digoret he c'hinou, ha tennet ar c'hloc'h er meas, ar c'hount a drugarekeas Doue :

« Ar veach kenta eo din, emezan, gueleit eur seurt tra; morse n'em euz bet euz ar mor na kloc'h na digloc'h, nemet pesked ebken; ha c'hoas ar pesked a baker n'int ket tost ker bras hag he-ma. Red oa deoc'h, va breur Paol, beza deuet beteg ennon, evit din-me kaout digant Doue eun eve-

lep donezoun; ha ne ket a dra zur va meritou-me a zo talvezet din, mez o meritou-c'hui. »

— « Lakit ar c'hloc'h da zoun, eme Baol; mall am euz d'her c'hlevet. »

Pa voe sounet ar c'hloc'h, ar zant en em laoskas da vousec'hoarzin.

— « Perag e c'hoarzit-hu, va breur muya karet, eme ar c'hount? »

— « N'oun ket evit miret, eme Baol, o koumpren galloud ha madeles an Aotrou Doue. He-ma eo kloc'h ar roue Mark, edon e komz deoc'h euz anezan. Her goulennet em boa digant ar roue, hag ar roue ne falvezas ket her rei din. Mez Doue eo ar Mestr. Doue a ro ar pezh a gar d'an neb a gar, e giz ma kar ha d'ar mare ma kar. En em erbedomp outan ebken, ha ne c'hortozomp netra digant an dud. Ma ne zelaou ket ac'hanomp enn taol kenta, eo evit amprouvi or feiz hag or fiasianted. Pedomp evelato, pedomp adarre, ha kendalc'homp da bedi. Pa blijo gant he drugares e tenno ac'hanomp a boan, ha pa zontomp an nebeuta, e vezimp karget a levenes, evel ma zoun brema o velet ar c'hloc'hik keas-ma. »

Kloc'hik sant Paol e Kastel.

Guitur en doa eur blijadur vras o selaou prezegen dudius sant Paol, a rede euz he galoun evel an dour beo euz eur feunteun sklear. Abars ar fin e lavaras d'ar zant :

« Paol, va breur muya karet, sot e ve an den a glaskje herzel ouz bolontes Doue. Anat eo din, n'eo bet digaset ar c'hloc'h ama nemet evit her rei deoc'h. Dalit-hen ; ar c'hloc'h a zo deoc'h, ha deoc'h e vezo da viken. »

En eur he gemeret, Paol a drugarrekeas Doue, hag a vennigas he gender.

Ar c'hloc'h-ma a zo bet hanvet a viskoas an Ir-glaz, abalamour ma zeo ir diouz he vent, ha glaz. Kueor ruz ha kalzik arc'hant a zo ennan ; ne ket round evel ar c'hleyer all, ha ne ket bet teuzet. Great eo bet a daoliou morzol, egiz ar podou basin ; evel eo euz eun tokik karre, moannoc'h er beg eget enn traon. Nao veutad uelder en deuz, ha c'hueac'h meutad

ledander enn eun tu, pevar enn eun tu all ; rag an daou gastes n'int ket keit ha keit.

E Kastel e ma, enn iliz meur, e kichen aoter sant Paol, a zistribil enn eur c'hasedik ouz ar voger. Sounet e vez a ziouc'h an dud deiz ar pardoun, hag e poent all pa c'houlenner. Eun den maro a zo bet resusitet gantan, ha meur a zen klanv pareet. Mad eo dreist oll eneb ar boan benn hag an drouk-skouarn. Rei a ra da glevet d'an dud bouzar. Ra lakayo ive ar sperejou stanket da entent guelloc'h guirionesiou ar feiz !

Ne ket krenv he voues. Petra eo e skoas ar c'hleyer galloudus a froum hag a vole ken drante touriou Kastel da gever ar goueliou bras ? Gouskoude, pa vez ejet dirazon, va c'halloun a drid. Seblantout a ra din klevet sant Paol he-unan o lavaret d'he vugale :

« Kuiteat em euz va bro evit kas deoc'h kelou mad an Aviel, treuzet em euz ar mor, labouret em euz enn o toues, enn o toues oun maro. O pe sonj euz o misioner koz, sonj en deuz ac'hanoc'h ive er Barados. Koun'ant

oun da gaout enoriou diganeoc'h, rag an enoriou-ze a ya da Zoue. Mez an enor a c'houlennan da genta, eo ma vezoc'h din euz o tad. Dalc'hit ato stard d'ar pezh am euz desket d'ar re a zo bet enn o raog. Heuillit ar feiz guirion, sevenit gourc'hemennou Doue, sentit ouz an Iliz, hag eun dervez da zont, c'hui vezo va c'hurunen enn env. »

34

Sarpant Baz

Ar c'hount Guitur, estlammet oll o velet petra yoa c'hoarvezet, a gomzas neuze da zant Paol euz eur zarpant bras skrijus a yoa enn enezen diouz kostes ar zao-eol.

« Ar zarpant-ma, emezan, a lounk bemdes eun den da nebeuta, pe eur vioc'h, ha c'hoas ne vez ket karget he gof. Meur a veach oun bet gant va zoudarded o klask stourm ouz al loen goues, hag eleac'h ober an disterra drouk dezan, eo hen en deuz or goal gaset, ha paket, ha dispennet, ha

nebeut ac'hanomp bep tro o deuz ellet tec'het dioutan.

« Ne veler troad ebet d'an aneval udur; mez goloet eo a skant a zindan ha divar c'horre azalek he c'heol beteg he lost, hag a bep tu en deuz brenkou kalet ha reud a zeblant beza divesker. P'en deuz c'hoant da vale, ec'h astenn he vrenkou, hag e tigor he skant, ken ir ha kel lem ha skilfou dir.

« Eul liven gein en deuz, ha n'eo tam evel ouz eur vuzugen, a jas dizi he c'horfik hag he zisplek bep eil dro, pa gers var araog. Hema eo troidel-lou kam a ra. Harp a gemer var unan he euz gostesiou, ha kerkent e kas he dolzen a bez enn tu all; var an tuma e c'harp adarre, ha goude beza eat a zeou, e tiz a gleiz. Ne vez ket pell oc'h ober he c'hoariou; hag eveza m'en deuz ken alies a grok hag a skant, ken alies a bek hag a vrenk, e saill dreist ar reyer hag ar c'hleusio, kerkouls ha ma rod var an douar koumpes.

« Skoit a-dre, skoit a-benn, skoit aviches, laoskit birou enn doare ma kerot; nul e vo deoc'h. Ar birou ne ziruskont ket he groc'hen, ha dilam-

mout a reont zo ken var ho c'hiz d'o klaza. Netra ne rit, nemet kreski he gounnar. Dont a ra neuze varnoc'h evel ar gurun, ha ma ne lakit eves, e vezoc'h diskolpet ha draillet etre he garvaniou. Avoalac'h eo memes he alan flierius evit okontammi hag olaza.

« Pa glev eun trouz benag, he c'houlzouk a c'huez, he skant a strak hag a zounna enn dro dezan, he benn a deu er meas euz he doul kuz var eur roc'h, he c'hinou euzus a zigor kel ledan hag eur fourn, hag he zaoulagad rus-tan saotret gant goad bilimus a finv evel flemmou, peadra da zaouzani ha da strobinaella an dud kalouneka.

« Guelit brema, va breur, eme ar c'hount adarre, ha c'hui zo gwest da veza trec'h da eur seurt spountail. »

— « Ar spountail-ma, a respountas sant Paol, a zo bet digaset enn enezen aberz an diaoul, ha red eo flastra penn an ærouant e kement leac'h m'en em ziskues. Hen toui a ran dirazoc'h, n'e zebin tam bara ha ne evin banne dour ebet, ken an bezo harluet an enebour. Pe me a varvo lounket gantan, pe hen a vezo kabestret, hag ar bobl tennet a enkres. »

Sant Paol ha Kergour

Sant Paol a dremenas an noz o pedi gant he veleyn, ha diouz ar mintin e viskas he oll ornamanchou sakr, ha goude beza oferennet, e lavaras da Witur :

« Deuit brema ganen, va c'hender, da ziskues din an end, ha kerzomp enn hano Doue. »

— « Diskues deoc'h an end a rin, eme ar c'hount; mont beteg ar zarpant avad ne rin ket; re a aoun am bije da veza drebet. »

Hag e zejont eur pennad asambles etrezek ar zao-eol, eur bobl tud ouz ho heul. Eur veach diguezet var eun dorgennik, Guitur a lavaras :

« Ama e chomin, ne din ket pelloc'h; aount e ma ar zarpante kreiz ar reyer, dindan eur garrek kleuz. »

— « Penaos? eme ar zant. E maoc'h aze a gantchou enn dro din-me, ha ne vo ket kavet enn o toues eun den kalounek avoalac'h da zont ganen? Goal dano eo o feiz var a velan. »

Eno e zoa neuze, e mesk ar re all, eun den yaouank euz a Gleder, he hano Kergour. Lod a ra an Nuz anezan; ni, ken etrezomp Kastellis, ne reomp nemet Kergour. Ma ne blij ket deoc'h Kergour, lakit anezan an Nuz; evidon-me a lavaro Kergour evel va c'hen-vrois.

Kergour a zavas eun nebeut he voues, hag a lavaras gant eun humilite vras :

« Mar kirit, va zad, daoust ma n'oun ket kals a dra, me yelo ganeoc'h da veo da varo; ha goude tout, bolontes Doue bezet great! »

— « Doue da zigollo, va mab, euz ar pezh a rez brema, eme Baol; ker-kouls, hen diskleria a ran did,

Pe dec'h pe na dec'h ket,
Ne po mik drouk ebet. »

— « E pe leac'h e ma da gleze, emezan adarre? »

— « E ma-hen ama ganen ouz var gouriz, eme Gergour. »

— « Gortoz ma vo benniget, va mab. Guir eo, ne ket gant klezeyer e stourmimp ouz al loen garo; mez c'hoant am euz da ziskues did va

c'harantes, ha da baea did var an eur da gourach ha da galoun vad. Var ar c'hleze-ma, benniget ganen, ra ne guezio morse na disenor na dismegans! »

Hag e vennigas ar c'hleze, hag ho daou enn end.

36

Ar zarpant stlapet er mor.

Ar zarpant, kerkent a ma klevas strons ho zreid, a dennas he benn er meas d'he harpa var eur roc'h e giz m'oa boaz da ober, hag e taolas tro var dro eur zell strafillus, evel eur soudard prest da zailla e kreiz an emgann. Kergour a reas eur skrijaden.

« Kergour, na dec'h, eme Baol. Daoust ha ne peuz ket lennet ar c'homzou-ma enn Aviel : Gant m'o po feiz, e valeoc'h var an aered viber hag ar gruet d'ho bresa. »

Pa zeas mouez ar zant beteg ar zarpant, he-ma en em zastumas guella

ma elle, hag en em stlejas en eur greua e guelede he gao. Paol a gomzas outan evellen :

« Petra rez-te ama, skigner milliget an oll diaouleres ? Perag e teues-te e ti ar re all evel enn da di da-unan ? Da dad en doa lavaret ive : Mont a rin da azeza var menes an Testamant, tost d'an avel anternoz ; pignad a rin enn env, ha par e vizin d'an Oll-C'halloudek. Mez siouas dezan, eul lamm goullto a reas, hag e puns an ifern e kuezas azoug he benn. Gapes e c'hoarvezo kement all. Ne ma ket ama dirazot Eva nag Adam da douella. Ni zo bugale d'an eil Adam, en deuz desket deomp e pe fesoun da gastiza. Torr da imor fall ha da rogentes ; deuz er meas d'am c'haout, ha deuz buan. »

An aneval udur a ruzas goustadik etrezek ar zanten eur skrigna he zent, hagen eur leuskel sutadennouker skiltrus, ma tregerne an enezen. Paol ne zaleas ket da staga he stol ouz he c'houzouk :

« Kergour, emezan neuze, krog e lost ar stol, ha chas al loen didalvesma var da lerc'h evel eur c'hi. »

Kergour a grogas stard, ha Paol a gasas ar spountail a daoliou baz beteg an aod, e kostes an nord. Eur vech erruet e bord ar mor, e lavaras d'ar zarpant :

« Sarpant didruess, lez ac'hanon da gemeret va stol diganes, ha divoall da loc'h. »

— « Brema, p'am euz bet va stol, emezan adarre, gra eul lamm enn dour, hag arabad did aviziken klask dont er meas da ober drouk da zen. »

Lammet a reas raktal enn eun islounk a veler c'hoas enn tu all d'an enezen, hag e reer Toul ar Zarpant anezan. Eno e vez ar mor bepred fuloret, hag e klever gant ar goagennou eur c'hrosmol direiz.

Stol sant Paol a viret guechall gant doujans e Kastel, beteg m'eo bet devet, brema e zeuz tri c'hant vloas benag, gant eun dournad eretiked fallagr. Eur stol all a virer e Baz ; sant Paol en deuz he douget alies, mez n'edo ket gantan pa zeas da stourm ouz an ærouant.

Petra reas Guitur da Gergour ?

An oll a yoa bodet var eur grea-
c'hen, o sellet a bell ha dizamant ouz
ar pezh a dremene. Pa veljont oa beuz-
zet ar zarpant, e tiredjont da druga-
rekâd Doue hag ar zant. Guitur a yoa
ganto er penn araog.

« Gounezet mad oc'h euz o terves,
va breur, emezan da Baol; poent eo
deoc'h dribi eun tam boued; kerzomp
var êun d'ar pales. »

E leac'h mont d'ar pales var êun,
Paol a yeas d'an iliz da veuli an Oll-
C'halloudek euz he vadeles enn he
gever, he velezen ha kals tud ouz he
heul. Echu he bedennou gantan, e
tistroas da gaout ar c'hount.

Etre daou oa bet aozet eur fest braz;
ar re a yoa pedet en em lakeas ouz
taol, Kergour an eil goude ar zant.

E fin ar banked, Guitur a lavaras :
« Kergour, va mignoun, ne vezo
muy Kergour oc'h hano; an Aotrou
Kergournadeac'h a vezo great ac'ha-
noc'h. Douarou talvoudus a roan

deoc'h ha d'o pugale var o lerc'h e
parres Kleder; eno ec'h elloc'h sevel
eur maner, ha beva e giz enn dijentil.
Bezit ato kalounek ha den a feiz, evel
ma zouc'h en em ziskuezet irio. »

E nested Kergournadeac'h e zeuz
bet abaoe hag e peb amzer tud bru-
det ha brezellourien dispar. Divar
lignes Kergournadeac'h eo bet great
ar guerziou-ma :

Araog ma voa Aotrou e neb leac'h,
E zoa marc'hek e Kergournadeac'h.

Beteg m'eo bet serret an ilizou er
c'hanved diveza, Aotrounes Kergour-
nadeac'h o doa ar guir da zont da gin-
nig ho ofrans var an aoter vras e
Kastel, eur c'hleze ouz ho gouriz ha
kentrou alaouret ouz ho boutou, d'ar
zul var lerc'h eizvetes sant Per ha
sant Paol ebetel, ar pezh n'en doa ni-
kun kounje da ober nemeto. Guir o
doa ive, d'ar memes derves, da azeza
epad Gousperou var dron Eskob
Leon. Ar guiriou-ma a yoa bet roet
dezo enn enor da Gergour, penn
kenta ho familh.

Maner Kergournadeac'h a veler
c'hoas e kichen bourg Kleder. Eur

maner kaer eo bet herves an doare,
mez ne jom muy nemet lod euz ar
mogeriou. Divar ar maner-ma e lava-
ret :

Pa n'oa maner e neb leac'h,
E zoa kastel e Kergournadeac'h ;
Pa zoa kastel e peb leac'h,
E zoa pales e Kergournadeac'h.

**Pe seurt anaoudegas en devoe Guitur
da zant Paol ?**

Goude beza komzet ouz Kergour,
Guitur a gomzas ive ouz ar zant :

« An douar, emezan, a dle beza
d'an ini en deuz-hen gounezet er bre-
zel. Ogen, va breur muya karet, an
enezen-ma a zo bet gounezet irio ga-
neoc'h divar goust ar zarpant, a yoa
mestr enni muyoc'h eget na zoan. He
rei a ran deoc'h, pales hag all, ha me
a yelo da Gastel. Abaoue m'oc'h euz
diskaret an idolou ha dic'hriziennet
ar gizioù fall er gear-ze, ne gavan ket
ken dies mont di da jom. Ouzpenn,
kemerit, mar plij, diganan leor ar

Pevar Avieler am euzskrivet va-unan,
hag edon o peurechui pa zouc'h di-
guezet enn on toues. »

Al leor, a zo menek anezan ama, a
zo bet dalc'het dindan alc'hues epad
meur a ganved, evel relegou prisius,
e Kastel. Unan euz a eskibien Leon,
Guillou Rochefort, a roas urs er bloas
1352, d'he c'helei gantarc'hant alaou-
ret. Nag a draou kaer a zo bet kollet
dre lezireges an dud, pe laeret ha
distrujet dre ho fallagries ! Brema
n'oar den petra eo deuet leor Guitur
da veza.

Guitur, herves en doa lavaret, en
em dennos e Kastel, goude beza bet
he vennos digant sant Paol ; ha sant
Paol a lakeas kempenn pales ar
c'hount, hag he renka enn eun doare
deread evit ober anezan eur gouent.
Eveza n'oa ket kals a zour dous enn
enezen, e skoas var an douar gant he
vaz, ha kerkent e strinkas eun eye-
nen a veler c'hoas enn aod. Feunteun-
Paol eo hanvet, ha teuler a ra foun-
nus, nemet e teu bemdes ar mor enni
pa vez ar gourlenn.

Echu an oll labourou, ar zant hag
he veleyen en em zastumas asambles

er gouent neves, da zervicha Doue e kreiz ar peoc'h hag ar zioulded. Eur maread tud euz ar bed a c'houlennas beza digemeret enn ho c'houmpagnunes, ha var boez heulia ar reolen merket d'an oll, e vezent resevet.

Ho niver a greskas buan eb noazout d'ho zanteles, kountrol eo; rag sulvuy ma zoa kals anezo, sulvuy a skueriou kaer a valent dirag ho daoulagad. An eil en doa c'hoant da geida egile, pe da veza treac'h zo ken; ha bep ini n'en doa ken aoun nemet da veza var lerc'h ar re all.

39

Reolen kouent sant Paol e Baz.

Reolen sant Paol a yoa striz meurbed; tri zra a gemenne d'he ziskibien: ar beden, ar c'hastiz hag ar studi; hag an tri zra-ma a rankent da zeveni, dindan boan da veza kaset kuit.

Ar beden dreist oll na eane ket er gouent. Ar zant en doa kemeret evitan he-unan hag he vugale ar c'hom-

zou-ma euz ar Skritur sakr: « Sine intermissione orate, oportet semper orare et nunquam deficere; pedit eb eana, red eo pedi bepred eb paoues morse da bedi. » Setu perag e zeant dalc'hmad asambles da veuli Doue ec'hars an aoteriou. Goude ze, e tistroent d'ho labour; mez an iliz ne jome ket goulo. Epad ma veze an darn vuya o pleustra var ar pez o doa da ober, unan benag, ha bep ini d'he dro, a gendalc'he da bedi er japel evit he vreudeur a yoa er meas, evel m'en doa great Moizes guechall d'ar bobl a Israel. Ar re zo ken a yoa er meas ne zistailent ket eur moument diouz ar beden; rag ho mestr en doa desket dezo penaos santifia ho dervesiou, en eur zével alies ho spered hag ho c'haloun var zu Doue.

Kastiza a reant ive ho c'horf dre ar goasa pinijennou. Ouzpenn ma ne zrebent nemet louzeyer glas pe grisiou poas, ha bara eiz great gant bleud ha ne veze ket bet tamouezet, ar yuniou ganto a veze stank, hag a bade alies beteg daou ha tri derves. Ne roent nemeur a amzer d'ar c'housked; eun tam planken gant eun nebeut bizin

seac'h a zerviche dezo da vele. Ho guiskamant a yoa dister, ha ne veze na tommoc'h er goan na skanvoc'h enn an; ne zougent e peb mare euz ar bloas nemet eur porpant reun, ha var c'horre ar porpant-ma, eur zae ir great gant glan groz pe gant kroc'hen gavrik. Lod a yea beteg skei didrues ganto ho-unan, evit lâkâd ar c'horf da zuja d'an ene.

Paol hag he velezen a yoa deuet oll da veza abil bras e skol sant Ildud; ne voe ket dies dezo ober skol vad d'ho zro d'ar venac'h all.

Ar Skritur sakr a studient ar muya; mez ar skianchou all ne voent ket dilezet kennebeut. Er Skritur sakr e kavent estreget sklerijen var ar feiz hag ar relijion; kaout a reant c'hoas a hep seurt kenteliou kaer evit maga an humilite, ar basianted, ar chastete hag an oll vertusiou kristen.

Eb na zonzent, kouent Baz a yoa eun evelep seminer, el leac'h ma plije da Zoue prepar enn he vadeles misio-nerien kalounek ha santel abenn dive-zatoch.

Ar bobl o klask kaout sant Paol da eskob.

Na Paol nag he velezen ne joment atao enn ho enezen. Bez e zeant alies zo ken, ini hag ini, daou ha daou, tri ha tri, var an douar bras da brezek an Aviel. N'elle den herzel outo. Enn ho baleou abostolik, e c'hounezent da Zoue ar bayaned a yoa c'hoas goal stank er vro, hag e lakeant var end ar zilvidiges ar gatoliked dister ha didalves o doa ankounac'heat ho c'hrean-sou. Ar feiz a yoa bet skignet e Leon guechall, gant belezen deuet lod diouz kostes an Naoned, lod all diouz kostes Enes-Vreiz; mez anter vouget oa bet e kreiz an dismantr hag ar brezellou, ha pell a yoa n'o doa bet Leonis eskob ebet enn ho zoues.

Pa veljont pegement a froues a rea Paol enn eneo, ar pennou bras anezo a yeas da gaout ar c'hont Guitur, hag a lavaras dezan:

« N'e ket eb abek en deuz an Doue trugarezus digaset deomp eur c'hou-laouen tom ha skedus meurbed, a

c'huez enn or c'halounou tan ar garantès, ha sklerijenn ar viriones enn or sperejou. Mar kirit, e zaimp asambles, pe c'hui oc'h-unan, pa zouc'h kar ha mignoun d'ar zant, d'he bedi da gemeret ar garg a Bastor varnomp. Den er c'harter-ma, nemet an dud fall, na glasko enebi. Anavezet eo gant an oll; an oll o deuz gullet, pe glevet hano euz ar burzudou bras en deuz great; he vertusiou a zo ker sklear hag an eol d'an daoulagad; ar re ne zoutont ket anezan dre respet, a gren dirazan dre spount. Ne ve ket kavet eun all ken galloudus hag hen, na guest evel dan da beurziskar ar fals kredennou, da lakâd ar furnes hag an devoision da ren e pebleac'h, ha da zevel a neves Eskopti Leon e giz m'eo bet a ziagent. E serr eun Eskob, on devezo beleyen ha klouer, hag an Iliz enn or bro a vezo ken deread hag er broyou all. »

— « Guir a livirit, eme Witur, ha ne c'houlennan ket vell. Mez, kaer o pezo, ne deuoc'h ket a benn euz va c'hender; ne fell ket dezan a grenn beza Eskob. Alies em euz kinniget ar garg hag an enor dezan, ha pa

zean re ir, e c'hourdrouze mont kuit. Arabad e ve deoc'h klask gounid gant komzou flour eun evelep den; goasoc'h eget paoues a rafac'h. Em spe-red avad e zeuz divoanet eur mennos, hag a gav din a zo mad. Laoskit ac'hanon da ober va zonz, ha marteze e troyo an traou kerves o polontes ha va ini. »

41

Sant Paol kaset da Baris var eun digares.

Eun nebeut dervesiou goude an drama, Guitur a dreuzas ar mor da vont da Vaz, hag o veza diguezet er gouent, e saludas Paol gant respet, hag e koumansas evellen :

« Gouzout a ran, va breur muya karet, e zouc'h ato prest da ober plijadur din, evel ma zoun deoc'h. Ogen, abaoe m'en deuz ranket Juduval, or roue-ni, tec'het da Baris e pales Childebart, roue ar Fransizien, e zeuz tremenet meur a dra, hag e kar-

jen kaout divarno ali an daou roue. Estreget eur vech, em euz kaset kan-naded da Baris; siouaz, pe n'o deuz ket sevenet ho c'hevridi gant lealded, pe int bet prizouniet ha lazet enn end, n'euz fers penaos, ar pezh a zo sur eo, n'em euz resevet kelou ebet anezo. Gouskoude, ezom am euz, hag ezom bras, da regli eferiou talvoudus a zell ouz mad ar vro, ha n'ellan ket regli va-unan. Me am euz sonjet ennoc'h. Mar be o madeles mont beteg Paris d'en em glevet gant ar Brinsed, e rentac'h din eur zervich euz ar re vrasa. Deoc'h ne vo ket ken risklus ha d'eun all. C'hui zo manac'h, eun den santel ouc'h ive; piou a gredo noazout deoc'h, pa ne velint arm ebet enn o taouarn nemet ar Groaz benniget ? »

Paol a respontas :

« Va breur, netra ne gavin re zies evit ober plijadur deoc'h, ha dreist oll evit ober vad da Leon, a garan n'oun dare pegement abaoe m'oun bet digaset ama gant Doue. Kountit din ar pezh oc'h euz c'hoant a ve great, ha me rayo guella ma ellin. »

Ar c'hount a gountas dezan an efe-

riou penn da benn, ha goude e lavaras :

« Ne lakin ket deoc'h an eferiou dre skrid, gant aoun e kuesfe ar skridou etre daouarn an enebourien. Eul lizer o po diganen gouskoude, eur lizerik berr, peadra netra ken evidoc'h da veza anavezet gant an daou roue; siel Juduval ha siel Childebert a lakin varnan, ha kerkent a ma velint ho ziel, e vouizint eo euz va fers e teuit, ha n'o pezo droulans ebet diganto. »

Antronos sant Paol a yeas enn end, eb tam disfizians ebet, gant daou euz he veleyen. Sant Jaoua en doa karget da c'houarn he gouent, keit a ma vije er meas euz ar gear.

Eun dra benag a rankomp lavaret ama divar benn sant Jaoua; diveza-toc'h on devezo muyoc'h c'hoas da lavaret.

Sant Jaoua a yoa mab da eur c'hoar da zant Paol, hag unan euz he vreu-

deur a voe tad koz da zant Tenenan. Mamm sant Jaoua her c'hasas abred da ermitach sant Paol enn Enez-Vreiz, mez an den yaouank ne deas ket da heul he yountr e rouanteles Mark. Distrei a reas da vaner he gerent, hag edot o klask he zimezi da eur brinses a renk uel, pa c'hoanteas kuitad ar bed.

O veza klevet oa eat sant Paol da brezek an Aviel var an douar bras, e treuzas ar mor d'he dro. An avel a daolas he lestr enn tu all da Eusa, beteg Brest hag ar Faou. Eno e tiskennas.

Sant Judul, abad kouent Landevennek, en em gave d'an ampoent er Faou. Jaoua, hag ar verdeidi a yoa gantan, her saludas gant kals a respet, hag a c'houlennas beza digemeret e kouent Landevennek. Sant Judul ne lavaras ket nan, pa deuas da c'hout piou ha pe seurt doare tud oant; ha setu ar re-ma pignad adarre var ho lestr, ha mont gant sant Judul da Landevennek. Jaoua a viskas raktal sae ar venac'h, a heulias penn da benn reolen an ti, ha goude beza bet epad eur bloas pe zaou eur skuer evit

an oll, e voe resevet da vad, hag e voe great eur manac'h anezan.

Brud sant Paol en em skigne dija e pevar c'horn ar vro; ne veze kount, hag e Treger, hag e Kerne, kouls hag e Leon, nemed euz he vurzudou es-tlammus, euz he zanteles dispar hag euz he vertuziou abostolik. Dre ze, kouent Baz a yoa ken anavezet hag ini Landevennek, petra benag m'oa bet digoret divezatoc'h.

Jaoua n'ellas ket en em zerc'hel; eun youl birvidik a zavas ennan da vont enn dro da gaout he vestr koz hag he yountr. Pedit a reas sant Judul da rei kounje dezan, hag o veza bet aotre digant he zuperior, e teuas da veva gant sant Paol e Baz, hag e tremenas eno meur a vloaves, ato er penn kenta dre an aket bras en doa da zeveni he oll deveriou. Ne ket estoun e voe bet liziet ar gouent ennan, pa rankas sant Paol kerzout etrezek Paris.

Sant Paol hag an daou roue.

Neuze n'oa ket ken eas mont da Baris evel ma zeo brema. Meur a zerves, meur a nosves a rankas implija Paol evit tizout beteg eno. Abars ar fin ec'h erruas; ha daoust ma zoa skuis maro, ne zaleas ket da vont etrezek ar pales.

Digemeret mad e voe gant ar rouaned, ha rei a reas da Juduval lizer Guitur, rag da Juduval oa bet skrivet. Juduval hel lennas goustad da genta, ha raktal her c'hinnigas da Jildebert. Childebert hel lennas d'he dro, a voues uel. Setu ama petra yoa varnan :

« D'ar roue Juduval. Pa resevoc'h al lizer-ma, Aotrou Roue, o pe sonj e vezo dirazoc'h eun den Doue, hanvet Paol. Me o ped da lakâd he zakri eskob evidomp enn despet dezan. Kant kuech on deuz klasklet rei dezan ar garg-ze, ha bep tro en deuz refuzet. Deoc'h e plego marteze. N'euz ket eun den var an douar hag a ve

ken din dre he vouizieges, he furnes hag he zanteles, da veza e penn eun Eskopti. »

Pa glevas Paol ar pezh a yoa el lizer, ec'h en em strinkas d'an daoulin :

« Enn han' Doue, emezan en eur ziroll da lenva, na dit ket da lakâd ar zamm-ze var va diskoas. »

Childebert a zavas anezan gant kals a garantès divar an douar, hag a lavaras :

« Paol, mignoun Doue ha va mignoun, perag e fell deoc'h leuskel o talanchou kuzet, talanchou hag oc'h euz bet digant an Oll-C'halloudek evit ho lakâd da dalvezout? Perag ive dinac'h yeo an Aotrou a zo ken dous d'ar c'houzoug, hag he veac'h a zo ker skanv d'ar c'hein, pa vezont douget a galoun vad? Divoallit e ve tamallet deoc'h gant ar Barner e zouc'h bet re bis evit o nesa. Ne ket ar re o devezo great drouk ebken a vezo stlapet e tan an Ifern, mez ar re n'o devezo sounjet nemet enn ho eas hag enn ho mad ho-unan. »

Paol ne lavare ger, mez anat oa n'en doa ket chenchet mennos. Neuze

Juduvalac'huibanasgoustad eskouarn
Childebert :

« Laoskomp anezan irio, emezan ;
ouzomp-ni ne zento biken, mez d'an
Eskibien e plego. »

Ha Childebert a lavaras da Baol :

« Va mignoun, skuis bras o kuelan ;
it enn eur gramp euz va fales da
gemeret eun tam ean hag abaster, ha
varc'hoas e vezo kount etrezomp euz
an eferiou ouc'h deuet da renka.

Sant Paol eskob enn despét dezan.

Sant Paol ne gouskas berad. Chom
a reas hed an noz da bedi Doue hag
an oll zent, da gaout trues outan ;
mez enn dro-ma ne voe ket selaouet.

Pa zeas diouz ar mintin e solier
Childebert, e kavas eno, gant an daou
roue, tri Eskob a yoa deuet da Baris
evel dan divar benn eun efer benag.
Guelet a reas enn eun taol oa kollet,
rag n'oa ket guest da lavaret ennan
d'eun Eskob.

An Eskibien a gomzas outan gant
kals a zouster, mez ive gant kals a
nerz, hag o velet ne roe respount
ebet, e leverjont :

« Paol, dirag Doue hag or c'hous-
tians, dirag an Iliz hag an Ebestel,
ni a gred e zouc'h galvet da veza
Eskob. Kredi a reomp ouzpenn, e
rafac'h eur pec'hed bras o refus ; hag
evelse, petra benag ma zeo poan-
ius evidomp, ma ne zentit ket, e vezo red
deomp teuler varnoc'h an eskumu-
nugen. »

Paol, spountet oll, a guezas d'an
douar enn eur grena :

« Doue va zikouro, emezan ; hag
he volontes bezet great ! Grit ac'ha-
non ar pezh a gerot. »

An Eskibien a grogas ennan raktal,
hag her briatas evel eur breur :

« On breur Paol, emezo, n'o pe ket
a zoursi ; ann Oll-Challoudek ne ket
diverreat he vrec'h ; skulia a rai var-
noc'h he oll c'hrasou, ha bepred e
vezo ganeoc'h. »

Ar zul varlerc'h, unan euz an tri
Eskob he zakras, hag an daou all a
zervichas da destou. Paol ne rea
nemet lenva hag irvoudi. Childebert

avad ha Juduval a yoa laouen bras, ha pa voe echu ar zolanite, e rojont dezan a bep seurt prezanchou kaer.

Dreist oll, digant Childebort en devoe eur vaz Eskob olifant, prisius meurbed ; hag an daou roue a lavaras dezan :

« Va zad, setu c'hui lakeat da Eskob e Leon ; an oll leveou on deuz enn Eusa, e Kastel hag e Baz, ha zo ken enn oll garter-ze euz a Vreiz, azalek ster Elorn haster Montroules beteg an daou vor, a vezo deoc'h ha d'an Eskibien all var ho lerc'h. N'elfe ket ar vro kuez a biken e guelloc'h daouarn. »

Abaoue, keit a ma zeuz bet Eskibien e Kastel, o doa an hano hag ar guir a Gount a Leon. An diveza Eskob ha kount a Leon eo an Aotrou'n Eskob De la Marche, harluet gant an dispac'herien, brema e zeuz eur c'hanved bloavesiou.

Sant Paol ha sant Guevrok

Ar pezh a zo bet kountet ama a c'hoarvezas e 540 goude donediges or Zilver. Paol en doa neuze anter kant vloas, ha triugent vloas all e chomas var an douar.

Eur vech sakret ha reglet an efერიou a yoa da regli, e zeas enn end etrezek Breiz. Mez enn dro-ma, ne voe ket ken tenn he veach. Lizeri en doa bet digant an daou roue, da veza digemeret mad e peb leac'h, ha da veza douget ha divoallet gant eur strollad soudarded euz eur gear d'eben. Diguezout a reas er c'hiz-se e Montroules.

Pa deuas ar c'helou be'eg Guitur, he-ma a yeas d'he ziambrouk gant ar veleyen hag an noblans, hag e voe digaset e triomf da Gastel. Antreal a reas da heul ar brosesion enn iliz a yoa bet savet guechall gant Konan Meriadek, el leac'h ma ma c'hoas arched mean ar roue-ma o servichout da binsin. Goude beza azezet eur pen-

nad var he dron, trugarekeat Doue ha benniget ar bobl, ec'h en em dennas er pales, pe enn ti bras en doa Guitur pourchaset dezan ha d'he gloer. Guitur ne zaleas ket da vervel e doujans Doue, kountant meurbed eus an taol brao en doa great, hag e voe gantan eun anterramant kaer.

Kenta tra a reas Paol enn he garg, eo choas tud yaouank desket ha vertuzus e toutes menac'h Baz, da ober beleyen anezo. Sant Jaoua a voe unan euz ar veleyn nevez-ma, ha sant Paol a gemennas dezan mont da gana he ofern genta da Landevennek enn he gouent koz. N'ellas ket distrei ac'hano da Leon. Sant Judul, abad Landevennek, he hanvas da bersoun e parres Braspars e Kerne, hag eno en devoe kalz da c'houzaon euz a bers ar Gernevis, evel m'her c'hountin e poent hag enn amzer.

Ar veleyn all en doa great sant Paol a voe skignet er vro diouz ma veze ezom; hag evit gouzout guelloc'h e pe leac'h e zoa ar muya defotanezo, ar zant a reas tro he Eskopti.

Edo e parres Plouzeniel, pa voe parlatet dezan divar eun den santel,

he hano Guevrok, a yoa oc'h ober he ermitach enn eun draonien, a c'halver abaoue Traon-Guevrok, hag a zo da vont euz ar bourg da Gerzent. D'he vizita e zeas, hag e chomas mantret o velet enn dro d'he benn eur gurunen skedusoc'h eget an eol; goude beza komzet gantan, he zoues a greskas c'hoas; ha kement a furnes a gavas ennan, m'her c'hemerass d'he zikour enn he labourou a Bastor.

46

Chapel Kreisker.

Sant Guevrok, a reer ive sant Kirek anezan, a yoa deuet euz a Enez-Vreiz da Leon, ha goude da Landreger, asambles gant sant Tugdual, eskob ar gear-ma. Sant Tugdual her c'hasas da zavel eur gouent, teir leo diouz Lanveur, el leac'h ma ma brema Lok-Kirek. Euz a Lok-Kirek, Guevrok en em dennas e Plouzeniel, hag euz a Blouzeniel da Gastel. Mervel a reas e Landerne, e kreiz ar beachou ir

ha poanuis a rankas ober alies evit mad an eskopti.

Meur a virakl en deuz great e Kastel; unan a gountin, abalamour ma zeo ar mirakl-ze penn-kaos m'eo bet savet divezatoc'h an Tour dantelezet.

Deiz eur gouel d'ar Verc'hes, oa eat er meas euz a gear, enn tu all d'ar mogeriou, diouz kostes ar c'hresteis, enn eur plas a hanver irio Kreisker evit lavaret berroc'h, hag a hanvet neuze Ker-Iskear, pe Gear e traon Kear. D'an ampoent, n'oa chapel ebet eno.

En eur vont gant he end, Guevrok a velas eur gemeneres yaouank o c'hiad e tal he dor.

« Penaos, eme Girek, hag e labourit da c'houel ar Verc'hes ? Paouezit enn han' Doue. »

Hou-ma a respountas grons :

« Me, emizi, n'em euz nemet va micher evit beva, hag a rank kaout boued d'an deisiou gouel evel enn deisiou all. »

Ne doa ket peurachuet he ger divalo, ma voe seizet oll eb gallout finval nikun euz he izili. Neuze ec'h anavezaz he faot, hag o veza yunet

epad eistes, e pedas ar zant da vont d'he guelet. Guevrok a yeas, hag a bareas anizi dioustu, enn eur ober sin ar groas varni. Ar gemeneres a roas he zi d'ar zant, ha Guevrok a reas anezan eur japel enn enor d'ar Verc'hes. E plas ar japel-ze, e ma brema iliz kaer ha tour dudius Kreisker.

47

Labourou abostolik sant Paol.

Sikouret gant sant Guevrok ha gant he veleyn all, Paol a lakeas nebeut a nebeut urz vad enn he eskopti. Her ranna a reas e teir loden, Leon enn dro da Gastel, Ak enn dro da Vitalmeze, ha Kemened-Illy enn dro da Lesneven. Eur vikel-vras a gargas da c'houarn bep loden dindan he aotre.

Eur maread templou payan a yoa c'hoas enn ho za; ho diskar a reas, ha bruzuna an idolou. Tud aheurtet a gave alies var he end, hag a glaske herzel outan. D'ar re-ma e komze gant

nerz eun Abostol, hag e spounte anezo enn eur brezeg divar an Ifern, ar Varn hag ar Maro. Pa ne reant van evit he glevet, e rea miraklou dirazo, da ziskues oa guir ar pezh a lavare; ha dalc'hmad e teue a benn euz ar c'hallounou ar re galeta. Mez he vrasa mirakl eo c'hoas he vuez santel; ar guel euz he vertusioù hag euz he bini-jennou a skoe var ar sperejou direiz taolioù pounnerroc'h eget he oll zarmounioù hag he oll vurzudou.

Dre ma kreske niver ar gristenien, Paol a zave parresioù hag ilizou neves. Kazi ann oll ilizou a yoa bet distrujet er vro, anter kant vloas benag araog, gant eur roue payan hanvet Korsold.

He-ma n'oa ket euz a Vreiz, mez saillet oa varnomp dre vor euz a gastes an anternoz, eur vanden Danmarkis ouz he heul. Treuzi a reas Leon evel ar gurun, en eur laeres, en eur laza, en eur devi kement a gave. Gouskoude, n'ellas ket tec'het kuit dizamant. He listri a yoa var ar zeac'h e kichen Karantek, ha ne c'hortoze nemet an tre da bignad varno, pa voe paket ha treac'het gant ar prins Breizad Rivallon.

E memor euz ar c'hounid-ze, e voe savet d'ar Verc'hes Vari er bloas 502 chapel Itroun Varia C'halloud, Virgo potens, a reer Kallot anizi brema.

Mez nag a zrouk en doa great al loen goues, ha nag a draou a jome da rapari var he lerc'h! Paol a lakeas he oll aket da gempenn ha da zresa ar pezh a yoa bet dismantret.

48

Skolioù ha kouenchou savet gant sant Paol

Petra dal kaout ilizou ha parresioù, ma ne vez ket a veleien da vont enno? An Eskob santel her gouie, ha setu perag e tigoras kouenchou goazed ama hag aount. Unan a zigoras e Kerlouan, var bord ar mor, el leac'h ma ma brema chapel Paol; eun all a zigoras e Guikar, eun all e Lambaol-Guimiliau, diou all divezatoc'h er Relek-Plouneour hag e sant Vaze-Konk; peder all en doa dija digoret en Eusa, e Lamber, e Lambaol-Guitirme hag e Baz.

Petra reat er c'houdenhou-ze, nemet ar pezh on deuz merket divar gouent Baz? Pedit, yun ha studia; pedit evit tenna gras Doue, yun ha kastiza ar c'horf evit beza treac'h d'an techou fall ha tizout enn uella pazen euz ar zanteles, studia evit dastum guizieges da gentelia ar bobl.

Ar venac'h an abilla hag an delli-dusa e peb fesoun, goude beza tremenet pevar pe bemp ploas enn ho c'houent, a veze digaset da Gastel. Eno e zoa eur skol uelloc'h, eur seminer, e pales ar zant; eno e veze diskuezet d'ar re a deue kement a zo red evit reseo an Ursiou, hag an oll Ursiou a resevent an eil goude eben. Eur veach beleget, pe e vezent dalc'het e Kastel da zikour sant Paol, pe e vezent hanvet da bersoun er parresiou.

Ar bersouned o doa travaolac'h da ober o prezeg an Aviel, oc'h oferenna, o sakramanti, o lavaret ho fedennou, hag o redet ar vro da velet an dud klanv ha da glask an denved dianket. Gouskoude Paol a gemenne dezo digeri bep a skol enn ho fresbitaliou, ha setu ama penaos ec'h en em gemerent.

Choaz a reant eun den yaouank pe zaou, lemm ho spered, hag e teskent dezo eun nebeut euz a bep tra, dreist oll, ar c'hatekis. P'o doa eun tamm deskadures, e vezent lakeat da vistri, ha kement krouadur a yoa er vro, paour pe binvidik, en doa kounje da zont ganto d'ar skol. Bandennajou bugale a zirede bep mintin, lod euz ar maneriu, lod euz an tiez soul, ha diouz an abardaes e tistroent d'ar gear. Ker brao e vezent kelennet, ma zoant eur skuer evit ho zud, hag alies e c'hounezent da Zoue darn euz ho c'herent. Alies ive e c'hoanteent beza menac'h, hag e zeant da unan pe unan euz ar c'houdenhou ayoaskignet enn Eskopti.

Else, tri zeurt skol a yoa evel a zo brema, skoliou bian er parresiou, skoliou brasoc'h pe skolachou er c'houdenhou, hag eur skol uelloc'h eget ar re all, e Kastel. Estreget er bresbitaliou, end-êun, e zoa skoliou d'an ampoent; an Ermited, a yoa stank er mare-ma, a zastume enn ho ermitach bugale an amezeges, hag a rea skol dezo.

Mez den ne ranke mont d'ar skol ma ne felle ket dezan, ha den ne

ranke chom er gouent ma n'en em blijke ket, ha den ne ranke reseo an Ursiou ma n'oa ket galvet. An dra-ma a velimp skleroc'h pa vezo menek euz a zant Herve.

49

Ar reuz e Kerne

Sant Paol ne zoursie nemet euz a Leon evel just, ha ne zonje nemet e Leon, ha travoalac'h en doa gant Leon, pa voe red dezan mont da lakâd ar peoc'h hag an abaster e Kerne. Eur reuz spountus a yoa savet eno.

Sant Jaoua, var boez kemeret poan hag amzer, a yoa deuet a benn euz he barresionis, petra benag ma zoant bet goal direis da goumans; ha memes, er parresiou all divar dro, en doa great kristenien mad euz eur maread pec'herien ha payaned.

Aotrou ar Faou a gemeras kas outan abalamour da ze. An dijentilma, o veza c'hoas touellet gant an

idolou, n'oa ket evit gouzaon ar venac'h hag ar velezen. Eun derves, e voe lavaret dezan oa en em assamblet sant Judul abad Landevennek, sant Tadek abad eur gouent all, ha sant Jaoua, enn eur japel hag a yoa tost d'he zouarou. Raktal e red di gant eur vanden tud hen difeiz ha ken di-boell hag hen; hag en eur erruout e laz an daou abad. Dre c'hras Doue, sant Jaoua a ellas tec'het kuit ha savetei he vuez.

Gouskoude eun evelep torfet a goustas ker da aotrou ar Faou, ha d'ar c'harter m'edo o chom ennan. An dijentil a voe bourrevet enn eur fesoun skrijus gant eur strollad drouk sperejou a yoa eat enn he gorf, hag eun dragoun euzus a zifourchas euz ar mor, hag a lakeas an drubuill hag ar spount e pevar c'horn ar vro; rag lounka a rea kement den ha kement loen en em gave dirazan.

Oc'h en em velet enn eur stad ker reuzeudik, tud ar Faou a c'halvas sant Paol da vont d'ho zikour; rag klevet o doa a bell zo, gant an dremenidi kouls hagant sant Jaoua, pegement oa bras he c'halloud dirag Doue.

Sant Paol a gave dies dilezel he Eskopti ; evelato, n'ellas ket herzel ouz pedennou ar Faouis, hag o veza kemennet da bevar pe bemp manac'h dont gantan, ec'h en em lakeas enn end.

50

Sant Paol er Faou.

E Lambaol-Guimiliau e kemeras eun tamik ean da lavaret he Ofis. Epad m'edo gant he vrevier, eun Eal en em ziskuezaz dezan, haga gomzas evellen :

« Paol, n'o pe ket aoun da boursu o peach, mad e troyo an traou. »

Ar ger-ze a roas dezan eun nerz neves, hag e kendalc'has da vale.

Sant Jaoua en doa bet kelou e tlie sant Paol dont d'ar Faou. Mont a reas eta beteg ar gear-ma, hag e veza n'oa ket c'hoas diguezet he yountr, e zeas d'heziambrouk. E kichen Koatgars ec'h en em gavjont an eil gant egile, hag ec'h en em zaludjont ha briadjont evel daou vreur.

Sant Jaoua hag he goumpagnunes o doa kerzet ker buan, m'oant dare da vervel gant ar zec'hed, ha ne velet feunteun ebet.

« Pèdomp, eme an Eskob benniget, hag on devezo dour da eva digant ar Roue madelezus. »

Echu ho feden, sant Paol a lavaras da Jaoua skei gant he vaz enn eul leac'h a verkas dezan ; kerkent eun eyenen fresk ha sklear a zilammas diouz an douar, hag e torjont ho zec'hed goude beza trugarekeat ar Mestr bras.

Pa errujont er Faou, an oll, tud divar ar meas ha keris, en em vodas var ar blasen.

« Mont enn iliz, eme Baol, kouls ar gristenien evel ar re n'int ket bet badezet, hag e klevoc'h ganen. »

Neuze ar zant a reas dezo eur zarmoun gaer, hag e fin ar zarmoun e lavaras :

« Evit m'o pezo, ken etrezoc'h kato-liked dister ha payaned, eun desteni anat eo guir ar feiz a brezegan, me hen tou deoc'h, diarbennet e vo, dre c'hras Doue hag enn hano Jezus-Krist on Aotrou, an aneval noazus

a zo enn o toues, gant ma reot pini-jen euz o pec'hejou, ha ma trooc'h kein d'o fals kredennou. »

Ar bobl a respountas en eur grial fors :

« Ia, pinijen a raimp, ha bruzunet e vo an idolou, ma vez harluet pe ja-dennet al loen fallakr. »

— « Da genta, eme Baol, e livirin va Ofern, ha goude me velo. »

51

Dragoun ar Faou.

Paol a lavaras he Ofern gant eun devoision birvidik.

« Brema, eme Baol, e zan da vid an dragoun ; chomit ama, ha divoallit da loc'h ac'halen. »

Ne deas nemet beteg treujou an iliz. Ac'hano, e c'halvas an dragoun a voues uel :

« Dragoun, mab an ifern, emezan, dont ama a gemennan deoc'h, ha dont eb argila ; sentit ouz o Mestr. »

An dragoun en em stlejas goustadik

da heul ar zant, hag a ruzas beteg an aoter, digor ha leun c'hoad he c'hinou, an tan en he zaoulagad, moget o tont euz he fronellou, he skant ker sounn ha birou var he gorf. An oll a grene gant ar spout. Mez Paol a skoulmas he stol en dro d'he c'houzouk, evel ma vije bet eun oan dirazan, hag a lavaras da Jaoua :

« Jaoua, plantit o paz enn douar, ha stagit an dragoun outi gant lost ar stol. »

Jaoua a stagas an dragoun, ha Paol a lavaras d'ar bobl :

« Distroit d'ar gear, sioul ha didra-bas ; an dragoun ne glasko ket tec'het kuit. O pe sonj avad euz ar pezh oc'h euz prometet. Evidon-me a yelo var eun da gaout aotrou ar Faou, penn-kaos euz an oll darvoudou-ma, da velet petra zo da ober dezan ; ha divezatoc'h ec'h ententin ouz an dragoun. »

Paol a yeas raktal da vaner an di-jentil, hag en eur ober sin ar Groaz varnan, e kasas an oll diaoulou euz he gorf. He gelenn a reas ive var guirionesiou ar Feiz, ha pa gavas e vouie mad avoalac'h he greansou, e pedas sant Jaoua d'he vadezi. Oll

gerent an aotrou, hag he oll zujidi, ar re anezo n'oant ket kristen, a voe badezet evel dan. Evit rapari he dorfet, an Eskop santel a roas dezan urs da zevel eur gouent, hag e memor an daou abad en doa lazet, ar gouent neves a voe hanvet Daoulas. Sant Jaoua a voe lakeat da zuperior er gouent-ma; mez karget oa ato euz a barres Braspars.

52

Dragoun ar Faou kaset da Vaz.

Pa voe renket an oll eferiou gant Paol, e zeas enn iliz da zistaga an dragoun, hag her c'has a reas d'he heul evel eur c'hi a boez he stol etrezek Leon. Erruet edo dija enn eur c'hoat tost da Lezerazien, etre Lambaol ha Guimiliau, pa ziredas var he lerc'h daou zen euz ar Faou da lavaret dezan :

« Aotrou'n Eskob, ini bian an dragoun a zo chomet er Faou, kuzet enn he doul neiz. Brazik eo, ha ne vo ket

pell e rai kement a zrouk hag hedad ; ha petra deuimp-ni da veza ? »

— « Bezit dizoursi, eme Baol. »

Hag er memes mare, e tennas he stol diouz penn an dragoun, hag e komzas evellen ouz an aneval :

« Dragoun milliget ha leun a fallagries, kemenn a ran deoc'h, aberz Doue, mont da gerc'had oc'h ini bian ha d'hen digas ama ; ha divoallit, en eur vont pe en eur zont, da noazout da zen. »

An dragoun a zentas, hag a zistroas er c'hoat gant he ini bian ; ar c'hoat-ma a zo bet hanvet abaoe Koat-ar-Zarpant.

An daou loen a voe bleniet gant ar zant beteg Enes-Vaz. Ho lakad a reas enn eur park, pell diouz an dud hag an ties, hag o veza sanket eur vaz enn douar, e stagas anezo ; ha goude beza difennet outo loc'h, ho laoskas da vervel gant an naoun. Eur veach maro, ho c'horf a voe taolet er mor.

Enes-Vaz e doa eun hano all araog ha n'ouzon ket d'ar zur pe seurt hano. Azalek ar moument-ma, enn enor d'ar burzud bras en doa great sant Paol en eur ziarbenn gant eur vaz

daou bikol spountaill, an enezen a voe galvet Enezen-ar-Vaz pe Enez-Vaz, ar pezh a reer anizi c'hoas enn on amzer.

53

Sant Herve e Kastel

Sant Paol, en eur zistrei da Gastel, a gavas eno sant Herve. An drama a yoa var dro 550 goude donediges or Zalver; sant Herve en doa neuze daou ugent vloas benag, ha sant Paol tri ugent.

Sant Herve a yoa ganet e maner Lanrioul e Guitevede. Koll a reas abred he dad Huvernion, a yoa eur barz hag eur c'haner dispar; mez he vamm, santez Rivanona, ne espernas netra evit rei dezan eun deskadures kristen. Abars dont da Gastel oa bet e diou skol; da genta e skol ar manac'h santel Marsian e kostes Tre-laouenan, ha goudeze e skol sant Urfol er Vourc'h-Venn. Daoust ma zoa dall, ne zaleas ket da veza abil bras, rag deski a rea buan ha derc'hel a rea mad kement a gleve.

Eur skol a zigoras he-unan e Lanouarne, el leac'h m'oa maro hag anterret he vamm. Mez ar respet hag an istim o doa an oll evitan abalamour d'he zanteles ha d'he viraklou, a reas dezan kaout c'hoant d'en em denna enn eur plas all, hag e laoskas he skol etre daouarn eur guchen venac'h a yoa e chom gantan.

O veza klevet oa maro sant Urfol, e zeas da genta etrezek Guitevede, rag eno en doa sant Urfol peurechuet he vuez; goude beza bizitet hag enoret bez he vestr koz, a yoa ive yountr dezan, e skoas da Gastel.

Ar vrud euz he veritou a yoa eat beteg sant Paol. He-ma ne lezas ket Herve da vont kuit; hen digemeret a reas enn he iliz-meur hag enn he zeminer. C'hoant en doa da ober eur beleg anezan, hag e roas dezan an eil goude eben an dousur hag an teir urz vian a borcher, a lenner hag a exorsist. Sant Herve n'en em gave ket din enn he humilite, da zewel uelloc'h enn Ursiou; hag o veza bet kounje digant he Eskob, e zeas pell diouz Kastel, gant eun dournad venac'h, da zigeri eur gouent hag eur skol neves.

Guelet a rit ne ket skoliou a vanke d'an ampoent e Leon, evel m'eo bet merket aziagent; guelet a rit ive ne vezelakeat den da veleg enn despet dezan.

54

Sant Paol e Mene-Bre

Er mareou-ze, e c'hoarvezas tórfejou euzus e Breiz. Komor, kount Kerne, en doa lazet c'hueac'h grek dezan, an eil goude eben, kerkent a m'en doa gouezet edont e tougen. Ar zeizvet, santes Trifina, a voe lazet gantan ive, nemet e resusitas dre c'halloud sant Gueltas. Eun evelep burzud ne lakeas ket al loen goues da veza furroc'h; ha pa ellas tapa krok e sant Tremeur bian, mab dezan ha da Drifina, e verzerias ar c'hrouadur keas, e kichenik Keraes.

Eskibien Breiz en em zastumas dre guz var Mene-Bre gant eur maread beleyen ha menac'h, d'en em glevet divar benn Komor. N'o dije ket kredet diskenn a vel d'an oll enn eur gear,

gant aoun da guez a etre daouarn eur seurt bleiz, ne rea nemet redet ar vro, bandennajou soudarded ouz he heul. Mene-Bre a zo eur greac'hen uel, tost da Louargat, etre Benac'h ha Guengam.

Eno ec'h en em gavas asambles sant Tugdual, Eskob Landreger, sant Samson, Eskop Dol, sant Gueltas, abad Ruiz, ha kalz re all. Sant Paol a rankas mont ive, mez ne deas ket he-unan.

Sant Herve, abaoue m'oa bet great exorsist e Kastel, en doa resevet digant Doue eur c'halloud burzudus var an drouk spered, ha kaset en doa zo ken an diaoul er meas euz a gorf meur a ini. Sant Paol a zonjas e kavje sikour ennan da stourm ouz eun den fallakr, a yoa evel ouz an ærouant, muyoc'h eget ouz eur c'hristen. Lavaret a reas eta da zant Herve mont gantan. Mez sant Herve, estreget m'oa dall, a veze bepred diarc'hen, hag abalamour da ze n'oa ket guest da vale buan. Ar pezh a voe kiriek ma n'erruas an daou zant e Mene-Bre nemet var an divezadou.

Miraklou sant Herve

En eur diguezout, sant Paol, dre'n abek n'en doa ket ellet en em gaout abred avoalac'h, a c'houlennas pardoun digant an oll aotrouned. Eun dijentil a yoa eno a respountas grons :

« Penaos, emezan, ar c'hoz dallik-ma eo a zo bet kaos m'on deuz ranket chom keit all da c'hortos? »

— « Va breur, eme Herve gant douter eun Eal, perag tamal din o zoun dall? Doue a yoa gwest da lakâd ac'hanoc'h dall eyeldon. Or great en deuz e giz ma plije dezan, ha mad e ve deomp he drugarekad euz kement tra on deuz bet digantan. »

An Eskibien a c'hourdrouzas an dijentil evit ar pez en doa lavaret, ha kerkent e kuezas varnan mallos an Oll-C'halloudek. Dirulia a reas d'an douar, he zaoulagad entanet oll, ha ne vele berad.

« Dourn an Aotrou Doue, eme an Eskibien enn eur voues. »

— « Ne ket mad, emezo adarre, leuskel anezan evel ma ma, dreist oll pa zeuz konsil ganeomp, ha ken alies a Bastored asambles. Abalamour deoc'h, Herve, eo bet skoet; deoc'h eo ive brema he barea. »

Herve a c'houlennas diganto dour hag olen evit ober dour benniget.

« Olen, emezo, a zo ganeomp; mez penaos e ve kavet dour var gern eur menes ken uel? »

— « Neuze, a lavaras Herve, eo red deomp en em erbedi ouz Roue an Envou. »

Hag ec'h en em lakejont oll da bedi.

Goude eur beden ir ha birvidik, Herve a reas sin ar Groas var an douar gant he vaz, hag a gemenas toulla. Prestik, eun eyenen a strinkas; benniget e voe gant an Eskibien, lakeat olenn enni, ha goalc'het daoulagad ar paour keas reuzeudik. He-ma a deuas adarre da velet sklear, ha ne vouie ket penaos diskues d'ar zant he anaoudegas vad.

E memor euz ar burzud-ma, eur japel a zo bet savet divezatoc'h var Mene-Bre, enn enor da zant Herve ha d'ar zent a yoa gantan d'ar mare.

Divizou ar Zent.

Konsil an Eskibien a zigoras rak-tal. Oll e voent avis da deuler an eskumunugen var Gomor, ha taolet e voe. Dija sant Gueltas, goude maro Trifina, en doa stlapet eur dournad poultrén var he vaner en eur ober drouk pedennou, hag ar mogerieu a yoa bet dismantret oll ha diskaret; mez an torfetour euzus he-unan n'oa bet nemet glazet. Enn dro-ma, e kuezas klanv var an eur, hag e varvas evel eun den milliget, e kreiz ar brasa tourmanchou.

Epad ar c'honsil, p'o deveze eun arzaou benag diouz ho labour hag ho fedennou, sant Paol, sant Tugdual, sant Samson ha sant Gueltas, a veze dalc'hmadaz asambles, o kounta an eil d'egile ar pezh a yoa c'hoarvezet ganto.

« Daoust ha c'hui, eme zant Paol da Zamson ha da Jildas, a elfe rei din eur c'helou benag divar benn or mestr

koz, an aotrou sant Ildud benniget? Abaoue m'oun eat euz he gouent e Pir, n'em euz ket klevet hano anezan. »

— « Va mignon ker, eme Zamson, me a zo gwest da ober ar blijadur-ze deoc'h; rag an aotrou sant Ildud benniget a zo deuet da vervel em Eskoptime. »

— « Penaos? eme Baol; maro eo! Eur zant muyoc'h er Barados da veuli an Dreinded zakr. Lavarit din, me o ped, va breur muya karet, ar pezh a ouzoc'h divarnan. »

— « N'em euz ket kalz a dra da lavaret, eme Zamson. Ildud n'oa ket troet d'en em fougeal, hag a guze ar vad a rea. An nebeut am euz klevet gantan a gountin deoc'h. Pa zouc'h eat dioutan, Paol, me gave din e vije bet tristoc'h, rag varnoc'h e fisie da ren ar skol var he lerc'h; mez nan, an den-ze a yoa boaz da heulia bepred bolontes Doue, ha sulvuy m'en deveze da c'houzaon, sulvuy e veze laouen. Klask a rea gouskoude, e toues he ziskibien, unan pe unan ac'hanomp da zerc'hel he blas. Kiniget en deuz ar garg da Zavid, da

Vagloar va c'hender, da Jildas ha din-me. Ne ket guir, Jildas?

— « Ia, guir eo, e ne Jildas. »

— « Mez Jildas ha David, kouls ha me, a zo eat el leac'h m'oamp galvet, ha Magloar a zistroas d'ar bed. »

— « Penaos? eme Baol; Magloar a zo distroet d'ar bed, eur paotr yaouank ker fur ha ker chentil! »

— Laoskit ac'hanon, eme Zamson, da beurechui gant Ildud; bremaik me a lavaro deoc'h divar benn Magloar.

« Abars ar fin, Ildud a gavas eun den diouz he zoare, hag e kuiteas he gouent da vont da vev gant Doue ebken enn eun ermitach. Hed ar vech oa bet douget, evel a ouzoc'h, da yun ha da dremen eun darn vras euz a noz o pedi hag o medita; mez divar neuze e kreskas c'hoas he bedennou hag he binijennou, hag eur skrij eo koumpren peger rust oa e kever he gorf.

» Epad tri bloas dioustu e chomas evelse kuzet ouz ar bed. Mez goudeze, e savas c'hoant gantan da velet adarre lod euz he ziskibien, ha setu hen o treuzi ar mor evit dont da Vreiz-Izel. Disken a eure em c'hear a Eskob, e

Dol, hag he zonzj a yoa kerzet ac'hano beteg Guened, Landreger ha Kastel, rag klevet en doa lod euz an traou kaer oc'h euz great ho tri, ha ne veze hano gantan nemet euz a Baol, Jildas ha Tugdual. Mez prestik e varvas etre va divreac'h, leun a veritou, d'an oad a gant vloas. »

57

Sant Magloar ha sant Tugdual

« Ha Magloar? eme Baol. »

— « Magloar, eme Zamson, a zo ganen abaoue pell hag ir amzer, ha n'euz ket eur beleg santelloc'h evitan e neb leac'h. »

Neuze Samson a zanevellas buez Magloar e giz m'eo bet merket ganen er penn kenta euz al leor-ma; ha goudeze, e komzas evellen :

« Brema d'ho tro, Paol, vab breur. N'euz ken brud e toues ar Vretouned, nemet euz ar spountailloù a ziarben-nit, hag euz an oberou burzudus a rit enn oc'h eskopti Leon, ha zo ken e

Kerne. Darn anezo a zo deuet beteg ennomp, darn all a zo bet lavaret deomp nevez zo gant Herve ; mez c'hui ho c'hounto guelloc'h. »

Sant Paol a gountas penn da benn he vuez, ha petra oa deuet da veza, abaoue m'en doa laosket sant Guel-tas ha sant Samson enn abati sant Ildud evit mont d'he ermitach, beteg ar bloavesiou diveza. Sant Guel-tas a reas kement all.

« Evidon-me, eme zant Tugdual, a zo bet evelloc'h e skol sant Ildud, mez en ho raog. Bez oun bet memes e Leon ; ha marteze, va breur Paol, oc'h euz klevet eun dra benag var gement-se gant Guevrok, o vikel vras. »

— « Ia, eun dra benag am euz klevet, eme Baol. »

— « En eur zont euz a Enez-Vreiz, el leac'h m'oun ganet, eme Dugdual adarre, eo e Plounger e tiskennis da genta gant eur guchen vad a venac'h, hag ac'hano e zejon beteg Kastel da c'houlenn digant ar c'hount Derok eun tam douar da zeval eur gouent. Pevar pe bemp derves arad a voe roet din e kichen Konk, hag eno oun

chomet eur pennad enn eur plas a zo bet galvet abaoue gant an dud Lambabu ha Trebabu, rag va hano all a zo Pabu. Goude, oun eat, en eur brezeg an Aviel, da Landreger, hag e Landreger em euz digoret eur gouent neves.

» Enn despet din hag evit va c'has-tiz, oun bet lakeat da Eskob var an Tregeris, ha poan avoalac'h am euz bet ganto. Ranket em euz tec'h et zo ken. Lod a lavare oan eat da Roum, lod all a lavare edon em abati koz e Lambabu. Ar pezh a zo guir eo n'oun ket eat larkoc'h eget eul leo enn tu all da Ventroutles (Sant-Seo), kouent va c'hoar Seva, a yoa leanes eno. »

— « Seva a yoa c'hoar deoc'h ? eme Baol. Klevet am euz hano anizi ; eul leanes euz ar re vella. »

— « Chomet oun kuzet, eme Dugdual, epad daou vloas. P'oun distroet d'an Eskopti, em euz lakeat da baoues gant gras Doue eur vosen hag eun naouneges spountus a yoa er vro, hag abaoue oun guelloc'h deuet gant ar re a zo dindanon. Mez brema me a zo koz ha dare da vervel. Pedit evidon, va breudeur. »

**Sant Herve ha sant Paol douget a spered
enn anv**

An tri zant all ne skuizent ket o selaou sant Tugdual, ha kals muyoc'h eget na verkan ama a gountas dezo. Ho flijadur a vije bet echui ho buez asambles er beden hag er pinijennou; mez ho dever a c'halve anezo peb ini enn he garter. En eni guitad a rank-jont pa voe lakeat urs enn oll eferiou. Sant Paol ha sant Herve a zistroas neuze da Leon.

En eur vont gant an end, e komzent ho daou divar benn gloar ha joausted ar Barados, hag Herve a lavaras eur ger euz he revelasionou :

« Me, emezan, a zo dall, ha gouskoude an Oll-Vadelezus a ziskues din avechou traou dudius, traou ha n'ellont ket beza merzet na paket e fesoun ebet gant oll skianchou ar c'horf. »

— « Daoust, eme zant Paol, ha ne ven ket guest, gant ma pedoc'h an

Aotrou Doue, da velet lod euz ar pez a vilit ? »

— « Eo, a respountas Herve, mar plij gant ar Mestr. »

Eur vech erruet e Kastel, ec'h en em denjont sioul hag a gostes da yun ha da bedi. Abenn an trede derves, var dro kreisteiz, e veljont dor ar Barados digor dirazo, an nao C'heur Eles ennan, ar Batriarched, ar Brofeted, an Ebestel, ar Verzerien, ar Guerc'hezad, ha kement sant a zo kurunet enn env. Herve a lavare ho hanoyou dezo tout guitibunan, eun Eal enn he gichen o tegech dezan.

Er memes mare, e klevent enn dro dezo kanaouennou flour ha muzikou drant, ho lakea da vont er meas anezo ho-unan. Hag hi koumans ive eur c'hantik, kantik Moizes var bord ar mor Ruz, *Cantemus Domino*. Evel Moizes o doa treuzet ar mor Ruz, mor Ruz fallagries ar bed; treac'h oant bet d'an diaoul evel Moizes d'ar roue Faraon. Mez evel Moizes o doa c'hoas an dezert da dremen, dezert ar yuez, abars en em gaout e bro ar peoc'h hag al levenes.

Pa voe echu ho c'hantik ganto, dor

ar Barados a zerras, hag e kimiadjont an eil diouz egile. Sant Herve a yeas var êun d'he gouent.

59

Sant Tanguy e Kastel

Eur pennad goude an dra-ma, e teuas e Kastel eun dijentil a renk uel, guisket evel eur brezellour, ha c'hoas e kreiz he vrud. Goulen a reas gullet an Eskob santel, ha pa voe dirazan, ec'h en em daolas d'an douar var he benn, hag en eur skulia eur mor a zaelou, e lavaras :

« O pe truez ouzin, va zad, rag me a zo eur pec'her bras. »

— « Va mab, eme Baol, mar de bras o pec'hejou, brasoc'h eo c'hoas madeles Doue. Kemerit fizians, va mab paour, ha kountit din, eb nac'h netra, kement a ra poan deoc'h. »

Neuze an den yaouank a goumansas evellen :

« Me zo ganet e maner Tremazan, tost da Borsal, e parres Landunvez.

Va zad a reer Galon anezan, ha va mamm, Doue he fardouno, a yoa Florenza, merc'h Honorius, roue Brest. Va mamm geas, siouas din, a varvas, ha ne jomas var he lerc'h nemet va c'hoar ha me. En em garet a reamp on daouik, a dra zur, evel diou durzunel savet ha goudoret er memes neiz, ha n'oa bet morse tam trouz ebet etrezomp. Mes petra fell deoc'h ? Ar pezh a zo great a zo great. »

— « Var a velan, eme Baol, c'hui eo Gourguy, mab Galon ha breur Eodet. Klevet am euz hano euz o tud. Me sonje din oac'h eat er meas euz ar vro, hag o poa bet kounje digant o tad. Petra zo kaos ma maouc'h ama dirazon ? »

— « Hen isplika a rin deoc'h, va zad, eme Gourguy ; ha peguir ec'h anavezit lod euz va istor, em bezo nebeutoc'h da lavaret. Ia, me eo Gourguy. Galon, evel a ouzoc'h, pa deuas da veza intaon, a zimezas adarre da eun eretikes euz a Enes-Vreiz, var zigares m'oa eur vaoues koant ha pinvidik. Hou-ma a glaskas ober ac'hanomp eretiked evel di. Epad eiz vloas on deuz bet a bep seurt da

c'houzaon, ha me, deuet bras dija, a gavas guelloc'h kuitad ar vro. »

— « Betek-hen, eme Baol, ne velan netra da damall deoc'h, kountrol eo ; mad oc'h euz great, va mab, pellad diouz an danjer. Kerkouls, n'ouc'h ket eat er meas euz ar gear enn despet d'ho tad. »

— « Guir a livirit, eme Gourguy ; mez ar rest, siouas, n'e ket evel. »

— « Mad, eme Baol, kendalc'hit da gounta. »

60

Buez sant Tanguy

Ha Gourguy a gendalc'has da gounta :

« Euz a Dremazan oun eat etrezek Paris, ha chomet oun daouzek vloas gant Childebert, roue ar Fransizien. Hen toui a ellan, ha n'em euz ket aoun da veza dislavaret gant den, epad an daouzek vloas-ze, n'euz bet nemet meuleudi da ober ac'hanon, ken er pales pa vezen, ken er brezel pa ran-

ken mont. Eb en em fougeal, n'em euz ket great mez d'am bro na d'an hano a gristen a zougan.

« Childebert a felle dezan va der-c'hel enn he rouanteles, ha va lakad zo ken e penn he armeou. Mez eun youl birvidik a zavas ennon da zistrei da Vreiz ; keuz am oa d'am c'hoar, c'hoant am oa d'he guelet ha d'he zenna euz a dre skilfou ar vleizes dinatur. Ha me, enn end.

« Paziguezjon e maner Tremazan, e c'houlenjon, eb en em rei da anaout da zen, e peleac'h edo ar brinsez Eodet.

— « Ar brinses Eodet, eme va lez-vamm ! Ama n'euz prinsez ebet, nemet eur plac'h fall, on deuz ranket kas var ar meas evit kuzed he disenor. »

— « Eodet eur plac'h fall ? a leverjon. »

— « Ia, eur plac'h fall, eme va lez-vamm adarre, hag eur plac'h euz ar re falla. »

— « Mad, emeve, travaolac'h am euz klevet. »

« Ha me, mont d'he c'hask. He c'haout a riz var bord eur ster o voalc'hi, guisket evel an disterra.

— « Eodet, emeve, en eur grena gant ar gounnar ; deuit ama ! »

« Eodet a droas he fenn da zellet, ha pa velas ac'hanon, e redas spountet oll etrezek an ti. An diaoul, ia an diaoul eo, a lakeas neuze em spered ar zonz milliget-ma : Da c'hoar e deuz da anavezet, Gourguy, ha gant ar vez eo eat da guzet.

« Kerkent e tennis va c'hleze, ha me var he lerc'h. »

Ama Gourguy a zirollas da lenva ha da grial fors :

« N'oun ket evit mont pelloc'h, va zad, n'oun ket evit mont pelloc'h ! O pe truez ouzin, o va Doue ! »

61

Santes Eodet

— « Gourguy, va mab keas, eme Baol, an dour enn he zaoulagad ; lazet o peuz o c'hoar ? »

— « Ia, eme Gourguy, dibennet eo bet ganen. »

Hagec'h en em roas da grial ha da irvoudi goasoc'h goas.

Abenn eur pennad, Paol a lavaras dezan :

« Va mab paour, eun torfet bras oc'h euz great. Red oa deoc'h komz outi gant douster, ha marteze e dije anzavet he buez diroll hag e dije great pinijen ; ha brema, oc'h euz stlapet o c'hoar, korf hag ene enn ifern, eb rei amzer dizi da c'houlenn pardoun. »

Gourguy a respountas :

« A drugare Doue, va zad, n'e ket eat d'an ifern, rag eur zantes oa. A veac'h oa bet lazet ganen, an oll a ziredas enn dro din :

— « Anat eo, den fallakr, emezo, ouc'h bet digaset ama gant lez-vamm Eodet. Neket eur plac'h yaouank oc'h euz lazet, loen goues ma zouc'h, mez eun Eal euz ar Barados, eun Eal a furnes, a c'hlanded hag a drugares evit he nesa. Divoallit ! Doue o kav'o, unan euz an deisiou-ma. »

— « Penaos ? emeve ; ne ket guir ar pez a zo bet kountet din ? »

— « Nan, emezo ; n'euz nemet geyer e c'heul al lez-vamm. »

— « Hen toui a rit var o le ? »

— « Ia, hen toui a reomp a voues

uel. Eodet a yoa eur zantes, echu he merzerenti, eat eo d'ar Barados; mez deomp eo ar goasa, kollet eo ganeomp mamm ar beorien. »

— « Mad, emeve, eun all a vezo lazet; goude ar zantes, an diaoules. »

« Ha me, lammet evel ar gurun beteg ar maner. An tan a yoa em daoulagad, va c'hleze leun-c'hoad ganen em dourn. Ar zoudarded a yoa oc'h ober ged a zaillas varnon a ziadre, hag a ellas va jadenna. Kaset e voen er c'hiz-ze dirag Galon hag he c'hreg er zolier vras.

« N'em boa ket bet amzer da zigeri va ginou da lavaret eur ger, ha setu va c'hoar Eodet, he fenn ganti enn he zourn, o tont er gramp. Kerkent e lakeas he fenn var he gouzouk, hag e teuas da veza ker beo ha ker yac'h ha biskoaz.

« An oll a grene gant ar spount. »

« Eodet a lavaras :

— « Lez-vamm diboell ha digaloun, bremaik e vezo roet deoc'h ar

priz euz o fallagries; goulennit pardoun epad ma chom eur moument ganeoc'h. »

« Al lez-vamm a guezas d'an douar en eur skrigna he dent hag en eur ionenna; evel eur preon, ec'h en em rulie gant an drouk bouzellou; abars ar fin, e chomas reud. Neuze eur flam-tan glas a lugernas enn ti, eun tars kurun a strakas enn eun doare strafillus, ar maner a dregernas, hag ar vaoues divergount a voe lakeat e ludu.

« Pa ellis en em anaout, ec'h en em daolis ec'hars treid va c'hoar, ha va daelou a roe muyoc'h da gompren eget an oll gomzou. Hi avad, gant eur mousc'hoars dudius a lavaras d'in :

— « Va breur, p'oc'h euz galvet ac'hanon var bord ar ster, ne vouien ket oa c'hui, ha setu perag em euz tec'het, rag aoun am euz bet razoc'h o velet o kounnar. Pardouni a ran deoc'h, gant ma zeoc'h da Gastel da c'houlenn absolver ha pinijen digant Paol, an Eskob santel. Evidon-me a zo o vont adarre d'ar bed all, ha ne jomin ket er bed-ma. O karet a rin,

va breur, evel m'am euz karet ac'ha-noc'h a ziagent, ha guelloc'h c'hoas. Pedi a rin evidoc'h, evit ma vezoc'h bepred eun den a zoujans Doue, ha ma ellimp en em gaout asambles er Barados. »

« Ha va c'hoar a varvas; anterret em euz-hi enn iliz Landunvez, hag evit seveni penn da benn he mennos, e maoun ama dirazoc'h, prest da ober kement a c'hourc'hemennoc'h din. »

Paol, o velet peger bras glac'har a yoa e kaloun Gourguy, a roas dezan eb dale an absolver euz he bec'hed, hag evit pinijen, e verkas eur yun a zaou ugent dervez divar dour ha bara. Gourguy en em dennas, da ober he yun, enn eur c'hoat hanvet abaoe Koat-Tanguy, etre Brest ha Guipavas, tost da Zantes-Barba ha d'ar Relek-Keruon.

Ne ket divar bara e yunas, mez divar griziu, irin, mouar ha mez, hag e tremenas he oll amzer o beilla, o pedi hag o vouela d'he bec'hejou. An derves ma echue he binijen, eur vran a zigasas dezan abers Doue eur pezh tam bara guenn. Hen dribi a reas kalounek, ha goude beza trugarekeat

an Oll-C'halloudek he vadoberour, e kemeras an end da vont da Gastel, hag eur veach diguezet e Kastel, e zeas var eun da gaout sant Paol.

63

Kouent ar Relek e Plouneour-Menes

Sant Paol a yoa d'ar mare enn eur gramp euz he bales gant pevar pe bemp beleg, oc'h en em glevet ganto divar eferiou an Eskopti. Oll e veljont var benn Gourguy eur pouchad flam beo, ha Paol a lavaras :

« Va mab muya karet, a zioc'h o penn e velan eur stereden lostek ruz-tan, ha dre-ze, anat eo din eo kavet mad o pinijen gant Doue. Aviziken, ne ket Gourguy a rin ac'hanoc'h, mez Tanguy. »

— « Gourguy pe Danguy, ne ran fors, eme Gourguy; ar pezh a blijo deoc'h, va zad. Eun dra avad am euz da c'houlenn diganeoc'h. Digemerit ac'hanon enn o kouent e Baz; c'hoant am bije d'en em rei da zervich Doue ar rest euz va buez. »

Digemeret e voe, hag a benn nebeut, e teuas da veza eur skuer evit an oll venac'h. Setu perag sant Paol, pa zonjas sevel eur gouent neves er Relek-Plouneour, a gasas di daouzek relijius, ha Tanguy da zuperior.

N'oa ket evit skei guelloc'h. Tanguy a ziskuezas enn eun taol petra oa. Dous ha karantezus evit an oll, rust evitan he-unan, e kasas ker brao an traou enn dro, ma zoa eun drugar beva gantan. Kals dijentilou a guiteas ar bed, hag a c'houlennas beza resevet enn ti. Lod anezo a roe douarou d'an abad santel, hag e veza ma kreske bemdes niver ar venac'h, enn douarou-ze e tigoras kouenchou all.

Tanguy a yoa dreist oll aketus d'an Orezoun ; ne rea kouls lavaret nemet pedi noz deis, hag avechou e zea er meaz euz anezan he-unan, hag e veze douget a spered er Barados. Evelato, n'oa ket biannoc'h a ze he humilite ; nebeut a fizians en doa enn he ners hag enn he vertuziou, hag alies e zea da Gastel, evit en em glevet gant sant Paol divar meur a dra, hag evit kaout kuzul diganta.

Kouent Sant-Vaze-Konk.

Eun droyad, e tiredas laouen da bales an Eskob benniget :

« Aotrou 'n Eskob, emezan, maro eo va zad. »

— « Petra ? eme zant Paol, Galon a zo maro ? Eur maro mad en deuz bet da viana ? »

— « O ia ! eme Danguy ; eur maro mad en deuz bet, a drugare Doue, ha ne ven ket bet kel laouen, m'en dije bet eur maro fall. E ma brema, red esperout, enn env gant va c'hoar Eodet. »

— « Doue ra vezo meulet ! eme zant Paol. Mes kountit din divar o tad. »

— « Va zad, eme Danguy, a c'halvas ac'hanon kerkent a ma kuezas klanv, hag amzer en deuz bet da lakâd urs enn he goustians. Gant pegement a c'hlac'har en deuz gouelet d'he bec'hejou, ha goulennet pardoun da veza bet ken lezirek e kever he

vugale, ha ken dall ha ken diboell e kever he bried ! Mez ne ket an dra-ma am boa da lavaret deoc'h. Roet en deuz d'an iliz evit lakâd pedi evitan, he oll zouarou azalek Brest beteg Konk. Petra vo great euz an douarou-ze ? »

— « Pell a yoa, eme zant Paol, e môa sonj da zevel eur gouent er penn all tout da Weled-Leon. Setu kavet ar plas : Kemerit ganeoc'h eun eiz manac'h benag euz ar Relek-Plouneour, ha savit ar gouent neves e giz ma kerot. Pa vezo echu ar gouent, me a yelo da venniga an ti, ar japel hag ar veret. »

Sant Tanguy a zentas, hag a yeas gant lod euz he venac'h da velet e pe-leac'h oa ar guella sevel ar gouent.

Edont er beg douar hanvet neuze Penn-ar-Bed, etre Konk ha Plogonvelen, pa zispakas diouz kostes Kame-

led eun anter zousen listri bras, a zeblante kaout c'hoant da vont abiou evit paka eur porz benag da zouara.

Ar brasa euz ar c'hueac'h lestr, o klask trouc'ha berroc'h, a yeas da steki a benn err ouz eur roc'h goloet e rez an dour. Ar verdeidi a zavas ho daouarn var zu an env, oc'h en em erbedi ouz Doue hag ar Ver'hes ; sonjal a reant oant kollet, ha n'o doa nemet mervel. Mez, pebez burzud ! Ar roc'h a zigoras dre an anter, hag al lestr a dreuzas dre greiz, eb drouk ebet. An dud a yoa ennan a deuas neuze da deuler an eor an tosta ma eljont, hag o veza diskennet, e teujont evel e prosesion, dizolo ha diarc'hen, da lakâd dirag ar venac'h eur c'hased ir a yoa ganto var ho c'hein.

« Petra zo aze ganeoc'h, eme zant Tanguy, souezet oll ? »

— « Er c'hased-ma, emezo, va zad manac'h, e ma korf benniget an Abostol sant Vaze. »

— « Korf an Abostol sant Vaze, eme Danguy ? »

— « Ia, va zad, korf an Abostol sant Vaze ; ha gras eo dezan, m'on deuz ellet tec'het diouz ar maro. »

— « Ha penaos oc'h euz-hen bet, eme zant Tanguy ? »

— « Ni, ken etrezomp Leonis, emezo, a ya dalc'hmad, evel a ouzoc'h, da c'haloupad ar mor, ha ne reomp fors betek peleac'h mont, keit ha ma kavomp flod d'or listri. Setu-ni-ta eat, brema e zeuz bloas hag ouspenn, enn tu all d'ar Spagn, d'an Itali ha d'ar Gres, ha diguezet enn Ejipt. Eno e klevjomp edo korf sant Vaze benniget, hag on deuz laeret anezan d'her c'has d'or bro. »

— « Laeret, emezant Tanguy ! Eur goal bec'hed oc'h euz great. »

— « Deportit, aotrou manac'h ; di-var goust an eretiked eo bet laeret. »

— « Neuze, n'e ket ker bras an drouk, eme zant Tanguy ; goude tout, an eretiked n'o dije great nemet teuler disenor ha dismegans varnan. »

Sant Paol o vennigen kouent sant Vaze

Sant Tanguy a jomas eur pennad da zonzal, ha goude e lavaras :

« Deuet oump ama, va mignouned, abers Aotrou 'n Eskob Leon, da joas eur plas deread da zevel eur gouent. Me gav din en deuz sant Vaze merket he-unan ar plas. Ama, el leac'h m'oc'h euz lakeat ar relegou var an douar, e vezo savet ar gouent on deuz c'hoant da zevel, ha galvet e vezo kouent Sant-Vaze-Traon pe Sant-Vaze-Pennarbed, enn enor d'an Abostol benniget. »

— « Guelloc'h a vezo great c'hoas, eme gabiten ar verdeidi. Petra rafemp euz ar relegou, tremenidi evel ma zoump, irio var ar c'halet, ha var c'hoas marteze e guelead ar mor ? Or mennos a yoa ho rei da Baol ; mez peguir ouc'h deuet ama euz he berz, e vezint laosket ganeoc'h, hag hen a rai anezo divezatoc'h ar pezh a garo, pe ho lezer enn o kouent, pe ho c'has e leac'h all. »

Sant Tanguy a drugarekeas ar c'habiten, hag he-ma a zistroas d'he lestr, hag a gerzas gant he oll voueliou digor etrezek Konk.

Pa voe peurechuet ar gouent, Paol, evel en doa prometet, a deuas d'he bennigen. Pebez choa evitan o kaout
9*

eno relegou sant Vaze! Lod a roas d'ar venac'h, lod all a gasas gantan e Kastel, hag e voe great eur brosesion gaer evit ho digemeret. Lakeat e voent er penn uela euz an iliz-veur, enn tu deou d'an aoter vras, el leac'h ma ma c'hoas Dorik Sant-Vaze.

Divezatoc'h, bandennajou tud goues o veza diredet diouz kostes an anternos da ober distruj er vro, an darn vuya euz ar c'horf santel a voe kuzet enn Itali, hag an darn all e meur a gear e Franz. Enn trizekvet kanved, eun tam euz ar penn a voe digaset enn dro da Leon.

67

**Sant Jaoua lakeat da Eskob gant
sant Paol**

Etre daou, e savas adarre reuz e Kerne. Eur guchen tud fallakr n'oant ket evit gouzaon sant Jaoua, abad Daoulas ha persoun Braspars, abalamour d'ar vad a rea e mesk ar bobl dre he brezegennou nerzus hag he oll oberou a drugares. Kement a vrezel

a rejont dezan, kement a zismegans hag a droyou kam, ma rankas tec'het. E penn ar gouent hag ar barres e lakeas Tousvean; hag o veza roet d'ar zuperior neves a bep seurt aliou divar an doare da c'houarn an eneou, e kimiadas diouz he venac'h, hag ec'h en em dennas e Kastel.

Sant Paol a dridas gant ar blijadur, pa velas sant Jaoua.

« Ar Mestr madelezus, emezan, en deuz enchet ac'hanoc'h beteg ama, va niz. Me a zo koz ha kabac'h, e maoun krog em femzek vloas ha pevar ugent, hag ezom am euz unan benag d'am zikour. Maro eo Guevrok, c'hui a zalc'ho he blas, ha nebeutoc'h a zoursiam bezo aviziken, pa vezo eur seurt beleg oc'h ober evidon. »

Setu hanvet sant Jaoua da vikel vras. Sant Paol en em ziskargas varnan euz he bounnerra labourou abostolik; hag abenn daou vloas zo ken, o velet sant Jaoua deuet mad gant an oll hag aketus enn he zeveriou, e sonjas rei an dilez euz he garg, ha fiziout ennann he Eskopti.

Asambli a reas enn he bales ar pennou uela euz he gloer, hag e tiskui-

lias ar pezh a yoa enn he spered. Ar gloer a gave dies divoueret ho Fasting; mez Paol a lavaras dezo :

« N'o pe ket aoun na tristidiges, va bugale ker ; ne din ket a bell ; da Vaz em c'houent koz e zin da jom, evit en em brepar da vont dirag va Barner, ha ma vez defot ac'hanon e vezin kavet, ha ne zinac'hin ket ar beac'h. »

Sant Paol en em dennas e Baz, herves he vennos, ha sant Jaoua a yeas da Zol, enn tu-ma da Roazoun, evit beza sakret gant sant Samson, a yoa c'hoas Eskob ha beo d'an ampoent. Pa zistroas da Gastel, e poanias da gerzet bepred var roudou he yountr. An Urs a veleg a roas da zant Kenan, ha prestik goude her c'hasas da bersoun e Plougerne.

Hen he-unan ne zaleas ket da veza galvet e Kerne.

68

Maro sant Jaoua

Abaoue m'en doa kuiteat Daoulas ha Braspars, tud ar vro-ze n'ellent

muy kaout tam eost ebet. Pedi a rejont ar zant da vont da lammet divar ho douarou ar vallos o devoa tennet varno dre ho ingrateri enn he gever.

Jaoua ne rea seurt eb goulenn ali digant he yountr. Mont a reas eta da Vaz, da c'houzout petra en doa da ober.

« Gourc'hemennet eo deomp, eme Baol, rei ar mad evit an drouk. Kernevis a ziskues kaout keuz d'ar pezh o deuz great, ha marteze, mar selaouit ho c'hlemou, e raint piniñ, hag o pezo gounezet da Zoue kalounou ho preudeur. »

Var gement-se, Jaoua en em lakeas enn end, kennerzet gant bennos he vestr koz, ha pa erruas, ec'h obtenas dre he bedennou pardoun ha trugares evit ar re o doa great dezan kement a voal vuez.

Epad m'edo c'hoas e presbital Braspars, e kuezas klanv, ha klanv bras. Eun eal euz ar Barados a deuas da gas ar c'helou da zant Paol e Baz, ha da zant Kenan e Plougerne. Kerkent sant Kenan a redas da Gastel, hag euz a Gastel da Vaz. Sant Paol a lavaras dezan :

« Va mab Kenan, kerzit var êun da Vraspars. Klevet oc'h euz, kerkouls ha me, gant an Eal, eo klanv va niz muya karet, Jaoua. Mad, hen diskleria a ran deoc'h, ne ket klanv ebken e zeo, mez klanv da vervel, hag abenn nebeut e vo toc'hor. Na gollit ket oc'h amzer; baliit, ha buan; gras deoc'h d'en em gaout abred avoalac'h. »

Sant Kenan ne jomas ket da zellet. Treuzi a reas ar mor etre Baz ha Rosko, ha diguezet e Kastel, e kemeras eur marc'h lijer da vont etrezek Braspars.

69

Tiernomael lakeat da Eskob

N'oa ket maro sant Jaoua, pa erruas sant Kenan; he anaoudegas a yoa gantan, ha zo ken, pa velas persoun Plougerne, e seblantas dont guelloc'h. Sant Kenan a roas dezan he oll zakramanchou, ha sant Jaoua, goude beza benniget kement den a yoa er gramp, a lavaras :

« Ne maoun ket kals e chal, ha guir, da veza anterret e Kerne; gous-

koude, bolontes Doue bezet great ! Pa vezin maro, lakit va c'horf enn eur c'har neves, starnit daou ejen ouz ar c'har, ha laoskit an ejennet da vont e giz ma kirint, ken na jomint a za anezo ho-unan. »

Setu ar pezh a voe great.

Ogen, an ejennet a valeas beteg ma errujont e parres Plouvian, var eun dachen vras, el leac'h ma torras ar c'har. Eno e voe anterret korf sant Jaoua, ha divezatoc'h e voe savet eur japel var he vez. Evelato, he relegou ne maint mui er japel-ma; kaset int bet da Gastel a c'houdevez.

Sant Jaoua n'oa bet Eskob e Leon nemet epad eur bloas, ha daou-ugent derves ouspenn. Pa glevas Paol oa tremenet, e teuas da Gastel hag e lakeas henvel enn he blas Tiernomael, a yoa bet gantan enn he ermitach hag e rouanteles Mark, hag en doa heuliet anezan bepred, azalek Eusa beteg ma roas an diles euz he garg. Hen he-unan her sakras Eskob; mez a benn bloaz Tiernomael a varvas, ha Paol a rankas distrei adarre da Gastel.

Goude beza kanet an Ofren enn he

anterramant, Paol hag ar gloer en em zastumas asambles da velet piou a vije lakeat e penn an Eskopti. Mez an oll a lavaras da Baol :

« Anat eo, va zad, ne fell ket da Zoue e ve den Eskob ama nemedoc'h, keit a ma chomoc'h beo. Daou a zo bet an eil goude egile, hag ho daou int maro. Red eo deoc'h senti ouz bolontes an Oll-C'halloudek a en em ziskues ker sklear, ha kemeret a neves ar garg oc'h euz divoueret. »

Daoust ma edo dija enn he gant vloas, Paol a blegas d'he veleyen, hag a grogas er stur. Pe reseo a reas grasou euz an env, pe gresket oa he nerz hag he yec'hed e Baz e kreiz ar peoc'h hag an abaster, seveni a ellas he zeveriou enn eun doare deread.

70

Maro sant Herve .

Mar doa koz sant Paol, Herve n'oa ket yaouank ; pevar-ugent vloas benag en doa neuze. Da echui he vuez

oa deuet e Lanouarne, e kever bez he vamm ; rag n'en doa ken c'hoant nemet da veza anterret gant santes Rivanona.

Eun droyad m'edo o pedi, eun Eal a zisklerias dezan n'en doa muy nemet c'hueac'h derves da veva. Raktal e c'halvas enn dro dezan he venac'h, hag e lavaras dezo petra dlle c'hoarvezout :

« Greomp eur brosesion, emezan, ha meulomp Doue euz he vadeles. »

Pa voe echu ar brosesion, e reas eur zarmoun gaer da dud he gouent, hag e pedas anezo a greiz he galoun, da jom ato stard enn ho c'hreansou, devot d'ar Verches ha da Jezus, mad evit ho breudeur hag evit ho nesa. Kerkent e zeas d'en em astenn var eur guiskad ludu en doa skignet var ar blanken a zerviche dezan da vele.

« Ne zavin ket ac'halen, emezan, echu eo ganen. Eur blijadur avad a c'houlennan diganeoc'h abars tremen. It da vid din an Aotrou 'n Eskob, evit ma klevin eur veach c'hoas he voves var an douar. »

Paol a deuas, eb klask digares, ha mall gantan zo ken en em gaout.

Goude beza koveseat Herve, he roas dezan he Zalver hag an Nouen.

« Aotrou 'n Eskob, eme Herve, o pe truez ouz va menac'h, a jom evel em-zivaded var va lerc'h. »

— « Bezit dizoursi, va mab; ne ankounac'hain ket anezo. »

— « N'oc'h euz ket sonj, Aotrou 'n Eskob, euz ar pezh on doa guelet en eur zont euz a Vene-Bre? »

— « Eo, va mab, sonj am euz. »

— « Na pegen kaer eo ar Barados, eme Herve, ha pegen tenva ar bed ! »

— « Bremaik, Herve, va mab, ne vezoc'h muy dall, hag e vezo digoret o taoulagad deoc'h. »

— « Aotrou 'n Eskob, ne velit ket an Elez o tont d'am c'herc'had ? »

— « Ne velan Eal ebet nemedoc'h, va mab. »

— « Aotrou 'n Eskob, astit affo rei din ho pennos, ma zin ganto. »

— « Doue r'o pennigo, va mab. »

Er memes moument, Herve a laoskas en eur vousec'hoarzin he uanad diveza, ha Paol hag an oll a glevas enn he lochen kanaouennou dudius. Goude ma voe lakeat gant enor ha respet korf an ermit santel e

kichen korf he vamm, Paol a zistroas da Gastel en eur lavaret outan he-unan :

« Va oll vignouned a ya d'ar Barados an eil goude egile ; peur, o va Doue, e teuyo va zro ? »

Setomerin lakeat da Eskob

Ar zonz-ze ne deas muy euz he spe-red ; setu perag, pa gavas an tu, e tisklerias neat d'he veleyen, ne jomje ken e penn an Eskopti :

« Me a zo re goz, emezan ; n'oun ket boaz diouz ar c'hudennou am euz alies da zireustla. Aoun am euz ne rafen ket mad va dever ; hag ouspenn-ze, al labour hag an tregas a gues varnon bemdes, ne lezont muy ganen amzer avoalac'h da bedi ha da vedita. Poent eo din trei oll va c'haloun var zu ar bed all. Klaskit enn o toues eun den yaouank hag e kreiz he vrud, eun den guizek ha santel, evel ma zeuz kement e Leon, hag a vezo guest da ober

guelloc'h evidon. Kaer e vo deoc'h enebi, nul eo. Laoskit ar brezellour koz da gemeret eun tammik ean, abars ma ranko mont da renta kount d'he Gabiten euz he amzer-soudard. »

Ar velezen a rankas plega, ha choazet e voe Setomerin.

An derves m'edo sant Paol o vont d'he zakri, setu Juduval o tiguezout e Kastel. Ar Juduval-ma, leshanvet ar Guen, eo ar memes Juduval a yoa e pales Childebort, pa voe kaset ar zant da Baris gant ar c'hont Guitur. Yaouank flamm oa Juduval d'am ampoent, mez deuet oa an oad dezan evel d'ar re all. Meur a dra a yoa tremenet abaoue. Childebort, roue ar Fransi-zien, a yoa maro, ha Kloter en doa kemeret he blas. Gant sikour Kloter, goude fin truezus Komor ar milliget, Juduval a ellas pignad var dron he zadou koz.

Brema oa anavezet evit roue enn darn vuya euz a Vreiz, hageveza m'oa eur prins devot ha leun a zantiman-chou kristen, e falvezas dezan guelet Eskob Leon abars renta he ene d'he Grouer, ha goulenn digantan bennos ha pedennou. Kerkouls, kender oa

da zant Samson, Eskob Dol, ha gouzout a rea oa bet Samson ha Paol asambles e kouent sant Ildud enn ho bugaleach, hag oant chomet mignou-ned guirion hed ho buez. Klevet en doa gant Samson, maro brema, ar pezh a yoa bet great a eneb Komor e Mene-Bre, ha c'hoant en doa da ziskues da Baol he anaoudegas vad evit eun evepleh servich.

Doze hen digollas eb dale euz ar boan en doa kemeret da zont keit all eun he gozni, rag test e voe euz eur mirakl kaer.

72

Ar roue Juduval e Kastel

Goude beza saludet ha briatet sant Paol gant doujans ha karantes, goude beza komzet eur pennad gantan. d'an eur merket evit ar zolanite, e zeas enn iliz da eul ar bobl, hag evel roue ma zoa, e voe lakeat var eur gador uel enn eur plas disparti, el leac'h ma elle guelet an oll lidou ha klevet an oll bedennou.

Koumanset oa Paol da zakri Seto-merin, pa deuas eur paotrik, a dreuz an dud fidel, beteg ar c'heur, eun den dall krog enn he zourn. An den dall a zaoulinas eno, hag a reas eur beden verr mez birvidik. Neuze e savas, hag e youas a boez-penn : Eskob benniget, o pe trues ouzin !

Ar veleyn hag an oll a lavare dez an tevel, da c'hortos ma vije echu ; mez an den dall a youe goasoc'h goas : Eskob benniget, o pe trues, o pe trues ouzin !

Paol a rankas chom a za.

« Va zad, eme Zetomerin, grit din eur blijadur ; roit d'an den-ma he c'houlenn, hag e vezo eun dudi evidon, ar rest euz va buez, sonjal enn eur seurt burzud, c'hoarvezet da zeis va c'honzekrasion. Aoun bras am euz da veza goal zister diouz ar beac'h a lakit irio varnon ; mez muyoc'h a fizians am befe, ma parefac'h er moument-ma dre ho kalloud ar paour-keas reuzeudik. »

— « Ne ket dre va c'halloud eo, eme zant Paol ; dre c'halloud ar Mestr bras. »

— « Ia, dre c'halloud ar Mestr bras, eme Zetomerin. »

— « Mad, eme Baol ; red eo d'an tad, enn dro-ma, senti ouz he vu-gale. »

Eur zell a daolas var zu an env, hag en eur ober sin ar Groas var benn an den dall, e lavaras :

« Enn hano Jezus or Zalver, enn hano an Dreinded zakr, digorit ho taoulagad, va mab, da velet sklerijen an deis. »

Ha kerkent an den dall a velas kerkouls ha biskoas.

Pa voe echu enn iliz, Juduval a yeas d'en em strinka ec'hars treid Paol er zakreteri :

« N'em euz ket a geuz, emezan da veza great eur beach ir ha poanius d'am oad, p'am euz bet an eur vad da veza test euz eun dra ker souezus, ha n'ouzon ket petra da ober evit trugarekâd Doue. Mar be o madeles, va zad, reseo e prof digananen eur peziad

douar bras am euz, eul leo pe ziu diouz Kastel, e tu ar c'hresteis, e rafac'h plijadur din. Eno e ve savet eur gouent, hag ar venac'h santel a bedje evit silvidigez va ene, hag evit frealz ha repozvan an dud am euz kollet. »

An douar roet gant Juduval a voc hanvet Mespaol, evel ma zeo c'hoas, hag er c'harter-ze e ma brema parres ha bourg Mespaol.

Abenn daou pe dri derves, Juduval a zistroas var he giz d'he gear-veur, ha Paol en em dennas e kouent Baz da c'hortoz ar maro. Beva a reas beteg dek vloas ha kant, ha ne deuas mui nemet eur veach er meas euz he enezen, evel ma vezo kountet bremaik.

Mar doa bet aziagent aketus d'ar beden, d'ar yun ha d'an oll binijennou, brema e zeas c'hoas enn tu all d'ar pezen doa great.

Ne zrebe tam kouls lavaret, ne gouske banne, ha ne vouie den penaos ec'h elle herzel. He izili a yoa evel teuzet dre ners he garantes evit Doue, hag ous he eskern ne jome nemet ar c'hroc'hen, ker flour hag ar seiz, ker guenn hag an erc'h. Ne zeblante kaout berad goad ebet ken, ha dre balfou he

zaouarn e vije guelet an deis. Evel oa ouz eur skeud muioc'h eget ouz eun den. Petra din-me ? Evel oa ouz eun Eal han'en dije bet korf ebet.

Evelato, bepred e veze er penn araog d'ar venac'h all, er penn araog er japel, er penn araog enn ofisou, er penn araog dreist oll enn orezoun. An orezoun hag ar gomunion a yoa he vevans, hag ar bevans selestiel-ze a roe dezan nerz da heulia, guelloc'h eget ar re all, reolen an abati.

*Sant Paol enn end da vont da gaout
sant Tanguy*

Mont a reas evelse beteg fin miz c'huevrer euz ar bloas c'hueac'h kant goude donediges or Zalver. Edo oc'h echui he zek vloas ha kant, ha n'oa doare ebet varnan da vervel.

Ma lavaras d'he venac'h :

« Va bugale, ne jomin mui pell ganeoc'h ; araog mervel, em euz c'hoant da velet va mab muya karet, Tanguy a Dremazan, breur santez Eodet. Gou-

zout a ran en deuz kuiteat eur pennad zo kouent Lok-Maze-Traon, hag eo deuet da ober eun dro enn he gouent all, e kouent ar Relek-Plouneour. Sonj en deuz da gerzet beteg ama. Mez koz eo, ar mabik keas ; me a esperno dezan lod euz an end. Ne fell ket din avad mont va-unan, d'an oad am euz ; daou ac'hanoc'h a vezo ganen d'am diam-brouk. »

— « Va zad, a respontas ar venac'h, peguir eo diblaset, laoskit anezan da beurechui he veach ; esoc'h eo dezan evit deoc'h, c'hui ar c'hosa euz a gals. »

— « Nau, eme Baol, me oar petra lavaran ; da vid Tanguy e rankan mont ; me am euz kement a amzer hag hen, hag hen n'en deuz ket muyoc'h evidon. »

Paol a dreuzas ar mor gant daou vanac'h, hag eur vech e Kastel, he zaou goumgagnoun a felle dezo disken etrezek Ker-Iskear pe Greiskear, da baka Mespaol, Guimiliau ha Plouneour.

« Troomp a zeou, eme Baol, me oar petra lavaran ; ne ket da Vespaol eo deomp skei, mes da Lesneven, biou Kergidu ; me oar petra lavaran. »

Hag e zejont beteg Lesneven.

« Brema, eme Baol, pelloc'h c'hoas, ha var eun d'an Drenek. »

An daou vanac'h, eb klask enebi, a gendalc'has da vale gant ho mestr. Pa voent erruet tost d'an Drenek e kichen eur maner, setu Tanguy o tispaka euz eur c'hoat, pevar pe bemp manac'h all gantan.

75

Divizou sant Paol ha sant Tanguy

Tanguy en em daolas d'an douar :

— « O vazad, emezan, me gave d'in n'em bije ket guelet ac'hanoc'h biken. »

— « Doue a zo mad, Tanguy, eme Baol ; roet en deuz an tam frealzidiges-ma deomp abars mervel. Savit, va mab, savit ma briatin ac'hanoc'h. »

Neuze Paol a lavaras d'ar venac'h pellad eun nebeut diouto, hag e zejont er c'hoat ho daou.

Eno an eil a gountas d'egile ar peza yoa c'hoarvezet abaoe n'oant ket bet asambles.

« N'ouzoc'h ket, va zad, eme Tanguy ? Var bez va c'hoar e Landunves,

Doue a ra kals miraklou ; ha zo ken e Tremazan, e veler bep ploas eur mirakl all. Var dour koz ar maner, el leac'h ma n'ell netrakregi nemet drez, kinvi hag ilio, e zeuz savet eur maread jenofl ruz ; hag ar jenofl, ne ket en anv e vleuniont, mez e kreiz ar goanv, pa vez doun an erc'h ha kalet ar skourn. An dud divardro o deuz hanvet anezo jenofl Eodet. »

— « Doue ra vezo meulet, va Mab ! Ma vez enoret ar zent gant Doue var an douar enn eun doare ken estlamus, peger bras ne deo ket ho êrusted er Barados ! Tanguy, va mab ker, lavar din, keuz a peuz brema, enn da gozni, da veza roet da vuez da Zoue ? »

— « O va zad, petra zonjit ? Ha p'am bije kant vuez all, e rofen anezo tout da Zoue. »

— « Tanguy, lavar din ; ne vije ket bet guelloc'h did, va mab ker, chom evel ma zoas, kabiten bras enn armeou Childebert, e skoas beza eun tannik manac'h dister e kouent Lok-Maze ? »

— « O va zad, petra zonjit ? Guelloc'h eo ganen beza an diveza e rouanteles an env, egit beza var an tron uella euz ar bed. »

— « Tanguy, n'em aout ket e chal gant plijaduresiou an douar ? »

— « Va zad benniget, plijaduresiou an douar n'int nemet moget ha touelleres. »

— « Mad a lavares, va mab ker »

Hag an daou zant en em lakeas da bedi asambles.

76

Petra a dremenas enn Drenek ?

Abenn eur pennad :

« Va mab, eme Baol, ne gleves-te ket mouesiou dudius ? »

— « Eo, va zad, klevet a ran mouesiou dudius hag a deu euz ar Barados. »

— « Tanguy, lavar din, ne veles-te ket eun Eal o tont ? »

— « Eo, va zad, eun Eal a velan, skedusoc'h eget an eol. »

— « Da gerc'had ac'hanomp e teu, va mab ; bremaik e vezi gant da c'hoar Eodet, ha me gant va c'hoar Siko-folla. »

— « Ar c'henta ar guella, va zad. »

Hag an daou zant a guezas var ho fenn d'an douar. An Eal a gomzas evellen outo :

« Soudarded Jezus-Krist, echu eo ar stourm ganeoc'h ; gounezet oc'h euz ar viktor var ar c'hik, var an diaoul, var ar bed milliget ; prest eo o kurunen. Ne jomoc'h muy pell en draonien a zaelou. Mez distroit da genta an eil hag egile ac'hanoc'h d'o kouent, c'hui, Paol, da Vaz, ha c'hui, Tanguy, d'ar Relek-Plouneour. Ac'hano e vezoc'h galvet abenn eun nebeut dervesiou da c'hloar an env. »

An Eal a nijas drant ha lijer etrezek an oabl, ha Paol ha Tanguy a zavas var ho zreid.

« Perag dale, eme Baol ? Kerzomp d'ar gear. Kenavo, va mab, kenavo en deisioù kenta. »

— « Kenavo er Barados, eme Danguy. »

Hag e zejont bep ini gant he end, eb sellet adre ; rag gouzout a reant ne vije ket ir an disparti.

Ar maner el leac'h m'o doa klevet kanaouennou ar sperejou éurus a voe hanvet Koat-Eles, ha chapel ar maner a voe hanvet Chapel-Paol. Ar japel

hag ar maner a yoa var an end da vont euz a Vrest d'ar Folgoat. Brema int kuezet enn ho foull, evel kals traou kaer all a zo bet e Leon enn amzer goz. Mez ar manerik a zo bet savet e plas ar maner kenta a vez great ato Koat-Eles anezan ; ar japel neves avad ne de muy galvet Chapel-Paol.

77

Maro sant Tanguy

Menac'h ar Relek-Plouneour a yoa laouen bras o tigememet ho abad santel ; mez ne voent ket kel laouen, pa lavaras dezo n'en doa muy pell da veva. An derc'hent e klanvas, ha goude beza lakeat urs enn oll eferiou he gouent, resevet he zakramanchou, ha roet, gant he vennos, a bep seurt aliou mad d'he relijiuzed, e tremenas d'an daouzek a viz meurs euz ar bloas c'hueac'h kant.

He gorf ne jomas ket er Relek ; kaset e voe gant eur zolanite ar vrasa da Lok-Maze-Traon. An oll er bro-

sesion, menac'h hag all, o doa bep a c'houlouen enn ho dourn, ha daoust ma zoa krenv an avel, goulouen ebet na varvas. Anterret e voe er vered a yoa bet benniget gant sant Paol guechall, ha var he vez an Aotrou Doue a reas eur maread miraklou.

Euz a gement korn a zo e Breiz, e tiredet eno da bardouna, hag ar bardounerien a gawe dezo beza dija var dreujou ar Barados. Meuleudiou Doue na eanent na noz na deis er gouent. Pa veze echu gant eur rum menac'h, eur rum all a groge raktal er c'hantikou. An iliz a yoa kaer, kaer al lidou, kaerroc'h c'hoas an eneou.

Petra eo deuet al leac'h santel-ze da veza? Siouas, diskaret eo bet enn amzer an dispac'h, ha ne jom ken nemet lod euz ar mogeriou. Er plas m'eo bet daoulinet ken alies an tadou koz, o pedi a greiz ho c'haloun hag o lenva gant an drugar, n'euz nemet geot, drez, spern ha gues goues. Al laboused mor a vez oc'h ober ho neiz, o c'hournijal, hag o leuskel youadennoù skiltrus enn dro d'an abati; mez ne glever ken mouesiou flour ar zent o pignad drant var zu tron an Oll-Challoudek.

Eun tour tan a zo bet dreset e mesk an atrejou. Merdeidi Leon, pa veloc'h tan an tour o lugerni enn denvalijen, o pe sonj euz a zant Tanguy. Hennes o tivoallo guelloc'h eget o stur diouz ar reyer treitour hag ar goagennou kounnaret.

78

Kel ar maro da zant Paol

An derves m'en doa rentet breur Eodet he ene d'he Zalver, sant Paol a rentas he ini. Var eun oa eat da Enes-Vaz, hag evel pa ne vije bet netra neves, ne jenchas seurt enn he zoareou. Perag en dije chenchet an Eskob santel, ha petra en dije great muyoc'h eget na rea?

Pa ziguezaz, e kreiz an noz, he venac'h a yoa er japel o kana Matinezou. D'ar Japel e zeas da gana ganto; ha goude Matinezou, ec'h en em denas evel m'oa boaz d'hen ober enn he lochennik, hag evel m'oa boaz ive, e c'hourvezas var he dammik planken da c'hortoz an eur merket evit Lodes, hag ec'h en roas a zrevi d'ar beden, herves he gustum.

N'oa na moritetlet na kousket, he spered a yoa diun mad, pa velas an env o tigeri, hag eun Eal guenn kan ha lugernus meurbed, o tiskenn enn he doul kramp :

« Paol, emezan, servicher kalounek da Zoue, me eo a zo en em ziskuezet did ha da Danguy enn Drenek ; mez deuet oun adarre da kaout, abers va C'hrouer ha da ini, evit merka did sklearoc'h deis da dremen van. Disul kenta e vezi kaset d'ar Barados. Bras eo dija al levenes e pales kaer ar Roue oll-c'halloudek. Ar zent hag an Eles a zo bodet asambles dirag tron an Dreinded ; tridal a reont gant ar joa, ha pa vezo ar mare, e teuint, e kreiz an dudiusa kanaouennou, da ziambrouk ac'hanot. Bez prest abenn disul ; ne vezo ket ir na poanius ar beach. »

En eur echui he c'her, an Eal a zispakas frank he ziouskel ruz-tan, ha ne reas nemet eun nijaden etrezek ar volz steredennet. Mez ar sklerijen en doa digaset ganta a jomas var he lerc'h, hag a jomas zo ken noz-deis epad tri derves, beteg ma laoskas Paol he uadad diveza.

Ar sklerijen-ze a yoa krenvoc'h eget

sklerijen ar goulou, krenvoc'h memes eget sklerijen an eol, eb ober drouk d'an daoulagad. Ne vouiet ket euz a beleac'h e teue, skignet oa ingal el lochen, ha ne velet skeud gant netra. Eur banna zifoupedre ar prennest, hag a lakea ar reyer, ar mor, ar gues, ar parkeyer da lintra dirazan, pell-pell diouz kostes Kastel.

79

Ofern diveza sant Paol

Pa zounas kloc'h Lodes, ar venac'h a zavas da vont d'ar japel. Mantret e voent da genta, mez buan ec'h anavezjont e zoa eur burzud.

« Ema on tad var he dremen van, emezo ; kerzomp da reseo he yennos. »

Mez Paol, kel laouen hag ar Spered-Santel, a lavaras :

« Va bugaligou, ne did ket d'en em jala re abred ; ne maoun ket c'hoas o vont diganeoc'h ; betek disul em euz kounje da jom var ar bek douar-ma. Arabad deoc'h gouskoude koll oc'h

amzer. Kasit kelou da Zetomerin, Eskob Kastel, ha d'ar veleyen, ha d'ar venac'h tro var dro; c'hoant am euz da velet ar muya ma ellin anezo. Ha brema, it d'ar japel da gana meuleudiou Doue; ne fell ket din e ve direnket netra er gouent abalamour din-me. An darn vrasa ac'hanoc'h a heulio ar reolen penn da benn evel aziagent, hag a yelo enn iliz hag e leac'h all dre ma zouno an eur da vont. Unan benag, daou pedri, ha divezatoc'h ouspenn, pa vezo diguezet kals menac'h ha beleyen estren, ac'houzanvin gant plijadur e kichen va guele. Ne garfen ket zo ken beza lezet va-unan, rag meur a dra am euz da lavaret; bep eil e teuoc'h d'am zelaou, hag e kountoc'h d'ar re all ar pezh o po klevet. »

Sentet e voe outan, ha ne jomas eno nemet eur guchennik relijiuzed.

« Laoskit ac'hanon da bedi, emezan neuze; ha c'hui, pedit ive disparti. »

Abenn diveur goude, e lavaras :

« D'ar mare-ma ec'h oferennan bemdes; lakeat am euz em spered oferenna irio c'hoas. Sikourit ac'hanon da zavel. »

Oferenna a reas gant eun devosion

ar birvidika, ha prestik e tistroas d'he lochen, ha ne loc'has ken ac'hano, nemet evit mont d'ar bez.

80

Aliou sant Paol

Etre daou, ec'h erruas Setomerin hag eur bobl euz a Gastel hag euz an tosta parresiou, beleyen, menac'h, tuchentil ha tud all. Paol a reas dezo eur brezegen gaer divar ar garantas, an humilite, ar basianted, an douster hag an oll vertuziou all :

« C'hui, tud a iliz, emezan, o pe trues ouz an danvadigou keis am euz bet kement a boan o tastum enn dro da Bastor bras an eneo. Beillit varno, kelennit anezo, gourdrouzit mar de red; ho divoallit mad diouz an drouk spered, ha n'ho laoskit ket da vont da goll.

» C'hui, tud ar c'houenchou, selaouit eur manac'h koz a zo abaoe kant vloas o servicha Doue er stad a vanac'h; rag, ma zoun Eskob, n'oun ket bet paouezet

eun derves da veva e giz eur manac'h. Ma oc'h euz c'hoant da veva èurus var an douar da c'hortoz beza èurus enn env, dalc'hit stard d'o reolen, sevenit an teir bromesa oc'h euz great, ha bezit ato chast, paour ha sentus ouz o superioired. Pleustrit var ar binijen, pleustrit var an oberou a drugares, pleustrit dreist oll var ar beden. Ar beden o lakai da gaout eas ar pezh a zeblando deoc'h beza dies da goumans.

» Ha c'hui, tud ar bed, va bugaligou keis, chomit stag ouz ar feiz gatolik; na laoskit ket an eretiked hag ar spe-rejou diboell da douella biken ac'hannoc'h. Her gouzout a rit, ô va Doue, me a gar bro Leon muyoc'h zo ken eget va bro genta; e Leon em euz tremenet pevar-ugent vloas; evit Leon em euz roet va nerz ha va yec'hed; evit Leon e kinnigan adarre va buez. Na bermetit ket, o va Zalver Jezus, e teufe morse Leon da drei kein d'an iliz ha d'ar groas santel. »

Kals traou all a lavaras an Eskob benniget, ha gant kement a galoun ho lavaras, ma tirolle an oll da lenva.

Sant Paul da Zetomerin

Ar zant a jomas da zonjal, hag abenn eur pennad e troas he zaoulagad var zu Setomerin :

« Va mab, emezan, ha guelloc'h c'hoas, va breur, ezom am euz da veza va-unan ganeoc'h. Pedit ar re-ma da vent kuit eur moument; arabad e ve test ebet. Mez bezit dizoursi, va bugale; an divizou ne badint ket pell etrezomp. »

An oll a redas d'ar japel da bedi Doue evit ho zad, nemet Setomerin, a c'hedas gant doujans ma pliche d'he vestr digeri ar gount. Pa voe goullo al lochen, sant Paul a en em glevas gant Setomerin divar meur a dra a zelle ouz an Eskopti, ha pa voe reglet an oll eferiou, e komzas evellen :

« Va mab, me oar, pa vezo nijet va ene d'ar Barados, e savo rendael etre Bazis ha Kastellis divar benn va c'horf. Kastellis a garan, Bazis a garan ive, ha ne ran fors goude tout, e pe leac'h

e vezo gorrennet va zamouigou eskern ; Doue ho c'havo da zeis ar rezureksion. Mez diskuezet eo bet din abers an Oll-C'halloudek, e tle dont kals tud hed an oajou da bardouna var va bez. Ma vezan laosket enn enezen, ne vezo ket eas d'ar bardounerien treuzi ar ganol. Alies an amzer a vez fall, ar mor fuloret, an avel yud hag eneb. Kasit ac'hanon eta da Gastel. Eno, va mab, e kreiz ar c'heur, dirag an aoter vras, el leac'h m'am euz sakret ac'hanoc'h, e fell din ober va c'houisk diveza. »

— « Ha ma vez trouz, eme Zetomerin, petra rin-me ? Breizis o deuz pennou kalet. Marteze, siouas, daoust ma zoun ho Eskob, ne vezin ket selaouet ganto var ar poent-ma. »

— « Da Zoue e rankint plega, eme Baol. Brema ec'h anavezit va mennos, travaolac'h eo. Mestr an env hag an douar a astenno he vreac'h. Na lezit den da ober he zonj he-unan, mez laoskit an traou var var, ha bolontes Doue en em ziskuezo. N'em euz netra ken da lavaret deoc'h disparti. Roit kounje d'am bugale all da zont dirazon ; ne gasin ket anezokuit ; ama ec'h ellint chom, keit a ma chomin va-unan. »

Ar zulves diveza

Dre ma zea ar c'helou er vro, Leonis a zirede a vandennajou da Vaz ; karget oa an iliz, karget ar gouent. Herves m'en doa kemennet Paol, e teuent bep eil, hag ar muya ma ellent asambles, da zaoulina enn he gichen. Ar zant a rea dezo prezegennou dudio ; ha pa veze skuis o parlant, unan euz ar veleyn a lenne krenv, da rei da entent d'an oll, pennajou enn Aviel skrivet guechall ha roet dezan gant ar c'hont Guitur. Neuze Paol a groge adarre enn he zarmouniou, ha diouz ar pezh a yoa bet lennet el leor, e tisplege komzou kaer var ar misteriou ha var oll deveriou eur c'hristen guirion.

Ar re a yoa ouz he zelaou a lavare :

« Morse n'on deuz klevet na gantan na gant den all ebet traou ken eslammus. »

Enn noz avad e chome sioul ; diun

e veze, mez he spered hag he galoun a bigne dre ners an orezoun beteg tron ar Dreinded.

Ar zul a c'houlaouas, hag evel pa vije bet gouel enn oabl, an eol a zispakas euz ar more kreiz eur guiskad aour ha goabrennou marellet. Siouas ! n'oa ket kel laouen ar bijasou. Paol a c'houlennas mintin mad he zakramanchou diveza, ha Setomerin ho c'hasas dezan. Reseo a reas he Zoue, reseo a reas an Nouen, hag hen heunan a respounte d'an oll bedennou.

Goude beza tregarekeat an Aotrou da veza en em roet dezan er gomunion, e savas he voues da lavaret :

« Va bugaligou, e ma tost an eur ! Ar pez am euz karet a velan, ar pez am euz c'hoanteat gante eun youl ar birvidika a zo dirag va daoulagad. Digor eo dor ar Barados ; setu an Eles hag ar zent o tont, ho Roue ganto ; mall am euz d'ho briata, mall a ziskuezont kaout ive. »

An oll a laoskas eur griaden a c'hlaç'har :

« Chomit c'hoas ganeomp, va zad, emezo ; chomit ganeomp enn han Doue. Petra deuimp da veza, pa vezoc'h eat kuit ? »

— « Na did ket da ober kement a c'houelvan, eme Baol. Ne vezoc'h ket evel emzivaded var an douar. Eur Pastor euz ar re vella a laoskan ganeoc'h, va mab muya karet, Setomerin, ha ganta kals beleven all ha menac'h, ken vertuzus ha guiziek, guest d'oc'h encha etrezek ar zilvidiges. »

83

Sant Goulc'hen e Baz

Abenn eur poulzad berr e lavaras :

« Ne ma ket Goulc'hen aze ? Goulc'hen, emezan adarre, ermit Plouider. »

— « Eo, Goulc'hen a zo ama, emezo. »

Ar C'houlc'hen-ma eo sant Goulc'hen, ganet e parres Plouider. He dad hag he vamm a yoa paour, mez tud a zoujans Doue oant. Paeroun Goulc'hen, he hano Godian, eveza m'oa pinvidik ha n'en doa ket a vugale, a gemeras he fillor enn he di, ha divezatoc'h e kasas anezan er brasa skolachou.

Goulc'hen a deuas da veza abil e berr amzer, mez muyoc'h c'hoas oa troet d'ar beden eget d'ar studi. Godian a zonje ober he eritour anezan; enn despet da ze, an den yaouank en em dennas enn eur c'horn euz a barres Plouider, e toues an drez hag ar spern, e kreiz eur c'hoat a yoa e kichen ar mor. Er plas distro-ze e savas eun Orator, hag a zo hanvet c'hoas irio ar Peniti, da lavaret eo, ti ar bini-jen. Eur veach bemdes e rea eur bourmenadennik er c'hoat, hag e chome pell da vedita bep tro dirag teir Groas en doa plantet ama hag aount.

Eno e veve kentoc'h egiz eun Eal eget egiz eun den. He oll amzer a dremene o pedi, o lenn ar Skritur sakr, hag o kana meuleudiou an Aotrou Doue. Ne rea nemet eur pred bemdes, ha d'ar pred-ma ne zrebe nemet bara ha louzeyer bian. Ar vrud euz he zanteles a lakea dija an dud da ziredet a bep tu evit goulen kuzul digantan, pe en em erbedi d'he bedennou.

Kerkent a m'en doa klevet oa prest sant Paol da vervel, oa deuet evel ar

re all da Vaz, hag e lochen ar zant ec'h en em gave, pa c'houlennas Paol ar pezh on deuz merket uelloc'h.

84

**Sant Paol o prederi divar an amzer
da zont**

Paol neuze a gomzas evellen, gant kement a asurans ha p'en dije lennet e leor eur profet benag, ha gullet diraz an traou da zont :

« Va bugale, Setomerin ne jomo ket ato ganeoc'h, ha marteze e tisac'h he goll kentoc'h eget na zonjit. Mez bezit dizoursi; Doue n'o tilezo ket; setu ama eur zant hag a vezo diouz o toare. He-ma eo a beurechuo va labour em Eskopti. »

Ar pezh a deuas da vir. Setomerin a varvas eiz vloas goude, ha Goulc'hen a voe choazet enn he blas. Kaer en devoe Goulc'hen mont da guzet, ha tec'het zo ken beteg Roum var zigares seveni eur veu en doa great, eno e voe paket, hag ar Pab her sakras he-

unan, hag a reas dezan distrei da Leon.

Paol a gendalc'has da brederi ar pezh a dlïe c'hoarvezout :

« Ezom o po, va bugale, emezan, da gaout Eskibien kalounek ; amzeriou spountus a zavo varnoc'h. Klevet oc'h euz gant o tadou koz an distruj en deuz great Korsold er vro-ma. Goasoc'h eget Korsold a vezo. Bandennajou tud goues a deuyo euz an anternoz, hag a zevo, hag a lazo, hag a zismantro kement vad enn dro deoc'h. Var an enezen-ma dreist oll e kuezho c'hounnar. Mez, o pe sonj, pa vezo brezel, pe naouneges, pe glenvejou, pe eun darvoud bras all benag, an aluzen hag ar beden a lakayo an drouk da bellad diouzoc'h. »

Goude eun tammik ean e lavaras c'hoas :

« Va bugaligou, n'em euz netra ken. Kenavo, va bugaligou, kenavo ! Grit bepred ar pezh am euz prezeget deoc'h, ar pezh oc'h euz gullet a'hanon oc'h ober. Lakit va c'henteliou doun enn o spered, heullit anezo, deskit anezo an eil d'egile ; evidon-me, em euz desket deoc'h kement am boa da zeski. Echu eo va derves, e ma deuet ar bae. »

An oll a zirollas goasoc'h goas da lenva, ha Paol a lavaras :

« Perag, bugaligou, kaout avi ouz va eurusted ? Ha perag miret ouzin da vont etrezek va bro ? Me a zo skuis, va bugaligou, me a zo skuis maro. Ir eo bet va beach, laoskit ac'hanon da ober ar c'hammed diveza. Stouit o penn, ma vezoc'h benniget eur vech c'hoas gant oc'h Eskob koz. »

Kerkent e tistagas gant eur voues drant ha krenv ar gerioù-ma :

« Ra ziskenno varnoc'h hag o tud, beunos an Tad, ar Mab hag ar Spered-Santel, ha ma chomo da viken ! »

N'o doa ket bet amzer da respount Evelse bezet great, ha da ober sin ar Groas, ma oa eat ho Pastor diganto. Eur zell a garantas en doa taolet var he Grusifi, digoret ha serret en doa he zaoulagad, lezet en doa he zourn da guezha, eur mousc'hoars dudius a

yoa bet evel o nijal enn dro d'he zrem, hag eb finval na leuskel uanaden ebet, oa tremenet enn eun taol.

Ne gredient ket oa maro. « Kousket eo, a lavarent; bremaik e tiuno. » Hag e choment eno da lenva ha da bedi. Abars ar fin gouskoude, e rankjont anzañ n'oa mui dirazo nemet ar relegou.

Kaset e voent gant doujans enn iliz ar gouent, hag epad eiz derves ma voent dalc'hed var ar volz-kaon, ne velet nemet bagou o tont hag o vont etre Baz ha Rosko. Euz a gement korn a zo e Leon, euz a Dreger, euz a Gerne, e teue bep moument banden-najou pardounerien, paour ha pinvidik, da skulia mesk ha mesk dour benniget, daelou ha pedennou var ar c'horf santel. Oll o doa c'hoant d'her guelet, oll o doa c'hoant da douch outan, hag ar japel ne c'houloundere ket.

Abenn an eizvet derves, kanet an anterramant hag echu an oll lidou, Setomerin, an ini en doa oferennet, a roas urs da vont enn end; kemennet en doa prepar enn avans var bord an aod eur vag diouz Pempoul. Mez ker-kent Bazis a ziredas, kouls menac'h ar gouent evel tud an enezen :

« Da beleac'h e zit, Aotrou'n Eskob, emezo ? »

— « Da Gastel, eme Zetomerin; da Gastel en deuz goulennet mont, ha da Gastel e yelo. »

— « Ne yelo ket, eme Vazis; enn on toues eo deuet da vervel, hag enn on toues e chomo. »

— « Ganeomp e teuyo, eme Gastellis, kousto pe gousto. »

— « Peoc'h! eme Zetomerin; n'o peuz ket mez oc'h ober kement a drouz enn iliz? Deomp da viana er meas d'en em glevet, hag eno e vezo guelet. »

86

Etre Bazis ha Kastellis

An oll a zentas; mez raktal e savas etrezo eur rendael skrijus.

Kastellis a lavare :

« Kaer o po trei ha distrei o komzou, on Eskob eo; mar doamp dezan, hen a yoa deomp, ha goas a ze d'an ini a glasko hen tenna diganeomp. »

Ha Bazis a respounte :

« Mar doa deoc'h, perag n'oc'h euz ket dalc'het anezan? Ama eo deuet da echui he amzer; anat eo en deuz troet kein deoc'h, ha great fae var Gastel. »

— « Mar deo eat da Vaz da beurechui he amzer, eme Gastellis, e pe leac'h eo en deuz tremenet he vuez? E pe leac'h en deuz sakret ken alies a veleyen? E pe leac'h en deuz pareet kement a dud klanv, tud dall, tud kam, tud bouzar ha reuzeudik e peb fesoun? »

— « E pe leac'h, eme Vazis, en deuz great he vrasa burzud? Ne ket ama en deuz diarbennet ar zarpant, ha taolet anezan er mor? »

— « Ia, eme Gastellis, ama eo ive en deuz digaset daou zragoun ar Faou. Ama e ma toul ar zarpanted, mez ne ma ket plas eur zant evel-dan. »

— « Dalc'hit, eme Vazis, he ornamanchou, he gloc'h hag he Aviel, ha kement a jom c'hoas var he lerc'h, ma chom eun dra benag all, ha laoskit he gorf ganeomp. »

— « Dalc'hit, eme Gastellis, o sarpanted hag o tragouned, hag ar pez a blijjo deoc'h, nemet he relegou. Perag

debati? Hed ar veach en deuz diskuezet kaout c'hoant da veza anterret e Kastel. Ne deoc'h ket, emichans, a eneb he volontes? »

— « Ne ket guir, eme Vazis. Sklearoc'h c'hoas en deuz diskuezet, eo e Baz e felle dezan beza. Perag, p'eo eat d'an Drenek eun nebeut dervesiou araog he varo, n'eo ket chomet e Kastel enn dizro? »

— « An dra-ze ne ra ket, eme Gastellis. Da Vaz eo eat evit ober plijadur deoc'h, hag evit m'o pije ar guel diveza anezan, pa n'ellac'h ket kaout he gorf. Enn iliz e Kastel, dirag an aoter, en deuz merket he blas. »

— « Geyer, geyer tout, eme Vazis; epad ma vezo eun den beo enn enezen, ne dayo ket er meas. »

« Divoallit, eme Gastellis, da barlant re uel, gant aoun e safe keuz ganeoc'h. »

87

Klaostre Setomerin

Edont o vont d'en em ganna, pa lavaras Setomerin :

« Selaouit o Pastor, va bugale keis ; selaouit an ini a zo bet sakret gant Paol he-unan, ha lakeat e penn an Eskopti. Peguir n'ouc'h ket evit en em glevet, kemerit Doue da varner etrezoc'h. Setu ama ar pezh am euz sonjet. Ober daou gar neves. staga daou ejen ouz bep kar, renka ar c'hirri kein ouz kein e kreiz etre ar gouent hag ar mor, trei unan anezo diouz kostes Kastel hag egile diouz kostes ar gouent, lakad an arched a bloum enn daou gar, kement ha kement e peb ini, ha leuskel an ejennet da vale. Mar da an arched gant kar Kastel, e vezo da Gastel ; ha mar da etrezek ar gouent, e vezo da Vaz. »

Ar c'hlaostre en doa kinniget Setomerin a voe kavet mad gant an oll. Bazis a zonje evellen :

« Ha pa yafe an arched da eul kar Kastel, morse an ejennet ne gredint treuzi ar mor, hag e teuint var o c'hiz d'ar gouent, hag e vezo rendael adarre, ha n'euz fors penaos e chomo ar c'horf ganeomp. »

Kastellis avad o doa fizianse Doue, e sant Paol hag enn ho Eskob, hag a lavare etrezo :

« Setomerin a zo bet eur pennad mad o kaozeal he-unan gant an Aotrou sant Paol benniget, ha kazi sur e zeuz bet kount ganto euz al leac'h ma tlie beza toullet ar bez. N'oc'h euz ket remerket, emezo an eil d'egile, n'oa tam nec'het Setomerin oc'h ober he varc'had ? Kounta a ra var eur burzud, ha ni a ell kounta ive. Bezomp laouen ha dizoursi. Traou kaer a velimp. Ha goude tout, bolontes Doue bezet great ! »

Feiz birvidik an dud euz a Gastel ne zaleas ket da veza paet mad.

88

Petra a c'hoarvezas ?

Pa voe prest ar c'hirri, ha dreset kempenn ha koumpes an arched enno, an ejennet a ziblasas asambles. Bazis a vele kar Kastel goullou, hag an arched enn ho ini. Kastellis a vele kountrol. An eil rum hag egile a gerzas laouen, bep ini gant he gar, en eur gana kantikou.

Setu diguezet kar Baz er gouent. Pa zejont da gregi enn arched, e voent estounet maro o kaout anezan ker skanv. Hag hi digeri an arched : Siouas ! n'oa netra ennan, nemet eur stol. Bazis a jomas mantret. Abenn eur pennad, e savjont ho daoulagad da zellet : kar Kastel a yoa dija e kreiz an aod, enn tu all d'ar ganol, anter an end etre Rosko hag an enezen.

An dra-ma a yoa var dro kreisteiz, d'an unan var 'n ugent a viz meurs. Er mare-ze euz ar bloas hag euz an deis, e vez tre bras gant ar mor, ha ken izel e tisken avechou, ma eller treuzi eb rankout neun na kaout bag. Me va-unan a anavez tud hag a zo beo, hag o deuz treuzet dizamant. An treiz avad ne vez libr kouls lavaret nemet epad eur moument, ha kerkent a ma vez bet libr an treiz, e teu adarre ar morgant kement a err enn he lano, ma vez beuzet an aod enn eun taol kount.

Setu ar pezh a c'hoarvezas. Pa zire-das Bazis d'ar c'haloup ruz, ar mor a yoa dija en em ledet tro var dro, kar Kastel a velet var an douar kalet e Rosko, hag an avel a gase beteg an

env mouesiou drant ar C'hastellis o trugarekâd Doue hag ouz he veuli.

Nul oa klask mont var ho lerc'h ; abars ma vije bet lakeat ar bagou var flod, savet ar voueliou ha treuzet ar ganol, ar c'horf santel a erruje a dra zur e Kastel. Kerkouls bolontes an Oll-C'halloudek a yoa sklear d'an oll, ha Bazis n'o d'oa nemet plega da ober.

89

**Sant Paol enoret evel eur zant e meur
a leac'h**

Eas eo koumpren pebes cholori a voe great e Kastel, pa ziguezas ar relegou benniget. Goude an Ofiz, e voent anterret gant eur zolanite vras e keur an iliz, dirag an aoter, el leac'h ma ma c'hoas ar mean bez. Ar pen-nou kenta a yeas neuze da gaout Setomerin, hag a lavaras dezan :

Aotrou 'n Eskob, emezo, pe guir eo falvezet d'on tad muya karet dont da jom enn on toues, e rankomp diskues on anaoudegas vad. Aviziken, mar plij ganeoc'h, ar gear-ma, a reer Kas-

tel anizi, a vezo hanvet Kastel-Paol. Da Baol eo, ha da Baol e vezo, ha Paol, red esperout, a zello a drues outi hed an oll oajou. »

Setomerin a roas he asant, hag abaoue e vez great Kastel-Paol euz a Gastel, ha Saint-Pôl-de-Léon e gallek.

Eur maread miraklou a c'hoarvezas raktal var bez ar zant. Setu perag sant Goulc'hen, a yoa bet lakeat da eskob e Kastel goude maro Setomerin, a reas toulla an douar, ha tenna kuit ar relegou. Ar re-ma a voe dastumet piz enn eun arched prisius, ha gorrennet enn eur plas a enor gant ar relegou all a yoa dija en iliz-veur. Azalek neuze e koumansas gouel sant Paol da veza lidet, ne ket ebken enn Eskopti Leon, mez enn oll Eskoptiou euz a Vreiz.

Pa zirollas er vro an amzeriou spountus en doa prederet ar zant, da lavaret eo, pa deuas dious kostes an anternos bandennajou tud goues ha payan da ziskar bep tra eb espern na sakr na dizakr, relegou sant Paol ne guesjont ket etre ho daouarn, ha miret oant c'hoas gant kals a respët e Kastel, e fin an navet kanved.

Var dro ar mare-ma, Liberal, Eskob Leon, a rannas sae vanac'h ar zant etre abati sant Jermen hag abati sant Magloar e Paris.

Sant Magloar, evel a ouzomp, a yoa bet Eskob e Dol ha mignoun da zant Paol e skol sant Ildud ; sant Jermen en doa sikouret Breizis a eneb Pelaj an eretik ; ha me gav din eo abalamour da ze, hag evit diskues he zevosion da zant Jermen ha da zant Magloar, en doa Liberal roet ar zae d'an daou abati.

N'oar den irio petra eo deuet ar zae da veza ; mez ar pezh a zo sur, da heul ar zae, brud ar zant a yeas beteg Paris, hag he c'houel a voe great eno keit a ma chomas ar relijiuzed er c'houdenhou.

Triugent vloas benag goude Liberal, edo c'hoas an eskern, oll hag a bez, e Kastel E kreiz an dekvat kanved, an Eskob Mabbon a gasas an

darn vuya anezo e Fleury-sur-Loire, el leac'h m'edo dija korf sant Beneat, hag a c'houdevez, menac'h Fleury a reas bep ploas gouel or patron-ni, gant kement a zolanite, pe dost, ha gouel sant Beneat, ho fatron honan. Er bloas 1562, ar Brotestanted a zegas relegou sant Paol, ar re a yoa e Fleury. Brema e velit, Leonis, pe seurt doare tud eo ar Brotestanted; emichans, ne deoc'h ket da Brotestanted, goude m'o deuz ar Brotestanted great d'eoc'h ha d'oc'h Eskob eun taol ken divalo.

Lod euz an eskern benniget a voe kaset ive da Zant-Jermen ha da Zant-Magloar e Paris, lod all da Zant-Floranz e kichen Saumur, lod all da Bontlevoy; kollet int bet, ha distrujet mervad, en amzer an Dispac'h bras. Guelet a rit c'hoas, Leonis, petra oc'h euz da c'hedal digant an dispac'herien. Azalek ar moument kenta beteg m'eo deuet an dispac'herien da ober ho reuz, gouel sant Paol a veze fidet e Sant-Florans hag e Pontlevoy, evel ma zoa dija e Sant-Jermen hag e Sant-Magloar.

Ha ni, ken etrezomp Kastellis,

daoust ha n'on deuz dalc'het netra euz a gorf santel on Eskob koz? Salokras hag a drugare Doue, dalc'het on deuz relegou kaer. An Eskob Mabbon a laoskas ganeomp pennsant Paol, eun askourn euz he vreae'h, hag eur biz a bez. E Kastel int chomet, e Kastel e maint, ha ne daint morse, red esperout, er meas a Gastel.

Pa voe serret an ilizou brema e zeuz kant vloas, pa voe devet ar zent hag ar C'hroasiou gant paotred Robespierre, pa voe harluet, prizouniet ha dibennet ar velezen hag eur maread kristenien leal, an dud fidel a guzas ar relegou-ma er riskl euz ho buez; goude an Dispac'h, e voent digaset enn dro d'an iliz.

Douget e vezont bep ploas e prosession; ha bep ploas, dre aket an Aotrou Persoun a zo brema ganeomp e Kastel, an Aotrou Messenger, e vez great ganto prosesionou kae-roc'h kaera, dreist oll da gever sul kenta mis Mae.

E poent all, ec'h eller mont d'ho enori ha da boket dezo enn iliz-veur; ha guest int, evel a ziagent, da ober

miraklou bras, m'on dije feiz birvidik on Tadou. Ra zivoallint da viana kear Gastel hag ar barres, ha bro Leon het-a hed, diouz bep drouk ha fallagries!

Evelse bezet great!



TAOLEN

	Pajen.
1. Peden ar skrivanier da zant Paol	5
2. Bugaleach sant Paol.....	8
3. Sant Paol e skol sant Ildud	10
4. Kamaladed sant Paol.....	12
5. Pe seurt skol a rea sant Ildud?— Sant Samson o parea eur c'hrouadur flemmet.....	15
6. Ar mor o vont var adre.....	17
7. Al laboused laer. — Burzud kenta sant Paol... ..	20
8. Al laboused laer laosket da nijal kuit.....	22
9. Sant Paol o sonjal mont da ermit	25
10. Kenteliou sant Ildud.....	28
11. Sant Paol o kimiada diouz sant Ildud.....	30
12. Sant Paol enn he ermitach.....	32
13. Sant Paol beleget.....	34
14. Sant Paol o prezeg an Aviel e rouanteles Mark.....	36
15. Sant Paol goulennet da eskob gant ar roue Mark.....	38
16. Eun Eal a lavar da Baol mont enn eur vro dianavezet gantan.....	40
17. Ar roue Mark a zinac'h eur c'hloc'h da zant Paol.....	43

	Pajen.
18. Sant Paol oc'h en em gaout gant he c'hoar Sikofolla.....	45
19. Peden Sikofolla d'he breur.....	48
20. Ar mor sparlet gant sant Paol...	50
21. Pieu a yoa gant sant Paol?.....	52
22. Sant Paol enn Eusa.....	55
23. Sant Paol e Gueled-Leon.....	57
24. Sant Paol e Lambaol-Guitirmeze	59
25. Sant Paol hag ar c'holle goues..	61
26. Mirakl ar Groanek.....	62
27. Sant Paol enn end da vont da Gastel.....	64
28. Petra oa Kastel d'an ampoent?.	66
29. Spountaliou Kastel.....	68
30. Miraklou sant Paol etre Kastel ha Rosko.....	71
31. Miraklou all. — Sant Paol e Baz.	73
32. Kloc'h ar roue Mark.....	76
33. Kloc'hik sant Paol e Kastel.....	78
34. Sarpant Baz.....	80
35. Sant Paol ha Kergour.....	83
36. Ar zarpant stlapet er mor.....	85
37. Petra reas Guitur da Kergour?..	88
38. Pe seurt anaoudegas en devoe Guitur da zant Paol?.....	90
39. Reolen Kouent sant Paol e Baz..	92
40. Ar bobl o klask kaout sant Paol. da eskob.....	95
41. Sant Paol kaset da Baris var eun digares.....	97
42. Petra oa zant Jaoua?.....	99
43. Sant Paol hag an daou roue....	102

	Pajen.
44. Sant Paol, Eskob enn despet dezan.....	104
45. Sant Paol ha sant Guevrok....	107
46. Chapel Kreisker.....	109
47. Labourou abostolik sant Paol...	111
48. Skoliou ha kouenchou savet gant sant Paol.....	113
49. Ar reuz e Kerne.....	116
50. Sant Paol er Faou.....	118
51. Dragoun ar Faou.....	120
52. Dragoun ar Faou kaset da Vaz..	122
53. Sant Herve e Kastel.....	124
54. Sant Paol e Mene-Bre.....	126
55. Miraklou sant Herve.....	128
56. Divizou ar zent.....	130
57. Sant Magloar ha sant Tugdual..	133
58. Sant Herve ha sant Paol douget a spered en env.....	136
59. Sant Tanguy e Kastel.....	138
60. Buez sant Tanguy.....	140
61. Santes Eodet.....	142
62. Pinijen sant Tanguy.....	144
63. Kouent ar Relek e Plouneour- Menes.....	147
64. Kouent Sant-Vaze-Konk.....	149
65. Relegou sant Vaze.	150
66. Sant Paol o vennigen kouent Sant-Vaze.....	152
67. Sant Jaoua lakeat da Eskob gant sant Paol.....	154
68. Maro sant Jaoua	156
69. Tiernomael lakeat da Eskob....	158

	Pajen.
70. Maro sant Herve.....	160
71. Setomerin lakeat da Eskob....	163
72. Ar roue Juduval e Kastel.....	165
73. Sant Paol e Baz....	167
74. Sant Paol enn end da vont da gaout sant Tanguy.....	169
75. Divizou sant Paol ha sant Tanguy	171
76. Petra a dremenat enn Drenek?..	173
77. Maro sant Tanguy.....	175
78. Kel ar maro da zant Paol	177
79. Ofenn diveza sant Paol.....	179
80. Aliou sant Paol.....	181
81. Sant Paol da Zetomerin.....	183
82. Ar zulfes diveza.....	185
83. Sant Goulc'hen e Baz.....	187
84. Sant Paol o prederi divar an am- zer da zont.....	189
85. An tremenvan.....	191
86. Etre Bazis ha Kastellis.....	193
87. Klaostre Setomerin.....	195
88. Petra a c'hoarvezas	197
89. Sant Paol enoret evel eur zant e meur a leac'h	199
90. Relegou sant Paol.....	201

